




**DIAGNOSTIK  
STAD AR BREZHONEG  
E BRO VREST  
DOARE NEVEZET 2004-2008**

**ARSELLVA AR BREZHONEG  
2008**

# Digoradur

*Ur steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg, Brezhoneg 2015, a oa bet savet gant an Ofis e 2003. Diazezet e oa war stad wirion ar yezh a-benn ober kinnigoù uhelek met fetis evit suraat he dazont. Kement ha kinnig ur steuñv pleustrek da vat e oa bet divizet e zisplegañ dre vro<sup>1</sup>, anezhi ur vent dereat evit tostaat ouzh gwirvoud an dachenn.*

*Daou deul a oa bet savet evit pep hini eus an 29 bro zo e Breizh : un diagnostik ha palioù diorren. Kavout a ra deomp eo deuet ar mare da nevezin ar studiadennoù bet savet neuze ha d'ober bilañs an emdroadurioù deuet abaoe. Ra sikouro an diagnostikoù nevez-mañ, savet diwar an holl ditouroù hon eus dastumet hag e darempred gant oberourien pep tachenn, da sevel ur politikerezh yezh efedus.*



*Lena Louarn,  
Prezidantez Ofis ar Brezhoneg*

---

<sup>1</sup> Diwar ur genstagded douaroniel, armerzhel, sokial ha/pe sevenadurel eo treset ar broioù bet termenet gant al lezenn “Voynet” e 1999. Ar broioù-se eo ar re a implijer er steuñv-mañ.

# Taolenn


Plegenn bro Vrest .....	4
Sifroù pennañ bro Vrest .....	5
Dibarderioù bro Vrest.....	6
Brezhonegerien bro Vrest.....	6
Ar brezhoneg en deskadurezh .....	7
Kelenn er skol .....	8
Kelenn divyezhek .....	8
➤ Dasparzh ar c'hinnig .....	8
➤ Poblañs deskidi ar c'helenn divyezhek.....	10
➤ Stadegoù ar c'helenn divyezhek.....	16
Kelenn brezhoneg .....	20
➤ An tañva d'ar brezhoneg er c'hentañ derez .....	20
➤ Ar c'helenn brezhoneg en eil derez.....	24
An deskadurezh uhel .....	27
Skol-veur Breizh-Izel .....	27
CFP Brest .....	29
Ar c'helenn d'an oadourien.....	30
Kentelioù noz .....	31
Stajoù .....	32
Klozadur ar pennad .....	34
war ar brezhoneg en deskadurezh.....	34
Stad ar brezhoneg er vuhez foran.....	36
Politikerezh yezh an departamant.....	37
Penaos e kemer an departamant ar brezhoneg e kont.....	37
Ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg gant an departamant.....	37
Kevrat bro Vrest .....	39
Oberoù ar strollegezhioù lec'hel.....	40
<i>Ya d'ar brezhoneg</i> .....	41
Klozadur ar pennad war preder ar bed foran .....	43
Treuzkas ar yezh .....	44
Servijoù d'an dud .....	45
Dudi .....	48
Klozadur ar pennad war an dudi.....	52
Buhez speredel .....	53
An oferennoù .....	54
Ar c'hatekiz.....	54
An embann .....	54
Ar mediaoù.....	55
Er skinwel.....	55
Er skingomz .....	56
Marc'had al labour e brezhoneg .....	59
An armerzh.....	60
Klozadur ar pennad war an ober gant ar brezhoneg er gevredigezh keodedel.....	63
Klozadur.....	64
Stagadennoù .....	70
Levrlennadur .....	75
Mammennoù.....	75

# Plegenn bro Vrest

Kinnig bro Vrest - 2008




## Kinnig an etrekumunelezh e bro Vrest - 2008



## Sifroù pennañ bro Vrest

Niver a gumunioù	89 (90 ma konter Eusa a zo er-maez eus ar vro)
Poblañs hollek e 2005	372 945
Emdroadur ar poblañs etre 1999 ha 2005	-0,5%
Gorread	1 678 km <sup>2</sup>
Stankted ar poblañs	222 ann./km <sup>2</sup>

## Emdroadur poblañs kumunioù bro Vrest etre 1990 ha 1999



## Dibarderioù bro Vrest

E-touez broioù pobletañ Breizh emañ bro Vrest (goude bro Roazhon ha bro Naoned). Ur vro gêrel eo dreist-holl gant kêr Vrest a ya d'ober he fol pennañ ha pa ne vefe ket goloet ar vro penn-da-benn gant he zachennad levezon. Estreget Brest ez eus kumunioù all, dezho ul levezon vihanoc'h war o zrowardroioù, evel Landerne pe Lesneven.

Pourvezet mat eo bro Vrest gant an holl vodoù treuzdougen ha pa vefe lec'hiet e beg gourenez Breizh. Bro an arvor eo bro Vrest ; gant se eo kreñv enni an obererezhioù a denn d'ar pesketaerezh aod ha d'an touristerezh. Ur pouez dreist zo gant an trede gennad er vro-mañ (tost an div drederenn eus an implijoù) : **douget eo hec'h armerzh gant ar servijoù hag ar greanterezh.**

Da-heul ur c'hresk bihan etre 1990 ha 1999 (+3,1%) eo chomet kentoc'h stabil poblañs bro Vrest etre 1999 ha 2005 (-0,5% hervez brasjedadenn an EBSSA : **digresket eo poblañs ar gêr greiz** dreist-holl tra m'eo aet niver an dud **war greskiñ er c'humunioù dindan 10 000 annezad**). **Yaouank a-walc'h** eo ar boblañs e-keñver peurrest Breizh avat (gant bro Vrest emañ unan eus feurioù izelañ ar re en tu all da 60 vloaz er boblañs e rannvro Breizh).

Hervez brasjedadennoù senario uhel an imbourc'herezh bet savet gant an EBSSA e c'hellfe bezañ **war-dro 410 000 annezad e bro Vrest e 2015** (+10% e-keñver 2005) ha 445 000 annezad e 2030 (+19% e-keñver 2005), ar pezh a glotfe gant kresk keitat rannvro Breizh.

## Brezhonegerien bro Vrest


Da-geñver niveradeg 1999 en doa savet an EBSSA un enklask anvet *Étude de l'histoire familiale*. En enklask-se e oa goulennoù a denne d'an ober gant ar yezhoù er gêr ha drezo e oa bet dastumet roadennoù a c'haller fiziout enno diwar-benn an niver a vrezhonegerien deuet d'o oad gour dre zepartamant. Kadarnaet eo gant ar roadennoù-se ez a war goshaat poblañs yezherien kornôg Breizh (ha hini bro Vrest neuze).

Diwar ar sifroù-se, diwar sifroù ar c'helenn divyezhek ha diouzh dibarderioù pep bro ez eus tu da sevel brasjedadennoù war an niver a yezherien e pep takad. E-se e c'hellomp lakaat e oa **etre 50 000 ha 55 000 brezhoneger o chom e bro Vrest e 1999**, da lavaret eo war-dro **14,5%** eus poblañs ar vro (pa save feur Breizh da 6,7%).

Da-heul e c'hellomp brasjediñ ivez **e vefe etre 40 000 ha 45 000 yezher e bro Vrest e 2008**, da lavaret eo war-dro **11,5%** eus poblañs ar vro (pa savfe feur Breizh da 5% dre-vras). **Tremen 10 000 yezher a vefe aet d'an anaon** e bro Vrest etre 1999 ha 2008 **tra ma n'eus nemet 1 221 deskard ouzhpenn** er skolioù divyezhek. Gant ar geñveriadenn-se, **ment feur adneveziñ poblañs brezhonegerien bro Vrest a vefe tro-dro da 1 evit 10**, da lavaret eo e stummer ur brezhoneger nevez evit dek a ya d'an anaon.

# Ar brezhoneg en deskadurezh

Kartenn hollek ar c'hinnig kelenn brezhoneg hag e brezhoneg e bro Vrest – Bloavezh-skol 2007/2008



E 38 kumun eus bro Vrest e kaver da nebeutañ un doare bennak da zeskiñ pe da gaout un tañva d'ar brezhoneg. Tremen div gumun diwar bemp ez eont d'ober ha tost un hanter eus ar re ma c'heller skoliata ar vugale zoken.

E 77 eus an 90 kumun a ya d'ober ar vro e c'heller skoliata ar vugale. 22 anezho a ginnig ar c'helenn divyezhek (5 ouzhpenn e-keñver 2004). A-hend-all ez eus un tañva d'ar yezh e 24 c'humun, a-drugarez d'an departamant, ha kentelioù brezhoneg en eil derez e 10 kumun. **Chom a ra c'hoazh 46 kumun, enno ur skol da nebeutañ, ma n'hall ket ar vugale deskiñ brezhoneg e mod ebet.**

E 2007/2008, tremen **8 000 skoliad eus ar vro**<sup>2</sup> a heuilh kentelioù brezhoneg pe e brezhoneg eus ar skol-vamm d'al lise. Mont a reont d'ober tost da 11% eus ar boblañs-skol (da 9% e save ar feur-se e 2003/2004). Er c'hentañ derez hepken ez eont d'ober **tost da 14% eus**

<sup>2</sup> 2652 en hentadoù divyezhek, etre 3400 ha 3800 kizidikaet gant an tañva er c'hentañ derez ha 916 skoliad gant kentelioù yezh en eil derez.



**an niver a skolidi.** Ur feur kalonekaus eo kentoc'h met n'eo ket ken uhel-se e-skoaz an 30% a yezherien er remziadoù yaouankañ a zo ret, hervez an UNESCO, evit ma c'hellfe ur yezh treuzvevañ. Un darn vat eus ar 14%-se n'o devez nemet un tañva d'ar yezh ouzhpenn, n'eo ket a-walc'h evit ober brezhonegerien anezho.


Estregeto e konter **tremen 1 000 den deuet** a zesk brezhoneg en un doare bennak (tremen 1300 e oant e 2003) : en deskadurezh uhel (169 studier), dre gentelioù noz (625 deskard) pe dre stajoù (war-dro 230 den).

## Kelenn er skol

### Kelenn divyezhek

#### ➤ Dasparzh ar c'hinnig

*Kinnig kelenn divyezhek er c'hentañ derez e bro Vrest – Distro-skol 2007*



***E Breizh ez eo e bro Vrest emañ ar rouedad skolioù divyezhek en he stankañ. Tost e pep lec'h er vro emeur dindan 10 km hed eus ur skol divyezhek (ur vent ha ne dalvez ket ar memes tra p'emeur o chom e kêr). Stank a-walc'h e oa ar rouedad-se e 2003/2004 gant 15 kumun met war stankaat eo aet c'hoazh gant 5 kumun ouzhpenn en ur ober pevar bloaz. K.K. Bro an Hirwazh eo a zo gounit ganti dreist-holl (gant Milizag, Plouarzhel ha Plougonvelen), K.K. Bro Landerne-Daoulaz a zeu da eil (Daoulaz ha Loperch'ed).***



E bro Vrest e oa bet digoret ar skol divyezhek kentañ e Breizh : skol Diwan Gwitalmeze e 1977. An deskadurezh publik he deus klokaet ar c'hinnig er vro unnek vloaz war-lerc'h, e 1988, gant ur c'hlas divyezhek e Landerne. E Gwiseni e oa bet digoret unan eus lec'hioù divyezhek kentañ ar skolioù katolik e 1990 a-hend-all.

Ur skouer evit Breizh eo bro Vrest evit ar pezh a sell ouzh ar c'hinnig divyezhek er c'humunioù. Unan eus ar poloù diorren kreñvañ evit ar c'helenn divyezhek eo ha merzout a reer e talvez an dra-se evit an tri hentad en un doare kempouez a-walc'h. **Tremen an hanter eus skolioù divyezhek katolik Penn-ar-Bed a gaver e bro Vrest** da skouer.

**Gallout a reer bremañ enskrivañ e vugel en un hentad divyezhek e tremen ur c'hard eus kumunioù ar vro dezho ur skol bennak :** e-touez 77 kumun ar vro ma c'heller skoliata ar vugale ez eus 22 a ginnig d'an nebeutañ un hentad divyezhek (7 kumun evit Diwan, 12 evit an hentad publik ha 10 evit an hentad katolik).

Kendalc'het he deus ar rouedad divyezhek d'en em astenn er vro : 5 kumun ouzhpenn (Daoulaz, Loperch'ed, Milizag, Plouarzhel ha Plougonvelen) zo bet digoret ur skol divyezhek enno e-keñver ar pezh a oa e 2003/2004. An hentad publik eo a zo aet war ziorren dreist-holl gant pevar lec'h nevez tra ma n'eus nemet unan gant an hentad prevez ha hini ebet gant Diwan (betek digoradur skol Lokournan d'an distro-skol 2008). N'eus nemet e reter hag e su bro Vrest m'eo un tamm distank ar c'hinnig c'hoazh.


Gant se ez eus deuet ur c'hinnig nes hag a vanke war aodoù kornôg ar vro : abaoe krouidigezh skol Diwan kentañ Breizh e Gwitalmeze ha digoradur ur c'hlas prevez er memes kumun e 1997, ne oa ket aet war-raok ar c'hinnig e kumuniezh kumunioù (K.K.) Bro an Hirwazh betek digoradur pevar lec'h nevez abaoe 2006.

Er c'humuniezhoù kumunioù pobletañ eo ez eo diorroet ar muiañ ar c'hinnig divyezhek evit ar poent. Tost holl gumunioù Brest Meurgêr ar Mor o deus ur skol bennak (nemet Boc'harzh hag ar Releg). Aes a-walc'h eo ivez mont d'ur skol divyezhek pa vezer o chom e K.K. Plabenneg hag an Aberioù.

E div gumuniezh kumunioù all e chom kreizennet ar c'hinnig er c'hêrioù kreiz c'hoazh : K.K. Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù (ma n'eus kinnig ebet en hentad publik evit ar poent) ha K.K. Bro Landerne-Daoulaz (ma'z eus bet digoradurioù er publik avat).

**Kumuniezhoù kumunioù su ar vro (K.K. Gourenez Kraozon ha K.K. Arvor ar Stêr Aon) eo ar re dibourvesañ e skolioù divyezhek.** E pep hini anezho ne gaver nemet ur skol Diwan. Souezhus eo memes tra ne vefe klas publik pe prevez ebet war an dachenn-se, ha kinnig ebet e kumun Pont-ar-Veuzenn-Kimerc'h da skouer. Emdroadur prim ar c'hinnig e K.K. Bro an Hirwazh a ro spi e galloud mont war-raok ar c'humuniezhoù kumunioù zo dale ganto c'hoazh.

A-hend-all, ur c'hinnig nes a seurt-se n'eo ket a-walc'h evit un darn vat eus ar gerent a fell dezho e vefe ur c'hinnig divyezhek er skol m'emaint e soñj enskrivañ o bugel end-eeun. **Danvez zo da ziorren c'hoazh neuze pa seller ouzh rouedad pep hentad unan-hag-unan ha pa vuzulier e vefe ret gortoz 2025 o terc'hel gant ar memes lusk a-raok kaout ur skol divyezhek en un hanter eus kumunioù ar vro dezho ur skol da nebeutañ.** Er memes mod, n'eo ket reizh ne vefe ket fonnusoc'h ar c'hinnig e kumunioù bras ar vro. N'eus nemet e Landerne ma kaver an tri hentad war un dro. **E Brest n'eus c'hoazh klas divyezhek prevez ebet ha n'eus nemet ur skol publik tra ma kaver teir e Roazhon, pe div e Landerne, en Oriant pe e Gwened.**



*E-giz ma c’hoarvez e peurrest Breizh, e bro Vrest n’eo ket kenkoulz rouedad ar c’hinnig en eil derez hag er c’hentañ derez, ha pa vefe stankoc’h eget e lec’h all. Merzout a reer n’eus skol eil derez ebet a ginnig un hentad divyezhek e kornôg hag e su ar vro.*

Ur skol divyezhek a gaver en 8 eus an 18 kumun eus ar vro enno ur skolaj d’an nebeutañ koulz hag e 3 eus ar 4 c’humun enno ul lise d’an nebeutañ. Daoust da se n’eo ket kenkoulz ar c’hinnig en eil derez hag ar pezh eo er c’hentañ derez pa ranker ober muioc’h a hent evit kenderc’hel gant un hentad divyezhek. **Ur gudenn kevatalded ar chañsoù a sav neuze** pa ne vez ket ken aes evit ur bugel divyezhek kenderc’hel gant e hentad hag evit ur bugel “unyezhek”. Kalz a vugale a zilez an deskadurezh divyezhek en abeg d’an dra-se.


Nebeut a emdroadurioù a zeu war wel gant ar gartenn amañ a-us e-keñver ar pezh a veze kinniget en eil derez e 2003/2004. Da Wiseni eo aet an adskolaj eus Diwan a oa lec’hiet e Treglonoù betek 2006. Betek al lise e kendalc’h an hentad prevez katolik e Lesneven abaoe 2004. Digoret eo bet an hentad divyezhek publik er skolaj hag el lise e kêr Vrest d’an distro-skol 2005 tra ma serre e skolaj Plougastell-Daoulaz en desped d’ar c’hevredigezhioù kerent bezañ klemmet diwar-benn an dra-se.

➤ Poblañs deskidi ar c’helenn divyezhek

Gant **2 652 skoliad divyezhek** d’an distro-skol 2007 e chom bro Vrest ar vro bouezusañ e dasparzh poblañs an hentadoù divyezhek. **22,6% eus skolidi divyezhek Breizh zo enskrivet e bro Vrest** ; stabil a-walc’h eo ar feur-se abaoe deroù ar bloavezhioù 2000.

N'eo ket ken souezhus ha se perzh bras ar vro e sifroù ar c'helenn divyezhek e gwirionez. Unvanoc'h eo rouedad ar skolioù divyezhek e kornôg Breizh dre-vras ha, war an dachenn-se, ez eo bro Vrest ar c'horn pobleañ ennañ kalz a skolioù. Pa studier dasparzh ar skolidi e Breizh-Izel hepken e verzer eo heñvel pouez bro Vrest er c'helenn dre-vras hag er c'helenn divyezhek. Diorroet eo ingal ar skolioù divyezhek er c'horn-bro pouezusañ e-keñver poblañs hollek an deskadurezh e kornôg Breizh ; en abeg d'an dra-se en em gav bro Vrest war ar renk kentañ.

*Dasparzh ha niver ar skolidi divyezhek e bro Vrest – Distro-skol 2007*



*E tost an holl gumunioù eus Brest Meurgêr ar Mor ez eus ur skol divyezhek d'an nebeutañ. Tost 700 bugel zo skoliataet e rouedad stank a-walc'h K.K. Plabenneg hag an Aberioù. A-hend-all, Lesneven ha Landerne zo daou lec'h kreñv ouzhpenn (ar sifroù dre gumun, dre hentad ha dre live a gaver er stagadennoù p. 70).*


Gant ar gartenn a-us eo kadarnaet ar soñj ne zalc'h ket kêr Vrest he renk e-keñver an divyezhegezh er skol. 43% eus tud yaouank ar vro zo skoliataet er gumun-se. Ur souezh eo neuze ne vefe Brest nemet er pempvet renk e-touez kumunioù ar vro hervez an niver a skolidi divyezhek enno. Gant 278 skoliad divyezhek hepken ez eus dale gant Brest e-keñver kerioù bras all Breizh : 577 e Gwened, 518 e Roazhon, 451 e Kemper. Disoc'h ur c'hinnig re dreut eo an dilañs-se (ur skol publik hepken, skol brevez ebet).

Er c'hontrol, kumunioù etre a zo er penn a-raok er vro : Lanniliz ha Lesneven. Gwir eo gant ar sifroù kriz koulz ha gant feurioù ar c'helenn divyezhek (gw. ar feurioù dre ar munud er stagadennoù p. 72).

Dre-vras, ar sifroù uhelañ a ya gant ar c'humunioù bras pe etre ma'z eus bet digoret ur skol divyezhek abaoe pell. Ar sifroù izelañ a glot gant ar c'humunioù ma'z eus bet digoret un hentad divyezhek nevez zo. An dra-se a ziskouez berzh an doare-se da gelenn. N'eus nemet e Kraozon n'eo ket emdroet kenkoulz ar sifroù, moarvat peogwir n'eo ket liesseurt a-walc'h ar c'hinnig (bevennet da zDiwan evit ar poent).




Keñveriadenn perzh pep kumuniezh kumunioù e poblañs-skol ar vro dre-vras hag e poblañs ar skolioù divyezhek – Distro-skol 2007



Ma vefe ingalet da vat ar c'hinnig war tachenn bro Vrest, perzh pep kumuniezh kumunioù en deskadurezh divyezhek a vefe damheñvel ouzh he ferzh en deskadurezh dre-vras. Ar gartenn-mañ a laka war wel lañs K.K. Plabenneg hag an Aberioù ha K.K. Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù. Met an **danvez zo da ziorren plas ar c'heleñn divyezhek e Brest Meurgêr ar Mor** eo an anadenn heverkañ da zerc'hel (tremen 20 poent diforc'h). Danvez zo da vont war-raok ivez e K.K. Bro an Hirwazh (hag hi oc'h adtapout he dale evel m'eo bet lavaret) koulz hag e K.K. Gourenez Kraozon.


Emdroadur rannadur an niver a skolidi divyezhek etre an tri hentad e bro Vrest etre 2003 ha 2007



Tennañ a ra dasparzh skolidi bro Vrest d'ar pezh a stader evit Breizh a-hend-all nemet ez eo un tammig kempouesoc'h gant Diwan a dap 30% (e lec'h 25%). Pouez 271 skolajiad Diwan er vro (41% eus holl skolajidi an hentad kevredigezhel) a c'hoari kalz aze. **Koulskoude, merzout a reer ez eus lañs gant an hentad publik e bro Vrest** p'en deus gounezet 9 foent er rannadur-mañ e-keñver ar pezh a oa d'an distro-skol 2003. Ar muiañ niver zo gant ar skolioù publik eta tra ma oant er penn a-dreñv pevar bloaz en a-raok. Disoc'h peder skol


digoret e-keit-se eo. Er c'hontrol, pouez Diwan zo aet war zigreskiñ pa n'eo ket emdroet he sifroù ken buan ha re an hentadoù all dre ziouer a skolioù nevez. A-lusk gant sifroù ar vro eo emdroet re ar skolioù prevez, damheñvel eo chomet o fouez e-keñver 2003. Ha pa vefe bro Vrest pol kreñvañ an hentad katolik, n'ez a ket kalz war-raok an digeriñ skolioù enni : n'eus bet nemet daou lec'h nevez abaoe 2004 tra ma oa bet digoret seizh lec'h etre 1994 ha 1997.

Rannadur an niver a skolidi divyezhek diouzh o live en tri hentad e bro Vrest – Distro-skol 2007



Klotañ a ra mat ar rannadur-mañ gant ar pezh a weler e peurrest Breizh. Lañs zo er c'hentañ derez gant an daou hentad par-ouzh-par (hag an hentad publik da gentañ penn). N'eo ket kenkoulz pouez Diwan er skolioù-mamm dreist-holl (dre ziouer a zigoradurioù nevez er bloavezhioù tremenet). Kreñvoc'h eo an eil derez eno avat : gant ur c'hinnig klok betek fin ar skolaj eo aesoc'h d'ar vugale skoliataet e Diwan kenderc'hel gant o hentad.

*Emdroadur keñveriet an niver a skolidi divyezhek hag an niver a skolidi en deskadurezh dre-  
 vras eus ar skol-vamm d'al lise e bro Vrest etre 1999 ha 2007*



*Ingâl e kresk an niver a skolidi divyezhek e bro Vrest (+85,3% etre 1999 ha 2007) tra ma'z a kentoc'h war zigresk sifroù hollad ar skolioù er vro-mañ (-4,3% etre 1999 ha 2007). Klotañ a ra an tuadurioù-se gant re Breizh (+106,9% evit ar c'helenn divyezhek ha +1,5% evit ar c'helenn dre-  
 vras). Diskouez a ra al lusk-se eo dedennet kerent ar skolidi gant ar c'hinnig divyezhek ha, da-heul, e vefe dav aesaat ha kenurzhañ an diorren anezhañ.*

Kalz izeloc'h e oa bet feur emdreiñ ar c'helenn divyezhek e bro Vrest eget e Breizh etre 1999 ha 2004 (+8,3% an eil dre egile bep bloaz er vro e-skoaz +11,9% e Breizh). Tost heñvel eo chomet feur keitat bro Vrest etre 2004 ha 2007 avat (+7,8% bep bloaz), tra ma koazhe ar feurse e Breizh (+7,3% bep bloaz). Stabiloc'h eo tuadurioù ar c'helenn divyezhek war an tachad studiet a-drugarez d'al lusk digeriñ zo bet dalc'het dezhañ abaoe 2004 moarvat (pemp skol nevez e-doug pevar distro-skol).

*Keñveriadenn kresk an niver a skolidi divyezhek eus ar skol-vamm d'al lise e bro Vrest hag e Breizh etre 1999 ha 2007*


	Bro Vrest	Breizh
Kumunioù pourvezet e 1999 hepken	+63,7%	+65,7%
Holl gumunioù pourvezet e 2007	+85,3%	+106,9%

Evit priziañ perzh ar skolioù nevez digoret en emdroadur ar c'helenn divyezhek e c'heller keñveriañ ar c'hresk stadet dre-  
 vras etre 1999 ha 2007 gant ar c'hresk a zo bet er memes koulz er c'humunioù ma oa ur skol divyezhek bennak dija e 1999 hepken. Gant an daolenn a-us e verzer emañ tost kresk bro Vrest da hini Breizh evit ar pezh a denn d'ar c'humunioù pourvezet e 1999 (+63,7% e-keñver +65,7%), padal bras eo an diforc'h war an hollad (+85,7% evit bro Vrest tra ma sav ar c'hresk da +106,9% evit Breizh).

Kement-se a dalvez ez eus, evit Breizh, tremen un drederenn eus ar c'hresk hag a zeu eus ar c'humunioù pourvezet goude 1999. E bro Vrest, avat, ar re-se o deus degaset a-boan ur c'hard eus ar c'hresk. Ne dalvez ket an dra-se n'eo ket ken yac'h skolioù nevez ar vro hag ar re all. Digoret int bet diwezhatoc'h (adalek 2004 dreist-holl) ha, gant-se, n'o deus ket bet kement a amzer evit kreskiñ. Skolioù publik int alies ouzhpenn ha lakaat e plas an hentad divyezhek enno betek ar CM2 ne ya ket ken fonnus hag er skolioù prevez da skouer.

Da-geñver savidigezh *Brezhoneg 2015 – Steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg* gant an Ofis e oa bet termenet palioù bloaziek dre vro evit ma vefe 25 000 skolidi divyezhek e Breizh a-benn 2015. Daoust ma'z eus bet tapet un tamm dale gant an hollad (er fedoù, ne dizher nemet 93,6% eus ar pal bet lakaet evit 2007), bro Vrest zo unan eus ar broioù a zalc'h ar gwellañ gant al lusk a vefe ezhomm evit tizhout ar pal (98,7% eo he live seveniñ evit 2007).

*Emdroadur keñveriet an niver a skolidi divyezhek stadet hag an niver lakaet da bal gant an Ofis evit bro Vrest eus 2003 da 2015*




*Doujañ a ra mat a-walc'h bro Vrest ouzh ar palioù a oa bet lakaet dezhi e 2003 (un tamm lañs he doa zoken betek distro-skol 2007).*

Ar pal a 5000 skoliad divyezhek a-benn 2015 a c'hello bezañ tizhet ma talc'h ar vro gant ur c'hresk bloaziek keitat par da 8,1%. Met an dra-se ne c'hello bezañ nemet ma kendalc'h ar vro da zigeriñ skolioù nevez bep bloaz (evel m'eo c'hoarvezet abaoe 2004). Ar pezh a dalvez **klokaat ar rouedad er c'humuniezhoù kumunioù m'eo treut ar c'hinnig** peurgetket (K.K. Gourenez Kraozon, K.K. Arvor ar Stêr Aon, K.K. Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù, K.K. Bro Landerne-Daoulaz) ha **liesseurtaat ar c'hinnig er c'humunioù ma'z eus klasoù divyezhek c'hoazh**. Skouer kêr Vrest bet meneget uheloc'h eo an hini splannañ : skol brevez ebet, ur skol publik hepken ha, gant-se, sifroù a zo kalz izeloc'h eget re kumunioù all a-vent gant Brest e Breizh (Roazhon, Kemper, Gwened).


## ➤ Stadegoù ar c'heleñn divyezhek

Feur ar c'heleñn divyezhek dre live e bro Vrest keñveriet gant hini an departamant ha gant hini Breizh – Bloavezh-skol 2007/2008



**Uheloc'h eo ar feur skoliata en hentad divyezhek evit pep live keleñn (nemet evit al lise) e bro Vrest eget e departamant Penn-ar-Bed pe e Breizh. Da 5,13% e sav ar feur-se evit ar c'hentañ derez (eus ar skol-vamm d'ar CM2). Sifroù dereat int hag e kumunioù zo e tizhont liveoù uhel a-walc'h zoken (34,2% e kentañ derez Lanniliz da skouer) met tennañ a reont atav d'ur bihanniver. Danvez a chom c'hoazh da vont kalz war-raok. Evel-se e talc'ho bro Vrest gant he statud bro skouer.**





Disheñvelderioù bras a stader eus an eil kumun d'eben. Splann eo e Brest Meurgêr ar Mor, dreist-holl, ma kaver war un dro feur izelañ ar vro e kêr Vrest (2,1%) hag unan eus ar re uhelañ e Plougastell-Daoulaz (17,3%). N'eus tra ebet evit reizhabegiñ un diforc'h ken bras koulskoude. Ur c'hinnig re skort e kêr Vrest eo an displegadenn eeunañ a gaver. Er c'hêrioù bras, n'eus ket tu da gas e vugel d'ar skol e penn all ar gumun, ezhomm zo da gavout e walc'h en e garter annez.


E tost holl gumunioù ar vro eo aet war-raok feur ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez etre 1999 ha 2007<sup>4</sup>. Er penn a-raok emañ kêr Landerne (eil kumun pobletañ ar vro) m'eo bet tost daougementet ar feur. Disoc'h ar politikerezh youlek kaset e-kerzh respetadoù Yann-Bêr Thomin eo. **Diskouez a ra penaos eo barrek an tiez-kêr mennet da ziorren an hentadoù divyezhek war o zachenn.**

Kresket mat eo ar feur-se e Lanniliz ivez (lieskementet dre 1,9 etre 1999 ha 2007), pe c'hoazh e Plougastell-Daoulaz (anezhi ur gumun he deus sinet ar garta *Ya d'ar brezhoneg*, e-giz Landerne).

Er c'hontrol, goude un emdroadur dizingal, an dregantadoù zo digresket un tamm e Plouvien, e Gwitalmeze hag e Gwiseni. Er c'humunioù all eo aet feur ar c'heleñn divyezhek war greskiñ dre-vras etre 1999 ha 2007. Ingal met re c'horrek e kresk sifroù Brest : ur skol publik zo hepken ha skol brevez ebet. E Kraozon he deus poan ar skol Diwan da lakaat ar feur da greskiñ hec'h-unan.

<sup>3</sup> An holl sifroù dre gumun ha dre live a gaver er stagadennoù p. 72.

<sup>4</sup> Feurioù ar c'heleñn divyezhek dre gumun a vloaz da vloaz a gaver er stagadennoù p. 73.




Gant K.K. Plabenneg hag an Aberioù emañ ar feur uhelañ e bro Vrest. E 7<sup>vet</sup> plas e renkadur frammoù etrekumunel Breizh diouzh feur ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez emañ (K.K. Bro Josilin eo a zo er renk kentañ e reter-kreiz ar Mor-Bihan).

Dizingal-kenañ eo feur ar c'heleñn divyezhek diouzh ar gumuniezh kumunioù. Feur izel a-walc'h Brest Meurgêr ar Mor (3,7%) a gadarna ar soñj ez eus ezhomm da astenn ar c'hinnig da veur a skol er c'humunioù pobletañ (ha neuze e kêr Vrest da gentañ penn). Skouer frammoù etrekumunel poblet all a c'hellfe bezañ heuliet : hini Bro Kêr-Wened gant 6,3%, hini Lannuon-Treger gant 8,6%.

E-touez ar seizh kumuniezh kumunioù sellet outo, div zo kalz a-us da geidenn bro Vrest (5,1%) : K.K. Plabenneg hag an Aberioù a zo lusket gant peder eus he femp kumun bobletañ (nemet Landeda) ha K.K. Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù a zalc'h he renk a-drugarez d'he c'humun greiz (n'eus c'hoazh skol ebet e Plouzeniel nag er Folgoad da skouer). Peder c'humuniezh kumunioù zo dindan ar geidenn avat ; enno ez eus danvez da wellaat stad ar gont buan (dreist-holl er re bouezusañ en deskadurezh : Brest Meurgêr ar Mor ha K.K. Bro an Hirwazh).

*Emdroadur feur ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez e frammoù etrekumunel bro Vrest eus 1999/2000 da 2007/2008*



*War greskiñ eo aet feur ar c'heleñn divyezhek e bro Vrest etre 1999 ha 2007. Tremenet eo eus 3 da 5,1% gant ul lusk plaen a-walc'h. N'eo ket emdroet ken kompez feur pep kumuniezh kumunioù avat.*

Damheñvel eo chomet feur ar c'heleñn divyezhek e teir c'humuniez kumunioù etre 1999 ha 2007 : K.K. Gourenez, K.K. Arvor ar Stêr Aon ha K.K. Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù<sup>5</sup>. War zigreskiñ un tamm eo aet ar sifr e homañ diwezhañ zoken. Kreizennet-tre eo ar c'hinnig deskadurezh er framm etrekumunel-se : e Lesneven emañ bodet tremen un drederenn eus holl skolidi kentañ derez ha 88% eus ar skolidi divyezhek. Diskouez a ra an ezhomm zo da zigeriñ e lec'hioù nevez evit derc'hel gant al lusk kreskiñ. Liesseurtaat ar c'hinnig a vefe mat ober ivez pa n'eus klas divyezhek publik ebet er gumuniez kumunioù-se.

Er c'humuniezhoù kumunioù all e stader emdroadurioù dereat. Ha pa chomfe izel feur Brest Meurgêr ar Mor, kreskiñ a ra ingal a vloaz da vloaz. Douget gant lusk kêr Lanniliz, K.K. Plabenneg hag an Aberioù zo ar feur uhelañ ganti abaoe 2001 ; koulskoude, n'eus bet digoradur ebet en ur gumun nevez eus ar vro abaoe 1996. Poent e vefe krouiñ klasoù nevez evit kenderc'hel da vont war-raok. Ar c'hresk e K.K. Bro an Hirwazh zo stag dreist-holl ouzh digoradurioù deuet nevez zo (e 2006 ha 2007) ; n'eo ket gwall uhel ar feur du-hont en abeg d'an dra-se. E K.K. Bro Landerne-Daoulaz eo kresket ar muiañ feur ar c'heleñn divyezhek en deskadurezh (lieskementet dre 2,2 en ur ober eizh vloaz). Disoc'h politikerezh ti-kêr Landerne eo, skoazellet gant an digoradurioù graet e kumunioù all abaoe 2004 (Loperc'hed ha Daoulaz).

<sup>5</sup> Teir c'humuniez kumunioù ma n'eus bet digoradur ebet e keit-se.

# Kelenn brezhoneg


## ➤ An tañva d'ar brezhoneg er c'hentañ derez

Evit ar skolidi n'int ket skoliataet en hentadoù divyezhek eo an tañva un doare da gaout un tamm darempred gant ar yezh. Etre un eurvezh ha teir eurvezh bep sizhun e pad an tañva, diouzh ar skol. Kinniget e vez kanaouennoù, rimadelloù, c'hoarioù e brezhoneg, damanaoudegezhioù eus ar yezh evit kizidikaat ar skolidi ha, drezo, o zud ivez.

**Gant youl ar C'huzul-departamant** eo bet diorroet an tañva d'ar brezhoneg er c'hentañ derez e Penn-ar-Bed. D'en ober en deus lakaet ur stignad war-sav e skolioù publik o sinañ un emglev gant an Ensellerezh akademiezh e 2000. N'eus bet krouet post ebet gant an Ensellerezh akademiezh : gant ar C'huzul-departamant e vez kemeret goprou an emellerien diavaez e karg. **Sked** hag **An Oaled** eo ar c'hevredigezhioù zo bet kefridiet gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed hag an Ensellerezh akademiezh da ginnig an tañva-se e skolioù publik bro Vrest.

Skoazellet e veze an tañva d'ar brezhoneg er skolioù katolik en un doare heñvel. Gopret e veze an emellerien dre skoaziadennoù roet gant ar C'huzul-departamant dre ar gevredigezh **Yezh ha Sevenadur** a ra al liamm gant DDEC Penn-ar-Bed. Goude un digresk er c'hinnig d'an distro-skol 2006 ez eus bet paouezet ganti penn-da-benn e 2007 (tremen 1100 bugel a rae o mad eus an tañva e 2006/2007). Da c'horthoz kavout un diskoulm nevez evit an tañva e ouestl ar gevredigezh he feadra da glokaat endro yezhel an hentad divyezhek prevez gant skoazellerien-vamm brezhonek.


*Dasparzh ar skolidi o deus un tañva d'ar brezhoneg er c'hentañ derez e bro Vrest – Bloavezh-skol 2007/2008*



Bihan eo an niver a vugale tizhet gant an tañva d'ar brezhoneg er c'hornôg, er reter hag er su. N'eus nemet e Brest Meurgêr ar Mor hag e K.K. Plabenneg hag an Aberioù ma c'heller komz eus ur c'hinnig stank a-walc'h. Klotañ a ra ar gartenn-mañ gant hini ar c'helenn divyezhek, ar pezh a ziskouez **n'eus ket kevezerezh etre ar c'hinnigoù-se**, respont a reont da ezhommoù disheñvel. **Al lec'hioù m'emañ ar c'hreñvañ ar c'helenn divyezhek eo ar re m'emañ ar c'hreñvañ an tañva ivez.** Diskouez a ra un tuadur "seul vui seul c'hoazh" : seul vrasoc'h ar c'hinnig brezhoneg en ul lec'h bennak seul vui e vez dedennet ar Vretoned gant ar yezh.


Hervez ar sifroù hon eus dastumet gant Ensellerezh akademiezh Penn-ar-Bed e vefe **3 851 skoliad** tizhet gant an tañva e bro Vrest e 2007/2008. Met war goulennoù ar skolioù emañ diazezet ar sifroù-se ha n'eo ket war un niveradeg eus ar vugale kizidikaet a-benn ar fin. O keñveriañ an holl ditouroù hon eus e vrasjedont ne vefe nemet **3 400 skoliad** bennak tizhet e gwirionez. **Etre 8,1 ha 9,2% eus poblañs ar skolioù kentañ derez ez eont d'ober.**

Feur an tañva er c'hentañ derez dre framm etrekumunel (diwar brasjedadennoù eus an niver a vugale tizhet) – Bloavezh-skol 2007/2008



E K.K. Plabenneg hag an Aberioù emañ feur an tañva en e uhelañ, evel ma c'hoarvez evit ar c'helenn divyezhek, ar pezh a brou kement-mañ : **seul liesseurtoc'h ha stankoc'h e vez ar c'hinnig, seul vui a startijenn a vez gant ar brezhoneg er skol.** A-drugarez da bolitikerezh yezh kêr Landerne ez eus ur feur dereat gant K.K. Bro Landerne-Daoulaz. Er c'hontrol, ha pa vefe nebeut a vugale skoliataet eno, dister eo c'hoazh feur an tañva e K.K. Arvor ar Stêr Aon ha, gwashoc'h c'hoazh, null e K.K. Gourenez Kraozon.


*Niver a vugale o deus bet un tañva d'ar brezhoneg er c'hentañ derez e bro Vrest eus 2004/2005 da 2007/2008*



*Goude bezañ bet en e varr e 2005/2006 eo aet an niver a vugale kizidikaet e bro Vrest war zigreskiñ. **Steuziadur an tañva er skolioù prevez eo abeg pennañ an digresk-se ; er skolioù publik avat e vefe chomet stabil ar sifr pe war greskiñ e vefe aet zoken.***

War greskiñ kalz e oa aet an niver a skolidi kizidikaet e Penn-ar-Bed e deroù tout ar bloavezhioù 2000 diwar atiz ar C'huzul-departamant. Gorrekaet eo ar c'hresk abaoe 2002 avat. Tizhet en deus an tañva ur vevenn rak ne c'hall ket an departamant sammañ e gresk e-unan ken. Koulskoude, ma ne vez ket astennet ar budjed gouestlet d'an tañva, ne vo ket tu da gas pelloc'h ha da ledañ ar stignad-se. Gant se, e deroù 2007, en doa goulennet ar C'huzul-departamant d'ar c'humunioù paeañ un hanter eus ar frejoù ; en o c'harg emañ ar skolioù kentañ derez, e gwirionez. Er c'humunioù a nac'h mont gant an hent-se e paouez tamm-ha-tamm an departamant da arc'hantaouiñ an tañva abaoe distro-skol 2007, da lavaret eo e vo paouezet da vat gant an doare kelenn-se ac'hann da 2009 daoust d'ar goulenn. Un nebeud kantadoù a euroioù e koust d'ur gumun evit ma vefe kinniget un eurvezh tañva d'ar brezhoneg a-hed ar bloavezh en ur c'hlas. Kerse bras eo ne vefe ket kenarc'hantaouet ur seurt stignad gant an Deskadurezh Stad ivez.

Divizoù ar c'humunioù e-keñver ar stignad tañva d'ar brezhoneg er c'hentañ derez publik e bro Vrest – Bloavezh-skol 2007/2008



Er 24 c'humun eus bro Vrest ma vez kinniget un tañva d'ar brezhoneg er skolioù publik, 17 ti-kêr o deus divizet kenarc'hantaouiñ ar stignad gant ar c'huzul-departamant. En o zouez e konter div gumun ma ne oa kinnig ebet betek-henn : Ar Releg-Kerhuon ha Rosloc'hen. 7 ti-kêr o deus divizet chom hep kemer perzh er stignad memes tra. Echu e vo gant an tañva er c'humunioù-se a-benn 2009 en desped d'ar goulenn. 21,9% eus ar vugale kizidikaet er vro (844 skoliad hervez sifroù an Akademiezh) zo skoliataet enno. E pemp kumun ouzhpenn e oa deuet ur goulenn nevez gant ar skol ha nac'het eo bet gant an ti-kêr mont e-barzh ar stignad (271 skoliad ouzhpenn a vije bet e kumuniezhoù kumunioù Bro Landerne-Daoulaz, Bro an Hirwazh hag Arvor ar Stêr Aon). K.K. Gourenez Kraozon a chom un dachenn werc'h evit an tañva d'ar brezhoneg ; 1250 bugel bennak zo skoliataet eno er skolioù publik koulskoude. An doare nemetañ evit skolidi ar c'hourenez da gaout un darempred gant ar brezhoneg eo ar skol divyezhek dre soubidigezh.

E Steuñv Diorren Korsika (1993) e oa bet lakaet da bal e vefe teir eurvezh kelenn korseg bep sizhun en holl liveoù eus ar skol-vamm d'al lise. E 2005 ez eus bet stadet gant ar Rektoriezh e oa tizhet 95% eus skolidi kentañ derez Korsika gant kentelioù korseg<sup>6</sup>. Ar skouerse a ziskouez e c'hellfe ur seurt kinnig bezañ astennet d'an holl e Breizh ivez. Ar c'hartennoù kinniget amañ a-us a brou ne tiorren an tañva diwar goust ar c'helenn divyezhek, ouzhpenn.


Da-geñver adreizhadur ar c'hentañ derez a vo lakaet da dalvezout adalek distro-skol 2008, ez eus diskoulmoù da ijinañ buan evit derc'hel en e vod efedusañ (da lavaret eo gant abadennoù reoliek) an tañva d'ar brezhoneg adalek rummad ar re vihan : gantañ e vez tizhet tud n'ez afent ket war-du ar c'helenn divyezhek.

<sup>6</sup> En eil derez e save ar feur da 51% er skolaj ha da 21% el lise.

## ➤ Ar c'helenn brezhoneg en eil derez

Kentelioù brezhoneg a vez kinniget en eil derez ivez. Er skolaj e c'hell bezañ graet dindan stumm abadennoù tañva adalek ar 6<sup>vet</sup> betek an 3<sup>de</sup> klas (etre un ha div eurvezh bep sizhun ma vez kelennet damanaoudegezhioù eus yezh ha sevenadur Breizh). E 4<sup>re</sup> hag en 3<sup>de</sup> klas e c'hell bezañ kinniget evel Yezh Vev pe evel danvez dibab : etre div ha teir eurvezh bep sizhun. E liseoù zo e c'haller dibab ar brezhoneg evel Yezh Vev adalek an eilvet klas betek ar c'hlas termen. En Akademiezhoù Roazhon ha Naoned e c'heller dibab ar brezhoneg evit ar vachelouriezh.

*Dasparzh ha niver ar skolidi a gelenner brezhoneg dezho en eil derez e bro Vrest – Bloavezh-skol 2007/2008*



*E bro Vrest ez eus ur c'hinnig kentelioù brezhoneg e 12 eus an 18 kumun dezho ur skol eil derez d'an nebeutañ. Er c'humunioù o deus ur pouez bihan e poblañs hollek an eil derez eo n'eus kinnig kelenn brezhoneg ebet. N'emañ ket Plabenneg en degouezh-se avat ha kentelioù brezhoneg a veze dalc'het eno er skolaj betek 2004/2005.*

**916 skoliad eil derez a heuilh kentelioù brezhoneg** e 2007/2008, da lavaret eo 2,6% eus holl skolidi eil derez ar vro. Gant-se e kaver e bro Vrest 16,9% eus holl skolidi eil derez rannvro Breizh a heuilh seurt kentelioù : 8% eus ar re zo enskrivet en deskadurezh publik hepken met 28,5% eus ar re zo enskrivet er prevez.

**Tost an tri c'hard eus an 916 den-se zo skoliataet en deskadurezh prevez<sup>7</sup> :** 668 skoliad e-skoaz 248 er publik. Ar c'heñver-se a oa gwir er bloavezhioù a-raok c'hoazh met

<sup>7</sup> N'eus nemet 44,8% eus skolidi eil derez bro Vrest zo skoliataet en deskadurezh prevez.



aet eo war greñvaat d'an distro-skol 2007 p'eo bet kemeret an diviz gant skolaj prevez Lokournan da reiñ un tañva d'ar brezhoneg d'an holl vugale e 6<sup>vet</sup>.

Un tañva d'ar brezhoneg mesket gant un dizoleiñ eus sevenadur Breizh eo a vez roet da 91,7% eus an dud yaouank a heuilh kentelioù brezhoneg en eil derez e bro Vrest. N'int nemet 76 skoliad o kaout kentelioù gouestlet d'ar yezh penn-da-benn.

Souezhet e vezer gant an digempouezioù a verzer e bro Vrest war dachenn ar c'helenn brezhoneg.


Digempouez eo an dasparzh etre ar c'humunioù da gentañ (s.o. ar gartenn amañ a-us) : Brest, kêr greiz ar vro, a vod 58,2% eus hollad ar skolidi eil derez met 9,3% hepken eus ar re a heuilh kentelioù brezhoneg ; e Lokournan avat ne gaver nemet 3,1% eus hollad skolidi eil derez ar vro met 26% eus ar re o deus ar brezhoneg evel danvez yezhel.

Digempouez eo an dasparzh etre an hentadoù ivez, evel m'eo bet diskouezet uheloc'h, un diforc'h bras zo aze e-keñver ar pezh a weler e lec'h all e rannvro Breizh (ma n'eus nemet 43,2% eus an dud yaouank o deus kentelioù brezhoneg en eil derez a zo enskrivet en ur skol brevez).

Digempouez eo an dasparzh etre ar skolaioù hag al liseoù, erfin. Diwar an 916 skoliad kontet amañ, n'eus nemet 54 lisead (5,9%). Kreñvaet c'hoazh eo amañ an tuadur a gaver ivez e Breizh velestradurel (11,8% a liseidi hepken).

**Splann eo neuze e vefe danvez da vont war-raok gant ar c'hentelioù brezhoneg en eil derez ma vefe diorroet ar c'hinnig** : an tañva a c'hellfe bezañ ledanaet (war skouer an diviz a-zoare bet kemeret gant skolaj Lokournan meneget a-us) met ne dalvez nemet evit kizidikaat an dud yaouank. N'eo nemet gant gwir kentelioù yezh (Yezh Vev pe danvez dibab) e kemerer an hent evit dont da vezañ yezher da vat. Pouezus eo neuze e vefe doareoù aes evit ar c'hentelioù-se (eur, lec'h) hag e vefe kelaouet mat ar skolidi hag o zud diwar o fenn.

*Emdroadur sifroù ar c'helenn brezhoneg en eil derez publik e bro Vrest eus 2004/2005 da 2007/2008*



*Daoust d'an tamm kresk stadet evit ar bloavezh-skol 2007/2008, an digresk eo tuadur sifroù ar c'helenn brezhoneg en eil derez publik. E 2002/2003 e veze heuliet kentelioù brezhoneg gant 1,83% eus skolidi eil derez publik bro Vrest ; e 2007/2008 ne sav ar feur-se nemet da 1,28%.*

War zigreskiñ ez ae sifroù ar c'helenn brezhoneg en eil derez e-kerzh ar bloavezhioù tremenet. Serzh e oa an digresk-se en deskadurezh publik ma'z eus steuziet un drederenn eus ar poblañs tizhet etre 2002/2003 ha 2007/2008. War greskiñ e hañval bezañ aet sifroù an deskadurezh prevez katolik er mare-se (met n'haller ket fiziout kement er roadennoù koshañ bet dastumet ganeomp evit an hentad-se). Un toullad skolioù o deus paouezet gant o c'hinnig abaoe distro-skol 2004 : skolaj publik Pont-ar-Veuzenn-Kimerc'h e 2006, skolajoù prevez Plabenneg (2005) ha Gwitalmeze (2007).

An tuadurioù-se ne glotont ket gant re sifroù an eil derez er vro (digresk tanav-kenañ) na gant hini ar c'helenn divyezhek (kresk dalc'het e pep hentad). Tennañ a rafent kentoc'h da aozioù diaes ha d'un diouer a youl diorren gant ar Rektoriezh na vez ket kempouezet gant gwask ar bed kevredigezhel aet skuizh tamm-ha-tamm da stourm war an dachenn-se.

E 2007/2008 e verzer e kresk en-dro ar sifroù koulz er publik hag er prevez memes tra. Met an emdroadur-se zo liammet strizh ouzh sifroù Lokournan, anezhi ur gumun ma ne gaver nemet 3,1% eus poblañs skolidi eil derez bro Vrest. Arouezius eo eus an araokadennoù a c'heller ober pa vez un tamm youl.

Hervez divizoù ar Rektoriezh, ne emdroio ket ar c'hinnig war an tu mat e bro Vrest e gwirionez. Drastus e vo el liseoù hag e kêr Vrest ma kaver 58% eus poblañs an eil derez. **D'an distro-skol 2008 ne chomo kinnig publik ebet e Brest** (serret e vo er skolaj hag el lise) ha tamm kinnig ebet ken e liseoù ar vro nemet e skol prevez Estran-Charles de Foucauld. A-du gant tuadurioù lakaet e plas gant ar Rektoriezh abaoe meur a vloaz ez a an dra-se. Evit stourm a-enep dezho eo ez eus bet fellet da Rannvro Breizh kinnig ur skoaziad a 150 € dre lisead a zesk brezhoneg. Abaoe distro-skol 2005 e vez lakaet ar bourvezadenn a-ratozh-se e pleustr met, evit ar poent, n'haller nemet stadañ n'he deus ket gallet ar skoazell-se cheñch penn d'ar vazh (dre ziouer a vrudañ, marteze).

# An deskadurezh uhel

## Skol-veur Breizh-Izel

Da-heul krouidigezh ar Vestroniezh er bloavezhioù 70 hag an Aotreegezh war ar brezhoneg e 1981 ez eus bet diazezet **ur c’hursus brezhoneg e Skol-veur Breizh-Izel** e Brest hag e Skol-veur Breizh-Uhel e Roazhon. Klokaet e oa bet an hentad e 1989 gant krouidigezh an DSHS<sup>8</sup> brezhoneg (bet digoret e Brest e 1990). Un DSHS doubl eo a veze kinniget e Brest betek 2000, da lavaret eo e ranke ar studierien dibab un danvez all, ouzhpenn ar brezhoneg, etre saozneg, spagnoleg, istor ha lizhiri modern. Adalek distro-skol 2000 ez eus bet kinniget un DSHS brezhoneg penn-da-benn.


Abae adreizhadur 2004 eo bet bodet an DSHS hag an Aotreegezh kozh en un Aotreegezh gant ar meneg “Yezhoù ha sevenadurioù rannvro”. Koulskoude, ar studierien ganto an Aotreegezh-se ne c’hellont ket kenderc’hel gant ur Master gouestlet d’ar brezhoneg e Brest ken : n’eo ket bet erlec’hiet ar Vestroniezh “Yezhoù ha sevenadur rannvro” a oa anezhi betek 2004. Ar gevrenn geltiek a ginnig dezho Masterioù ma c’hellont dibab danvezioù a denn d’ar yezhoù ha sevenadurioù keltiek memes tra. Ar studierien c’hoant ganto kenderc’hel gant studioù gouestlet d’ar brezhoneg en resis a rank mont da Skol-veur Breizh-Uhel, ar skol-veur all nemeti a ginnig ur c’hursus brezhoneg evit ar poent.

A-hend-all, kinnig a ra Skol-veur Breizh-Izel un **Diplom Skol-veur** « Yezhoù ha sevenadur Breizh ». Graet eo evit kizidikaat ar studierien ouzh sevenadur Breizh, ur c’hinnig eus ar yezh zo er programm ha n’eo ket un tañva. Studierien all Unvez Stummañ hag Enklask (UFR e galleg) “Lizhiri ha Skiantoù an den” a c’hall dibab brezhoneg evel **danvez dibab** ivez.

E-kreiz ar Skol-veur ez eus ul labourva enklask abaoe 1969 : Kreizenn an Enklaskoù Breizhek ha Keltiek (**KEBK**). Karget eo da genurzhiañ ar studioù war an dachenn geltiek. Ar brezhoneg zo e-touez an temoù enklask gant daou ahel : ar sokioyezhoniezh hag al lennegezh vrezhonek. E 2008 ez eo deuet KEBK da vezañ un unvez klaskerezh kemmesk : adframmet eo bet neuze etre Skol-Veur Breizh-Izel e Brest, Skol-Veur Breizh-Uhel e Roazhon (kelennerien Skol-veur Kreisteiz Breizh a labour e-barzh ar framm ivez) ha « l’École Pratique des Hautes Études » e Pariz gant daou ahel studi a denn da « liesseurterd ha disheñvelder yezh » ha da « komz, skrivañ ha kevredigezh ».


---

<sup>8</sup> Diplom Studioù Hollek ar Skol-veur, DEUG e galleg.



**164 studier o deus heuliet kentelioù brezhoneg e Skol-veur Brest.** 67 anezho a studi ar yezh da vat, da lavaret eo 22,7% eus ar studierien enskrivet en ur c’hursus war ar brezhoneg e Breizh. Ar feur-se a glot gant perzh Skol-veur Breizh-Izel e sifroù ar studierien war ar yezhoù e skolioù-meur rannvro Breizh (22,4%) : en e liesseurtañ emañ ar c’hinnig war ar yezhoù e Skol-veur Roazhon.

Emdroadur an niver a studierien er c’hursus brezhoneg e bro Vrest eus 2000/2001 da 2007/2008



Goude bezañ tizhet ur barr e 2002 eo digresket an niver a studierien enskrivet er gevrenn geltiek betek 2005. **Stabilaet eo evit ar poent d’ul live kevatal d’ar pezh a oa en eil hanterenn ar bloavezhioù 90.** Da 39,1% e sav an digresk e sifroù ar c’hursus brezhoneg etre 2002 ha 2007. Ul lusk damheñvel zo bet heuliet gant sifroù Skol-veur Breizh-Uhel e-keit-se (34,1% nebeutoc’h). **Klotañ a ra kement-se gant un tuadur a dalvez evit holl gevrennoù ar yezhoù e skolioù-meur rannvro Breizh : -12,3% en niver a studierien e Breizh ha -24,4% e Skol-veur Breizh-Izel hec’h-unan zoken.**


War zigreskiñ eo aet sifroù ar stummadurioù all war ar brezhoneg kinniget gant Skol-veur Brest ouzhpenn. An danvez dibab brezhoneg, goude bezañ bet en e varr e 2004/2005 gant 162 studier o tont eus kevrennoù all, zo diskennet da 70 studier e 2007/2008. Er memes koulz sifroù an Diplom Skol-veur zo tremenet eus 39 da 27 studier enskrivet.

Kudennek eo an emdroadurioù-se pa ouzer ez a war vrasaat ar goulenn brezhonegerien e bed al labour (war dachenn ar c’helenn da gentañ penn met e meteier all ivez). Ezhomm zo e vefe ur brederiadeg gant skolioù-meur Breizh evit, eus un tu, azasaat o c’hinnig studioù da c’hoantoù ar studierien (kemer gwelloc’h e kont ar studierien nevez o tont eus an hentadoù divyezhek peurgetket) ha da re bed al labour hag, eus un tu all, kelaouiñ war ar c’hinnig-se ha brudañ ar fred zo liammet outañ.

## CFP Brest

Kreizenn Stummañ war ar Bedagogiezh (CFP) Brest a ginnig ur stummadur kentañ war daou vloavezh evit dont da vezañ skolaer divyezhek en deskadurezh katolik. E-pad bloavezh kentañ ar stummadur-se e prienter ar genstrivadeg a-ratozh. Evel skolaerien stajidi e kendalc’h ar re o deus bet ar genstrivadeg tuta gant o stummadur.

*Emdroadur an niver a studierien danvez kelennerien divyezhek e CFP Brest eus 2001/2002 da 2007/2008*



*War zigreskiñ kalz eo aet sifroù CFP Brest etre 2001 ha 2007 (tremenet eus 12 studier danvez kelenner divyezhek da 5). N’eo ket kenkoulz pouez Brest e-keñver ar CFPoù all war an dachenn-se : chom a ra ganti nebeutoc’h eget un drederenn eus danvez skolaerien divyezhek an deskadurezh prevez pa oa tremen an div drederenn e 2001.*

Klotañ a ra tuadurioù sifroù an deskadurezh uhel e bro Vrest gant re Vreizh dre-vras. Dipitus eo pa verzer al lusk a zo gant ar brezhoneg war an tachennoù all er c’horn-bro : er skolioù divyezhek, er bed foran, er gevredigezh keodedel.

# Ar c'helenn d'an oadourien

Tri doare da zeskiñ brezhoneg a vez kinniget d'an oadourien hiziv an deiz : kentelioù noz (kinnig a ra an darn vrasañ eus ar frammoù un eurvezh hanter kelenn bep sizhun), stajoù ha kentelioù dre lizher (er rummad-se e c'hellfec'h renkañ an e-kelenn ha pa ne vefe ket diorroet-kenañ c'hoazh evit ar brezhoneg).


Estreget kevredigezhioù lec'hel e kaver e bro Vrest meur a framm a bouez a gas obererezhioù lies. En o zouez **Sked** e Brest (en deus krouet ur rouedad kentelioù noz er c'humunioù tro-dro), **Ti ar Vro Bro-Leon, Stumdi** e Landerne (a zo e penn a-raok ar stajoù brezhoneg), pe c'hoazh **Ar Skol Vrezoneg** e Brest (a zo unan eus an nebeud frammoù a ginnig kentelioù brezhoneg dre lizher).

An darn vrasañ eus ar c'hentelioù noz hag an holl stajoù kinniget e bro Vrest a vez meret gant frammoù ezel eus **DAO** (Deskiñ d'an Oadourien). Tachenoù labour ar c'hevread-se arbennikaet war ar c'helenn brezhoneg d'an dud deuet eo ar bedagogiezh, an dafar kelenn, titouriñ an deskidi, stummañ ar gelennerien, micherelaat anezho koulz hag an hentadoù deskiñ. Abaoe 2002 e vez aozet gant DAO devezhioù eskemm ha stummañ evit ar gelennerien ; ur gwir steuñv stummadur daouvloaziek eo hag a gas d'ul label roet d'ar stummerien o deus heuliet an holl volladoù.

**War-dro 30 kelenner** a gelenn brezhoneg d'an oadourien e bro Vrest, hervez an titouroù hon eus dastumet. 11,3 post-labour (kevatal da implijoù leunamzer) hor boa renablet e 2006 (e Stumdi dreist-holl) ha 15 kelenner a youl-vat zo ouzhpenn.

# Kentelioù noz

Dasparzh an niver a skoldi er c'hentelioù noz e bro Vrest<sup>9</sup> – Bloavezh-skol 2007/2008



Tennañ a ra ar gartenn-mañ da hini dasparzh ar skoldi divyezhek. Diskouez a ra ur c'hinnig diorroet mat a-walc'h war dachenn ar vro. Ur souezh eo gwelet n'eus kinnig ebet nag e Plabenneg nag e Lanniliz, anezho kumunioù poblet-kenañ, met gwalc'het e vez ar goulenn gant ar c'hinnig zo diazezet er c'humunioù tro-dro (Plougerne, Plouvien ha Treglonoù).

Kentelioù brezhoneg a zo e 23 c'humun eus bro Vrest (daou lec'h deskiñ a zo e kumun Brest) ha tost holl annezidi an dachenn a c'hell kavout ul lec'h deskiñ dindan 10 km eus o zi. Gant ar gevredigezh **Sked** e vez meret pe harpet tremen an hanter eus al lec'hioù deskiñ-se (13 lec'h diwar 23).

**625 oadour** a zo enskrivet e kentelioù noz e bro Vrest evit ar bloavezh 2007/2008. **Un hanter eus deskidi kentelioù noz Penn-ar-Bed ez eont d'ober ha tremen ur bempvedenn eus re Vreizh.**


O sellet ouzh ar sifroù dre gumun e verzer **ne zalc'h ket kêr Vrest da live kêrioù bras all Breizh** koulskoude. Gant 122 deskard emañ Brest kalz dindan kêrioù meur ar reter : Roazhon (212) ha Naoned (168). Tostoc'h emañ eus ar pevare kumun er renkatur-se, an Alre (101), enni ur boblañs tost 14 gwech bihanoc'h eget hini Brest koulskoude.

Etre 825 ha 900 deskard a oa bet niveret e 2002/2003 evit bro Vrest. **Da lavaret eo ez eus bet un digresk etre 25 ha 30%** er sifroù en ur ober 5 bloaz tra ma sav an digresk da

<sup>9</sup> Ar sifroù-se a gaver dre ar munud er stagadennoù p. 74.

20% e Breizh e-keit-se. Stabil eo chomet ar c'hinnig koulskoude, nemet er c'humunioù o doa meur a lec'h kelenn e 2002/2003 : Brest, Landerne ha Lesneven. Mat eo notenniñ memes tra eo brasoc'h bremañ feur an deskidi dezho ul live uhel a-walc'h evit komz (nebeutoc'h eget un drederenn anezho a oa gant ul live 3 pe uheloc'h e 2002/2003 e-skoaz 45% e 2007/2008).

*Keñveriadenn rannadur an niver a zeskidi dre live e bro Vrest etre 2002/2003 ha 2007/2008*



War an hollad, perzh al liveoù izelañ (1 ha 2) zo digresket kalz e-keñver ar pezh a oa pemp bloaz en a-raok. Div elfenn o deus c'hoariet war un dro evit kas d'an disoc'h-se :

- \_ n'eus ket kement a dud o kregiñ bremañ gant kentelioù brezhoneg hag e 2002 ;
- \_ an dud deuet a grog gant kentelioù noz a ya aliesoc'h betek penn o stummadur bremañ (a-drugarez d'al lusk micherelaat er frammoù kelenn).

## Stajoù

N'eus bet nemet daou framm o kinnig stajoù brezhoneg e bro Vrest e 2006/2007 : **Stumdi** e Landerne ha **Ti ar vro Bro-Leon** e Lesneven.

Stumdi ha Ti ar vro Bro-Leon a ginnig stajoù ur sizhunvezh a oa bet heuliet gant 161 den e 2006/2007 : **35 den** evit staj B&B<sup>10</sup> Ti ar vro Bro-Leon ha **126** evit stajoù Stumdi (en o zouez 73 den en grae e stern ar stummadur dibaouez).

Ar framm kentañ o kinnig stummadurioù c'hwec'h miz war ar brezhoneg eo bet Stumdi (krouet e oa bet e 1996 ha staliet eo bremañ war daou lec'h : Landerne ha Plañvour). Ur pal micherel a vez gant ar stajidi peurliesañ. Dont a reont evel-se da vezañ brezhonegerien e berr amzer. Da-heul o stummadur, e kav labour e brezhoneg an darn vrasañ eus ar stajidi pe e kendalc'h gant studi ar yezh er skol-veur. Evit skoazellañ e stajidi da glask labour, e kinnig Stumdi ur servij nevez dezho abaoe 2006 evit o aliañ hag o heñchañ war-du ar gennadoù a c'hell enfredañ brezhonegerien. Talvoudus-kenañ eo ar servij-se a respont d'an diouer a anaoudegezh zo gant an AVAL<sup>11</sup> e-keñver marc'had al labour e brezhoneg. **70 den** o doa heuliet stummadur hir Stumdi e bro Vrest e 2006/2007.

Kement ha respont da ezhommoù nevez, e kinnigo Stumdi adalek miz Gwengolo 2008 ur "Stummadur uhel", anezhañ ur staj tri miz savet evit brezhonegerien ampart, tud a labour e brezhoneg dija, c'hoant ganto dont da vezañ emrenoc'h c'hoazh gant ar yezh. E Plañvour e vo


<sup>10</sup> Bevañ e Brezhoneg, gw. p. 50.

<sup>11</sup> ANPE e galleg.



aozet an dalc'h kentañ met e Landerne e c'hellfe bezañ dalc'het ar stummadur ivez er bloavezhioù da zont ma vefe trawalc'h a enskrivadurioù.

*Dasparzh an deskidi diouzh pad o staj e bro Vrest keñveriet gant re an departamant ha Breizh – Bloavezh-skol 2006/2007*



War-bouez evit ar stummadurioù hir eo kentoc'h dipitus perzh bro Vrest e sifroù ar stajoù brezhoneg. N'eus ket bet aozet kalz stajoù dibenn-sizhun e Penn-ar-Bed e 2006/2007 ha hini ebet e bro Vrest ; aes a-walc'h eo aozañ seurt abadennoù, koulskoude, hag un doare evit skolidi ar c'hentelioù da vont war-raok buanoc'h eo. N'emañ ket a-live lodenn ar vro e sifroù ar stajoù ur sizhunvezh dalc'het e Penn-ar-Bed (38,9%) gant he lodenn e poblañs an departamant (43,3%) na gant he lodenn er c'hentelioù noz (49,5%) na gant he lodenn er skolioù divyezhek (52,8%). Ouzhpenn-se ar stajoù ur sizhunvezh a vez dalc'het zo aozet gant frammoù brudet a zesach tud dreist da vevennoù ar vro, padal ar stajoù dibenn-sizhun zo kentoc'h stajoù adwelet heuliet gant tud eus ar vro.

Evit ar poent, ne ginnig Sked staj adwelet ebet ken war an dibennoù-sizhun. Paouezet eo An Oaled gant e staj hañv abaoe 2006 (gallout a rafe kinnig stajoù tematek d'an oadourien adalek miz Gwengolo 2008 avat). Emgleo Breiz zo paouezet da ginnig stajoù abaoe 2003 ivez. Abaoe miz Ebrel 2006, n'he deus aozet Skol-veur Breizh-Izel staj brezhoneg ebet.

E 2006/2007, n'eus bet kinnig staj dibenn-sizhun ebet e bro Vrest (e 2002/2003 e oa bet 50 den oc'h heuliañ devezhioù adwelet gant Sked) ; raktresoù a seurt-se zo war ar starn gant Roudour evit an dazont. Ne chom nemet daou framm a ginnig stajoù ur sizhunvezh war an dachenn studiet amañ : Stumdi ha Ti ar vro Bro-Leon (a ginnig seurt traoù abaoe 2003 hepken). Berzh a ra an doare-se da gelenn rak an niver hollek a dud stummet evel-se zo aet war greskiñ (161 den tra ma oant 121 e 2002/2003). Heñvel eo an niver a oadourien stummet dre staj hir Stumdi e Landerne e 2006/2007 e-keñver 2002/2003 avat.

## Ar stummerezh dibaouez

Un dek framm bennak a ginnig ur stummerezh dibaouez war ar brezhoneg : stummadurioù azasaet, dre stajoù pe dre gentelioù noz. Gant aozadurioù ofisiel (Rannvro, departamantoù, an AVAL pe ar c'hKIMINEK<sup>12</sup>) pe gant o implijer e c'hall an deskidi lakaat arc'hantaouiñ o stummadur. Pouezus bras eo ar stummadurioù-se evit diorren implij ar brezhoneg er vuhez foran.

E bro Vrest eo Stumdi a ra war-dro ar c'hinnig-se dreist-holl : 73 eus ar 126 den enskrivet en e stajoù ur sizhunvezh a oa deuet e stern ar stummadur dibaouez.

Gant ar poellgor embregerezh a c'hell bezañ un doare all c'hoazh da stummañ ar c'hopridi war ar brezhoneg e stern al labour. Kentelioù brezhoneg a vez kinniget gant poellgor embregerezh IFREMER Plouzane da skouer.

Gant liveoù uhelañ ar c'helenn d'an oadourien e bro Vrest (liveoù 4 ha 5 hag ar stummadur hir) **e c'heller brasjediñ e vefe bet stummet e bro Vrest etre 150 ha 200 brezhoneger ampart deuet d'o oad e-doug ur bloavezh**. N'int ket niverus a-walc'h evit kempouezañ an tremen 1 000 yezher aet d'an anaon er mare-se.

## Klozadur ar pennad war ar brezhoneg en deskadurezh

Unan eus tachennoù Breizh m'emañ en e glokañ kinnig an doareoù lies evit deskiñ brezhoneg eo bro Vrest. Bras eo he flas e gwirionez e sifroù Breizh evit pep doare kelenn. En abeg d'an dra-se e vez arouezius alies eus an tuadurioù e Breizh dre-vras ar pezh a verzer amañ.

Stankik e krog da vezañ rouedad **ar skolioù divyezhek** er c'hentañ derez hag an niver a skolidi a gendalc'h da emdreiñ gant ur feur kreskiñ stabiloc'h eget er broioù all. K.K. Plabenneg hag an Aberioù zo e-penn a-raok ar vro gant ur c'hinnig nes a dizh ur feur heverk eus poblañs-skol ar c'horn-bro (11,1% er c'hentañ derez e-keñver 7,7% e 1999). Kumuniezhoù kumunioù kreizennet-kenañ evit ar c'helenn divyezhek eo K.K. Bro Landerne-Daoulaz ha K.K. Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù. An eil zo lusket gant politikerezh yezh Landerne ha digoret e vez klasoù e kumunioù all bremañ. Eben he deus tizhet ur feur kelenn divyezhek uhel a-walc'h abaoe pell met chom a ra boud gant an diorren (digoradur ebet abaoe 1994 ha kinnig publik ebet). Ingal e kresk feur ar c'helenn divyezhek e Brest Meurgêr ar Mor, framm etrekumunel pobletañ ar vro, met chom a ra d'ul live izel a-walc'h. Skolioù zo aze e tost pep kumun, koulskoude, met gant stankded ar boblañs er c'horn-bro-mañ ez eus ezhomm eus ur c'hinnig nesoc'h c'hoazh (dre garter) evit tizhout an dud. Merzout a reer mankoù e kêr Vrest da gentañ penn : ur skol publik hepken ha kinnig ebet gant an deskadurezh prevez. E K.K. Bro an Hirwazh eo bet gwellaet kalz ar rouedad skolioù er bloavezhioù diwezhañ (tri digoradur dagañver daou zistro-skol) ha pa chomfe c'hoazh izel lodenn ar c'helenn divyezhek eno. Evit echuiñ, ha pa vefe bihan o lodenn e poblañs-skol ar vro dre-vras, kalz a zale zo gant frammoù etrekumunel su ar vro : K.K. Gourenez Kraozon ha K.K. Arvor ar Stêr Aon. E pep hini anezho, ne gaver nemet ur skol diazezet gant an hentad dre soubidigezh er c'hantved tremenet. N'eo ket reizh ne vefe kinnig divyezhek ebet er skolioù publik a zegemer 84,6% eus skolidi kentañ derez ar c'humuniezhoù kumunioù-se.

An doareoù all da gelenn n'int ket techet da emdreiñ war an tu mat kement-se. Digreskiñ a ra an niver a vugale tizhet gant an tañva er c'hentañ derez - en abeg da steuziadur

<sup>12</sup> ASSEDIC e galleg.

ar c'hinnig en deskadurezh prevez peurgetket - ha start eo gouzout war peseurt tu ez emdroio er bloavezhioù da zont. Un doare hag a c'hall tizhout an holl vugale eo koulskoude hag e dalc'h ar strollegezhioù lec'hel emañ. Digempouezioù ar c'helenn brezhoneg en eil derez a ziskouez an diouer a strategiezh diorren hollek.

30% a yezherien er remziadoù yaouankañ a zo ret, hervez an UNESCO, evit ma c'hellfe ur yezh treuzveañ. Ma voder ar c'helenn divyezhek hag an tañva, ez eus tost da 14% eus skolidi kentañ derez ar vro o deus un darempred bras pe vrasoc'h gant ar brezhoneg. E K.K. Plabenneg hag an Aberioù e tizher 28,3% zoken. Roadennoù kalonekaus int ; siwazh an tañva e-unan n'eo ket a-walc'h evit lakaat ar vugale da vezañ brezhonegerien.

Kement hag ober bilañs an emdroadurioù e metoù ar c'helenn e bro Vrest abaoe an diagnostik kentañ (2004), eo splann ez eer muioc'h-mui war-du ur c'helenn brezhoneg er skol bevennet d'ar c'helenn divyezhek hepken. Ne vo ket gounit ar yezh nag an dud gant an tuadur strishaat-se a laka er-maez an holl re n'o deus ket kroget abred gant un hentad divyezhek, pe peogwir n'o deus ket bet ar mennozh, pe peogwir n'int ket bet kelaouet mat a-walc'h, pe peogwir e oa re bell ar skol tostañ evito.

Er-maez eus ar skol e emdro ar sifroù war an tu fall ivez. Koazhet eo un tamm ar c'hinnig er Skol-veur, nebeutoc'h a studierien a zibab ar brezhoneg, nebeutoc'h a dud deuet a heuilh kentelioù noz. N'eus nemet sifroù ar stajoù ur sizhunvezh a ya war-raok. Nec'hus eo an tuadurioù-se evit emdroadur ar c'helenn divyezhek (diouer a zanvez kelennerien) hag evit lusk ar brezhoneg er gevredigezh dre-vras (re nebeut a dud deuet oberiant c'hoant ganto kas ar yezh war-raok). Ezhomm zo neuze da gavout doareoù efedus da zesachañ muioc'h a dud d'ar stummadurioù war ar brezhoneg, marteze en ur lakaat o aozioù hag o danvez da emdreñ.

Un touell e vefe lakaat penn-da-benn war chouk ar skolidi divyezhek dazont ar yezh. Pep rummad oad en deus e berzh da c'hoari. **Evit ma c'hellfe ar yezh sevel he c'hein e bro Vrest e rankfe ur miliad yezher ampart ouzhpenn bezañ stummet bep bloaz gant an holl zoareoù kelenn.** N'eo ket aes da vuzuliañ (peseurt rann eus ar skolidi divyezhek a chomo brezhonegerien oberiant ?) met sur eo ne dizher ket ar pal-se er mare-mañ.

Da dizhout ar pal-se e vank ur politikerezh kenurzhiet sammet a-gevret gant an ensavadurioù barrek, dezhañ ispalioù uhel ha kempoell evit dazont ar yezh e bro Vrest. **Ur bodad prederiañ war diorren ar c'helenn divyezhek a ranker lakaat en e sav e bro Vrest.**

# Stad ar brezhoneg er vuhez foran

## Oberourien ar politikerezh yezh er vro

E dalc’h meur a strollegezh tiriadel emañ ar barregezhioù evit kas ur politikerezh yezh da benn war takad bro Vrest. Bras eo barregezhioù ar strollegezhioù tiriadel lec’hel (Rannvro, Departamant, kumunioù) a-drugarez da bennaenn ar frankiz d’en em verañ evit ar strollegezhioù tiriadel (“principe de libre administration des collectivités territoriales”).

- Da gentañ penn, **ar Stad** a ver an hentoù broadel da skouer (hent broadel 12 etre Brest ha Lanneured, 32 km, hag an hent broadel 165 etre Brest ha Pont-ar-Veuzenn-Kimerc’h, 40 km) hag an holl servijoù melestradurel (endro, sevenadur, aferioù yec’hedel ha sokial, h.a.).
- **Rannvro Breizh** zo e karg eus sevel ha kempenn al liseoù ; perc’henn eo war aerborzh Brest-Breizh<sup>13</sup> a nevez zo ivez, da skouer. Roet he deus lañs, e 2004, d’ur politikerezh tiriadel diazezet war ar broioù. Sinet ez eus bet kevratoù bro a-benn steuñvekaat politikerezhioù ar rannvro dre diriad.
- **Departamant Penn-ar-Bed** a ver an hentoù departamant, frammoù foran sevenadurel evel Abati Daoulaz. Ledan eo kargoù ar strollegezh tiriadel-se en obererezh sokial evit an dud oadet pe evit ar vugale da skouer.
- **An etrekumunelezh** : war ledanaat ez a tachenn galloudoù an etrekumunelezh. Bras eo pouez ha galloud Brest Meurgêr ar Mor e pep keñver (ar boblañs dre-vras, an armerzh, an aveadurioù sevenadurel, ar skolioù,...).
- **Ar c’humunioù** : ledan eo barregezhioù ha galloudoù ar c’humunioù evit merañ o ziriad. **Ar c’humunioù eo ar strollegezhioù tiriadel a zo aet ar pellañ evit lakaat ur politikerezh yezh da dalvezout e bro Vrest.**

Gallout a ra pep strollegezh foran ober gant ar brezhoneg er vuhez foran. Rediañ a ra al lezenn implijout ar galleg met ne verz ket implij ur yezh all : aotreet eo implij ar yezhoù rannvro e-kichen ar galleg er vuhez foran. Mont a ra ar strollegezhioù lec’hel en tu all d’ar barregezhioù fiziet enno gant al lezenn ouzhpenn-se : n’he deus ket ar Rannvro ur varregezh war ar sevenadur met kas a ra ur politikerezh sevenadurel da benn daoust da se. Gallout a ra pep strollegezh diouzh he live ober muioc’h gant he barregezhioù ha mont hebiou strizhded ar galloudoù fiziet enni oc’h ober gant doareoù all. An holl strollegezhioù na dennont ket splet eus ar galloud-se, pell a-se, evit kas ur politikerezh yezh da benn.

<sup>13</sup> Kenveret eo an aerborzh gant Kambr Kenwerzh Brest ha Rannvro Breizh.

# Politikerezh yezh an departamant

## Penaos e kemer an departamant ar brezhoneg e kont

**Estreget war an hentoù e ro departamant Penn-ar-Bed un tamm plas d'ar brezhoneg.** Ober a ra gantañ en e gehentiñ a-frapadoù. Implijet e vez kalz stumm brezhonek anv an departamant, war rouedad kirri-boutin Penn-ar-Bed da skouer, ha **logo Penn-ar-Bed eo al logo departamant nemetañ gant brezhoneg warnañ.**

Pennadoù-skrid e brezhoneg a gaver bep tro er c'hannadig miziek met pennadoù a denn d'ar glad pe da ved ar brezhoneg hepken int avat. Pajennoù a denn da bolitikerezh yezh an departamant a c'haller lenn e brezhoneg war al lec'hienn Genrouedad a-hend-all. A-benn gwellaat ar servijoù kinniget d'ar velestridi e vez troet e brezhoneg teuliadoù kehentiñ zo pe skoroù kelaouiñ zo. Panellerezh diabarzh pe panelloù kelaouiñ Kuzul-departamant Penn-ar-Bed a vez kinniget en div yezh bremañ. Gouestlet ez eus ur budjed da dreiñ e brezhoneg teuliadoù ar C'huzul-departamant met n'eus nemet an teulioù sevenadurel breizhek a sell an dra-se outo avat.

Penn-ar-Bed eo an departamant a ya ar pellañ evit lakaat oberoù a denn d'ar yezh da dalvezout. Ouzhpenn dasparzhañ skoaziadennoù arc'hant e termen programmoù a-benn kas ar brezhoneg war-raok (war dachenn an embann, an treuzkas, an tañva er skolioù, h.a.). Anvet ez eus bet un den e karg da heuliañ al labour war dachenn ar brezhoneg e servijoù an departamant e 1994. Daoust da-se ne dizher ket amañ live politikerezh yezh departamant ar Pireneoù-Atlantel a vez lakaet da dalvezout dre genemglevioù (da skouer gant ar Stad evit mont war-raok war dachenn ar c'helenn pe c'hoazh gant Ofis Publik an Euskareg evit ma vefe kreñvaet plas ar yezh en ensavadur hag en e servijoù).


War dachenn implij ar yezh ez eus oberoù aes a c'hallfe departamantoù Breizh lakaat e pleustr koulskoude : degemer e brezhoneg, paperennoù talbennet divyezhek (lizheroù, goloioù-lizher, sielloù,...), skridoù melestradurel divyezhek, lakaat an div yezh war dafar ha war kirri an departamant hag er c'hehentiñ dre-vras (skritelloù brudañ a bep seurt, pedadennoù, kartennoù-bizit, ...). Dre an ober gant ur yezh eo e roer ur statud dezhi.

Ar brezhoneg a c'hall bezañ implijet er vuhez foran e-kichen ar galleg **war kement teul zo**. Tu a vefe da renabliñ an implijidi departamant brezhonegerien ha kinnig ur stummadur d'ar re a fell dezho a-benn gallout degemer an dud e brezhoneg. Ur seurt stummadur a oa bet lakaet e plas e Kuzul-departamant Penn-ar-Bed c'hoazh met chomet eo a-sav siwazh daoust d'ar wellaenn e vefe kinnig servijoù divyezhek.

## Ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg gant an departamant

Brasoc'h eo budjed Penn-ar-Bed evit ar brezhoneg eget re an departamantoù all atav. N'eo ket bras-spontus ar sammadoù koulskoude : 2,45€ dre annezad evit ar bloavezh 2005 da skouer.

## Emdroadur dispignoù departamant Penn-ar-Bed evit ar brezhoneg (e €) eus 2001 da 2005



Ur barr zo bet tizhet gant dispignoù an departamant e 2003 gant tremen daou vilion a euroioù ha chom a reer mui pe vui d'al live-se abaoe. Etre 80 ha 87%, well-wazh, eus an dispignoù-se a vez gouestlet da ziorren kelenn ar brezhoneg.

Dreist d'an departamantoù all emañ perzh Penn-ar-Bed war dachenn ar c'helenn (diouzh ar c'henfeurioù koulz ha diouzh ar sifroù kriz). Daou dra bennañ a vez kaset da benn : harpañ ar c'hevredigezhioù a gas war-raok an divyezhegezh er skolioù (Diwan dreist-holl met ivez Div Yezh, Dihun hag UGB) ha kizidikaat ar skolidi d'ar brezhoneg dre an tañva kinniget er c'hentañ derez publik ha prevez (gw. ar rannbennad a denn d'an dra-se e lodenn ar c'helenn). Ur programm a zo ivez evit skoazellañ ar c'humunioù hag an diazezadurioù foran a genlabour etrekumunel a-benn digeriñ klasoù divyezhek publik. Skignet e vez skoaziadennoù d'ar c'humunioù evit pourchas dafar pedagogel d'ar c'hlasoù divyezhek publik : 8 kumun zo bet skoazellet evel-se gant ar C'huzul-departamant etre distro-skol 2003 ha hini 2007 (Plouzane, Loperch'hed, Gouenoù, Brest, Landerne, Daoulaz, Milizag ha Plougonvelen). Kemer a ra an Departamant perzh e diorren an hentad divyezhek publik en eil derez o harpañ ar rouedad skolajoù a zo etre Landerne ha Plougastell-Daoulaz (kemer a ra e karg an treuzdougen etre an daou skolaj).

Rannet eo budjed an oberoù e-maez tachenn ar c'helenn e Penn-ar-Bed en un doare kempouez a-walc'h : embann, mediaoù, c'hoariva, glad yezhel<sup>14</sup>, obererezhioù troskol. Troet eo ar politikerezh sikour an embann war-du ar grennarded o vroudañ an tiez-embann hag ar skrivagnerien da ledanaat ar c'hinnig levrioù evit ar re yaouank. A-hend-all, ouzhpenn reiñ ur plas d'ar brezhoneg en o rouedad pannelloù-heñchañ, e vez broudet ar strollegezhioù lec'hel all da gemer ar brezhoneg e kont er vuhez foran dre ur programm skoazell d'ar c'humunioù ha d'ar frammoù etre kumunioù evit kas da benn studiadennoù war an anvioù-lec'h hag evit staliañ ur panellerezh a gemer ar brezhoneg e kont. Tennañ o deus splot kumun Milizag, kumun Landerne ha Kumuniezh-kêr Brest (Brest Meurgêr ar Mor) eus ar programm skoazell-se<sup>15</sup>. 38% eus ar budjed gouestlet gant ar C'huzul-departamant a zo aet da strollegezhioù bro Vrest e gwirionez war ar prantad 2001-2005 (poblañs bro Vrest zo 42% eus poblañs Penn-ar-Bed).

Tennañ a ra splot bro Vrest eus oberoù an departamant war dachenn an tañva er skolioù hag evit diorren rouedad ar skolioù divyezhek da skouer. Brasoc'h eo ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg e Penn-ar-Bed eget en departamantoù all. Met ar pezh a vank eo ur politikerezh yezh diazaset war un destenn gant palioù resis da gas da benn. Gallout a ra an ensavadur ober muioc'h gant ar yezh en e vont en-dro diabarzh.

<sup>14</sup> E 2005 en deus roet ar C'huzul-departamant lañs da g**Klaskerien ha Treizherien soñjoù**, ur c'houlzad zo e bal mirout pinvidigezh ar yezh ha broudañ an eskemm etre ar rummadoù yezherien.

<sup>15</sup> Studiadennoù war an anvioù-lec'h skoazellet e 2003 evit Milizag, staliañ pannelloù divyezhek skoazellet e Brest Meurgêr ar Mor e 2004 hag e 2005, e Landerne e 2003, hag e Milizag e 2005.

## Stad an divyezhegezh er panellerezh-hent

Gant divizoù ar C’huzul-departamant eo aet war stankaat ar staliañ panelloù divyezhek mont e-barzh ha mont e-maez ar c’humunioù. Tremen 95% eus kumunioù bro Vrest a oa pourvezet ganto e 2004.

E 1990 e oa bet divizet gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed kregiñ da staliañ ur panellerezh divyezhek war e rouedad hentoù. E 1998 e oa bet divizet staliañ bep tro panelloù e brezhoneg evit ar panelloù nevez staliet. Daoust d’an diviz-se n’eo ket aveet ar rouedad penn-da-benn c’hoazh, met mont a ra an divyezhegezh war-raok ingal. E tost un hanter eus ar rouedad ez eus staliet panelloù divyezhek e 2008, da lavaret eo 1 350 km a hentoù aveet e Penn-ar-Bed (ur c’hard a oa aveet e 2002). Bezant-mat e teu ar brezhoneg da vezañ. Gant se, eo deuet Penn-ar-Bed da vezañ an departamant ma weler ar muiañ a vrezhoneg.

Kiladennoù zo bet ivez koulskoude rak divizet ez eus bet gant servijoù an hentoù chom hep skrivañ stumm brezhonek reizh anvioù ar c’humunioù pa oa heñvel-tre ouzh ar stumm melestradurel. **Pa n’eus nemet un diforc’h tired, evel Plouzane/Plouzané da skouer, e oa bet divizet en deroù skrivañ ar stumm brezhonek mat hepken. Ar c’hontrol eo a vez graet bremañ koulskoude pa ne vez mui lakaet nemet ar stumm gallekaet war wel.**

A-hend-all, e oa da vezañ treuzkaset d’an departamantoù ar merañ war un darn eus an hentoù Stad gant lezenn an 13 a viz Eost 2004 diwar-benn ar frankizoù hag an atebegezhioù lec’hel. Gallet en dije an diviz-se disoc’hañ war diorren an divyezhegezh er panellerezh war an hentoù-se a vez darempredet kalz gant an dud. Nac’het o deus an departamantoù kemer an hentoù broadel-se e karg evit poent.

Ha pa vefe dizingaloc’h an disoc’h war an dachenn, divizoù a-du gant ar brezhoneg a vez kemeret gant strollegezhioù lec’heloc’h.

Panellou-heñchañ divyezhek a vez staliet tamm-ha-tamm gant Brest Meurgêr ar Mor abaoe 2002 gant sikour Ofis ar Brezhoneg. Kumunioù bras ar vro evel **Brest** ha **Landerne** a zeu da vezañ skouerioù war an dachenn-se ivez.

Ur studiadenn savet gant an Ofis war anvioù-lec’h Brest Meurgêr ar Mor a zo bet degemeret gant Kuzul-kêr Brest ha gant lod eus kumunioù all ar Gumuniezh-kêr. Kemeret e vez e kont hiviziken evit reizhañ skritur an anvioù-lec’h pa vez neveset panelloù.

Aet eo kalz war-raok bezañ ar brezhoneg er panellerezh-hent abaoe 2004 a-drugarez da bolitikerezh Brest Meurgêr ar Mor ha Milizag eus un tu hag a-drugarez d’ar poloù a-du gant ar yezh, Landerne ha Lesneven, a gendalc’h da vezañ oberiant eus un tu all.

## Kevrat bro Vrest

Kevratoù bro liesvloaziek (evit ar marevezh 2006-2012) zo bet sinet gant ar broioù ha Rannvro Breizh e 2006. Ganto e vez steuñvekaet politikerezhioù ar Rannvro dre diriad. Tri goload a ya d’ober ar C’hevratou bro. Ar goload kentañ a denn da raktresoù ar Rannvro war tiriad ar broioù ; n’emañ ket e stern ar gevrat evit gwir. An eil goload (« structurant régional/local ») a denn da raktresoù kendivizet etre ar Rannvro hag ar broioù ; danvez ar C’hevratou eo.

N’eo ket bet lakaet ar Chanter 9, da lavaret eo an hini a glot gant ar politikerezh yezh bet degemeret a-unvouezh gant Bodadenn rannvroel Breizh e 2004, en a-raok gant ar Rannvro. C’hoant he deus bet e teufe an intrudu gant ar broioù. Hogen ar broioù n’int ket prederiet gant ar brezhoneg c’hoazh war a hañval. N’eo ket bet adkemeret ar Chanter 9 e Kevrat bro Vrest da skouer ha ne gaver enni meneg ebet eus ar yezh a-hend-all. N’eus nemet bro Gerne he deus miret ar chanter 9 e-touez an ahelioù labour kinniget gant ar Rannvro.



Da izili kuzul diorren bro Vrest, ennañ dilennidi ar strollegezhioù tiriadel ha dileuridi eus ar bed armerzhel, sokial ha sevenadurel, eo da lakaat o fouez e-barzh ar jeu bremañ evit ma vefe kemeret ar brezhoneg e kont e 2009 ma vo adwelet ar C'hevratou. Tu vo neuze da ouzhpennañ raktresoù en ur implij an trede goload peurgetket (« structurant local ») a denn da raktresoù n'int ket termenet en a-raok er C'hevratou. An hent kinniget gant ar C'huzul-rannvro evit ma harpfe raktresoù lec'hel a denn d'ar brezhoneg eo (staliañ pannelloù-heñchañ divyezhek, sevel klasoù pe skolioù divyezhek, h.a.). Prezidanted broioù Breizh a oa bet kelaouet eus an dra-se en ofisiel dre ul lizher gant Prezidant Rannvro Breizh e deroù 2008.

## Oberoù ar strollegezhioù lec'hel

A-drugarez da varregezhioù ar c'humunioù ez eus doareoù lies da implijout ar brezhoneg. Soñjal a reer er panelloù peurgetket : pannelloù mont e kêr, panellerezh heñchañ (gw. ar pennad sterniet *Stad an divyezhegezh er panellerezh e bro Vrest*, p. 39) pannelloù diavaez ha diabarzh ar savadurioù-kêr, pannelloù touristel, plakennoù straed.

Arabat disoñjal e c'hall bezañ talvoudekaet ar yezh kenkoulz all pa vez implijet evit daremprediñ ar velestridi avat : en embannadennoù (kannadig-kêr, plegfollennoù, pedadennoù, kartennoù hetiñ), war ar responder, war al lec'hienn Genrouedad (Brest ha Landerne zo bet troet darn eus pajennoù o lec'hienn da skouer). Aozet e c'hell bezañ degemer e brezhoneg ar velestridi : niveriñ an implijidi-kêr a oar brezhoneg, kinnig ur stummadur war ar yezh d'ar re a fell dezho e stern ar stummadur dibaouez (evel ma c'hoarvez e Landerne da skouer).

Ha pa vefe embannet gant mellad 2 ar Vonreizh ez eo ar galleg yezh ar Republik, hervez lezenn eo implijout ar brezhoneg ouzhpenn en un degouezh ofisiel. Er skridoù melestradurel e c'hell bezañ graet da skouer : teulioù raktres hag embann an dimeziñ, paper-ganedigezh, aotre da guitaat an tiriad. Ul levrig familh divyezhek a vez lakaet da dalvezout gant kumunioù zo e Breizh abaoe nevezamzer 2007. An holl skridoù-se zo e-kerz an Ofis evit an holl strollegezhioù foran. Graet int da vezañ implijet gant kement kumun a fello dezhi met ar pep pouezusañ eo e vefent roet d'an holl velestridi evel ma ra ti-kêr Karaez. Lid an euredoù en ti-kêr e-unan a c'hell bezañ dalc'het en div yezh ivez hag ar c'hentañ badeziant republikan e brezhoneg a oa bet dalc'het e Landerne e deroù 2008.

E-pad pell n'eus bet nemet Landerne, Lesneven ha Plougerne o kas oberoù da benn er vro. E 2008 ez eus un nebeud kumunioù all ouzhpenn evel Milizag ha gant Brest Meurgêr ar Mor e verzer deroù un emdroadur o kregiñ. E-pad pell, n'eus bet nemet Plougerne o labourat war tachenn an anvioù-lec'h. Kroget eo ti-kêr Milizag gant an teuliad-se abaoe 2003. Divizet en deus ti-kêr Boc'harzh reizhañ skritur anvioù-lec'h ar gumun ivez. Evit ar pezh a denn da aveiñ bourkoù gant pannelloù-heñchañ divyezhek e c'haller menegiñ ti-kêr Plouzeniel, Plouvien pe c'hoazh Plougastell-Daoulaz a zo oberiant war an dachenn-se ; met n'int ket niverus er vro c'hoazh. War ar plakennoù straed n'eus koulz lavaret netra nemet e Milizag. Un nebeud plakennoù straed zo bet staliet e Brest e 2007 ivez met n'eo ket sistematek.

N'en deus ket kavet c'hoazh ar brezhoneg ar plas a zlefe kaout er vuhez foran e-keñver berzh ar skolioù divyezhek er vro. Ur bern kumunioù dezho ur feur skoliata divyezhek kentoc'h dereat n'o deus ket kroget da staliañ pannelloù c'hoazh ha n'o deus tamm politikerezh yezh ebet. Chom a ra kornioù-bro ma n'eo ket oberiant an tiez-kêr en implij ar brezhoneg er vuhez foran : K.K. Gourenez Kraozon ha K.K. Arvor ar Stêr Aon, pe c'hoazh K.K. Bro Landerne-Daoulaz (war-bouez kumun Landerne, dres, hag a zo e-touez an tiez-kêr oberiantañ er vro hag e Breizh zoken) hag er reter da Loperc'hed.



## Kizidikaat ar gargidi

Mat eo kizidikaat kargidi ar servij publik lec'hel ouzh talvoudegezh ar brezhoneg. Abadennoù kelaouiñ a vez aozet ingal gant skourr rannvroel ar CNFPT e Gwened da skouer abaoe 2003. Ur perzh oberiant a gemer Ofis ar Brezhoneg enno. Gantañ e vez kinniget ivez ur staj klok daou zevezh diwar-benn merañ an divyezhegezh war un tiriad. Dalc'het e vez e miz Here abaoe 2006.

En dalc'h kentañ e oa bet pevar c'hargiad eus strollegezhioù bro Vrest o kemer perzh diwar ar 14 stajiad : tri eus Brest Meurgêr ar Mor (o tont eus servij ar c'hehentiñ hag hini an treuzdougen) hag ur c'hargiad kaset gant ti-kêr Milizag. Evit an eil dalc'h, e 2007, e oa bet kemeret perzh gant ur c'hargiad o tont eus ti-kêr Lesneven.


Heuliet e oa bet stajoù ar CNFPT gant kentelioù kizidikaat d'ar brezhoneg (stajoù "les fondamentaux de la culture bretonne" pe "mise en oeuvre des politiques culturelles") gant 12 kargiad eus bro Vrest e 2006 hag e 2007 : 7 a oa eus kêr Vrest hag ar re all a oa eus Landerne, Gouenoù ha Plougastell-Daoulaz.

## Ya d'ar brezhoneg

Broudañ oberourien ar vuhez sokial hag armerzhel d'ober traoù fetis evit ar yezh eo pal ar c'houlzad *Ya d'ar brezhoneg* a oa bet roet lañs dezhañ gant Ofis ar Brezhoneg e 2001. Divizet e oa bet gant an Ofis ober kemend-all gant ar c'humunioù (hag ar frammoù etrekumunel) e 2004, anezho elfenn diazez ar vuhez foran. Er pleustr e vez kinniget d'ar pennadurezhioù-kêr dibab en ur roll 40 ober ar re a vo sammet ganto. Diouzh emouestl ar gumun, diouzh an niver a oberoù asantet ganti ha goude ma vefe gwiriet o sevenidigezh gant an Ofis e vez roet dezhi unan eus pevar live testeniekaat ar c'houlzad-se.

**Diazez kement politikerezh yezh lec'hel zo e venn *Ya d'ar brezhoneg* bezañ e gwirionez. Brest Meurgêr ar Mor** eo ar framm etrekumunel kentañ en deus sinet an emglev e Gouere 2006. Met kumunioù eo a ya gant an hent-se evit ar poent dreist-holl.

*Sinerien Ya d'ar brezhoneg er c'humunioù e bro Vrest – Miz Meurzh 2008*



*E miz Meurzh 2008 e konted 12 kumun o doa votet a-du gant karta Ya d'ar brezhoneg. Nav anezho o doa dibabet al live 1 (kêr Vrest en o zouez), div a oa aet gant al live 2 ha kêr Landerne he doa lakaet al live 3 da bal. Er c'humunioù-se emañ o chom **56,9% eus annezidi ar vro**. Merzout a reer n'eus kumun siner ebet e div gumuniezh kumunioù gevred bro Vrest.*

E-touez an oberoù kinniget gant an Ofis daou zo bet dibabet gant an holl gumunioù e bro Vrest : staliañ panelloù divyezhek evit mont e-barzh ha mont e-maez ar gumun (anezhañ an ober ret nemetañ pa siner evit al label 1 ha sevenet gant kumunioù departamant Penn-ar-Bed abaoe pell diwar atiz Kuzul-departamant Penn-ar-Bed<sup>16</sup>) ha kemer perzh er c'houlzad bloaziek da gas war-raok ar c'helenn brezhoneg d'an oadourien. Un toullad oberoù all zo bet dibabet gant an darn vrasañ eus ar c'humunioù o deus sinet ; tennañ a reont d'ar panellerezh (panelloù diabarzh ha diavaez an ti-kêr, panelloù glad ar gumun, ober gant an div yezh bep tro ma vez staliet ur panellerezh nevez), d'ar c'hehentiñ (kartennoù-pediñ evit an abadennoù sevenadurel aozet gant an ti-kêr, kartennoù-bizit evit an dilennidi en goulenn) ha d'ar c'helenn (skoazell evit staliañ pe diorren klasoù divyezhek er gumun).

Merzout a reer memes tra n'eus ket bet dibabet alies oberoù aes da gas da benn (kemenn divyezhek war responterez an ti-kêr da skouer) pe oberoù a bouez evit skeudenn ar yezh (reiñ da welet splann d'an dud e c'hallont bezañ degemeret e brezhoneg gant ar servijoù-kêr, aozañ un enklask da c'houzout piv a oar brezhoneg e-touez an implijidi-kêr, arc'hantaouiñ stummadur micherel an implijidi-kêr a fell dezho deskiñ brezhoneg pe gwellaat o yezh).

Div gumun eus bro Vrest o deus bet ul **label** dija. Gant tremen un ugent ober bennak kaset da benn, Landerne zo bet unan eus kêrioù Breizh o deus labouret ar muiañ evit kas ar brezhoneg war-raok etre 2004 ha 2008. Da-heul ar steuñv politikerezh yezh bet votet gant Kuzul-rannvro Breizh, Live 3 Landerne zo ur skouer eus ar pezh a c'hell bezañ graet gant ur strollegezh tiriadel evit ar brezhoneg. Gant eizh ober kaset da benn, ti-kêr Milizag zo war an hent mat evit tapout live 2 *Ya d'ar brezhoneg* ivez.

Disoc'hoù fetis a zeu da heul sinadegoù an tiez-kêr : digoret ez eus bet un hentad divyezhek prevez e Plouarzhel e 2006 hag ez eo bet reizhet anvioù-lec'h Milizag e framm ar garta ivez da skouer. Broudet ha frammet e vez ar politikerezhioù yezh lec'hel gant ar c'houlzad *Ya d'ar brezhoneg* er c'humunioù. Harpet gantañ ez eus ul lusk a-du gant ar brezhoneg o tiorren d'al live melestradurel-se hag a zo arouezius eus emdroadur sell an dilennidi war ar yezh abaoe deroù ar bloavezhioù 2000. **E-ser kenderc'hel gant an doareoù “boas” d'ober gant ar brezhoneg** (er panellerezhioù hag er skoroù kehentiñ) **eo deuet ar poent e vefe lakaet muioc'h a vrezhoneg en degouezhioù ofisielañ** (degemer, skridoù melestradurel, lidoù).

---

<sup>16</sup> Divizoù degemeret er bloavezhioù 1990.

## Klozadur ar pennad war preder ar bed foran

**Penn-ar-Bed eo an departamant a sikour ar muiañ ar brezhoneg.** Estreget arc'hantaouiñ oberoù ar bed kevredigezhel e sav an departamant oberoù a denn d'ar brezhoneg drezañ e-unan. Tennañ a ra an holl gumunioù splet eus obererezh an departamant war dachenn ar panellerezh ha lod anezho war dachenn an tañva er skolioù publik.

Aet eo ober ar c'humunioù war-raok. **Biskoazh ne oa bet labouret kenkoulz hag en un doare ken frammet** er c'humunioù e Breizh - hag e bro Vrest peurgetket – ha ma'z eus bet labouret er respet diwezhañ (2001-2008). Ur araokadenn zo bet degaset gant krouidigezh an Ofis, koublet gant kenlabour ar c'hevredigezhioù war an dachenn, Sked ha Ti ar vro Bro-Leon evit bro Vrest.

Dre-vras, degouezh dibar ar bloavezhioù diwezhañ-mañ eo dihun ar strollegezhioù foran a anavez muioc'h-mui ar brezhoneg evel un teul politikel da vezañ kaset war-raok war pep tachenn. Sked, evel emglevioù bro all, en doa kaset goulennaouegoù d'an dud war ar renk evit an dilennadegoù-kêr hag an dilennadegoù kanton e bro Vrest e 2008. **Arouezius eus an emdroadur er bed politikel eo ar respontoù a-du gant ar brezhoneg o doa kaset en-dro listennoù liesseurt.** Morse n'eo bet ar brezhoneg ken bezant er c'houlzad kabaliñ pe e programmoù ofisiel al listennoù hag evit dilennadegoù miz Meurzh 2008. Da skouer, meneget eo bet sinadur ar garta *Ya d'ar brezhoneg* war programmoù listennoù dilennadegoù-kêr zo evel Lanniliz, Lokmaria-Plouzane, Gwipavaz ha Loperc'hed<sup>17</sup>. Kadarnaet o deus ar re bet sinet ar garta ganto c'hoazh o youl da genderc'hel ganti (evel Brest, Plougastell-Daoulaz pe ar Releg-Kerhuon). **Emdroet eo spered dilennidi zo, komprenet o deus e c'hallent ober kalz muioc'h evit ar yezh** eget ar pezh a gredent betek neuze. Dre *Ya d'ar brezhoneg* o deus kumunioù zo eus bro Vrest kadarnaet pe frammet o folitikerezh yezh.

Bras a-walc'h e oa bezañs ar brezhoneg e gweledva yezhel bro Vrest e 2004 c'hoazh e-keñver ar broioù all. Bro Vrest zo ur vro m'eo aet ar skolioù war-raok met klouar-kenañ eur chomet enni evit ar pezh a sell ouzh implij ar yezh er vuhez foran memes tra. War panneloù o devez tro annezidi bro Vrest da welet brezhoneg dreist-holl. Ha pa vefe erruet pelloc'h bro Vrest eget broioù all, n'emeur nemet e deroù un argerzh a ranko kreñvaat ma c'hoantaer cheñch bazh en daboulin evit gwir. Lakaat muioc'h a vrezhoneg en degouezhioù ofisielañ (embannadennoù a bep seurt, paperioù melestradurel, degemer ar velestridi, h.a.) ha degas ar yezh d'an holl hep na vefe ezhomm ober ar goulenn eo ar pazennoù da zont.

<sup>17</sup> listennoù bet dilennet e miz Meurzh 2008 ouzhpenn-se.

# An ober gant ar brezhoneg er gevredigezh keodedel

## Perzh pouezus ar bed kevredigezhel war an dachenn-se

Bro Vrest a zo e touez ar broioù oberiantañ e-keñver ar plas roet d'ar brezhoneg er gevredigezh keodedel. Disoc'h ul labour kaset da benn gant tud a-youl vat harpet gant skipailhoù-pad micherel eo.

Lañs a zo gant ar vro-se war dachenn ar vugaligoù. Er vro-se eo bet roet lañs d'ar rouedad magourioù divyezhek hag a zo war sevel. Stank a-walc'h eo ar vuhez sevenadurel er vro e-keñver ar pezh a vez kinniget er broioù all. Lusket eo ar vuhez sevenadurel brezhonek gant ur rouedad kevredigezhel ha na vez ket sammet gant ar frammoù sevenadurel foran. Perzh an emglevioù bro a zo a-bouez evit buheziñ ar vuhez sevenadurel hag an dudi er vro o kelaouiñ an dud hag oc'h aozañ obererezhioù e brezhoneg er vro. Lusket e vez ar vuhez sevenadurel a-drugarez da zaou emglev : Sked ha Ti ar Vro Bro-Leon. Bras eo ar c'hinnig dudi evit ar vugale er vro e-keñver ar pezh a zo er broioù all.

## Treuzkas ar yezh

Studiet eo bet **an treuzkas er familhoù** gant enklask an EBSSA e 1999. Dastumet e oa bet roadennoù dre zepartamant war ar yezh bet desket gant an oadourien pa oant yaouank, an implij a rae ar re-se eus ar yezh da vare an enklask hag ar yezh treuzkaset ganto d'o bugale da 5 bloaz. Ne c'haller ket dielfennañ ar roadennoù-se e par ar broioù abalamour d'ar standilhon implijet. Met gallout a reer lakaat an tuadurioù zo bet merzet da dalvezout evit ar vro memes tra. Kadarnaet o deus ar roadennoù-se ar giladenn a weler er gevredigezh evit treuzkas ar brezhoneg er familhoù. Un torr e chadenn deskiñ ar yezh etre ar vugale hag o zud zo kaoz ez eo aet an implij eus ar brezhoneg war zigreskiñ a-hed ar c'hantved diwezhañ. Abaoe ar bloavezhioù 1980 e vez komzet galleg ouzh ar vugale gant an holl gerent pe dost.

Splann eo ez eus un ezhomm bras da gaout roadennoù resisoc'h war ar yezh komzet ouzh ar re vihan evit muzuliañ ent resis levezon an oberoù kaset da benn evit kas ar yezh war-raok, levezon ar c'helenn d'an dud deuet da skouer war ar yezh komzet er familhoù ha treuzkas ar yezhoù er familhoù. N'eus nemet un niveradeg yezhel aozet dre gumun hag a c'hallo degas seurt roadennoù.

Ezhomm a zo da skoazellañ ar rummadoù-oad evit kompezañ an torr e chadenn deskiñ ar yezh etre ar vugale hag o zud. Gallout a reer menegiñ daou ober war an dachenn-se e bro Vrest.

Eus tu ar c'hevredigezhioù da gentañ e veze kinniget stalioù labour "brezhoneg er gêr !" evit broudañ ar c'houbladoù da zesevel o bugale e brezhoneg hag evit reiñ lañs en-dro da treuzkas ar brezhoneg evel yezh vamm da vat. Aozet e veze gant Ti ar Vro Bro-Leon ur wezh ar miz e Lesneven. 20 den a gemere perzh er stalioù-labour-se. N'eus ket ken eus ar stalioù-labour-se abaoe 2005. Gouestlañ a ra ar gevredigezh he nerzh labour evit krouiñ ur rouedad magourioù e brezhoneg.

Eus tu an ensavadurioù ez eus bet roet lañs d'ur c'houlzad e 2005 gant **Kuzul-departamant Penn-ar-Bed, Klaskerien ha Treizherien Soñjoù**, gant ar pal



adskoulmañ liammoù etre ar rummadoù ha lakaat an nevezvrezhonegerien da eskemm gant ar vrezhonegerien a-vihanik. Reiñ a ra ar c’houlzad an tu da dreuzkas pinvidigezh ar brezhoneg d’ar vugale ha d’an oadourien a zesk. Talvoudekaat a ra o yezh vamm evit ar vrezhonegerien a-vihanik. Mont a ra an niver a glaskerien o kemer perzh war greskiñ a vloaz da vloaz. Skolioù bro Vrest a gemer kalz perzh er c’houlzad-se : e 2005 e oa 12 diwar ar 17 skol bet kemeret perzh er c’houlzad eus bro Vrest, 13 diwar 22 evit ar c’houlzad 2006-2007, 10 diwar 33 evit ar c’houlzad 2007/2008. **Klaskerien ha treizherien soñjoù** zo unan eus an 50 diarbenn en Agenda 21 kentañ ar C’huzul-departamant, degemeret e Gouere 2006.

## Servijoù d’an dud

Bevennet eo an ober gant ar brezhoneg evit ar servijoù d’an dud da ved ar vugaligoù evit ar mare c’hoazh e bro Vrest. Met ar vro zo er penn a-raok war an dachenn-se ha pa vefe ar rouedad magourioù divyezhek war sevel c’hoazh.


Traouigoù a ziwan war dachenn ar servijoù d’an dud war an oad memes tra. Ret eo menegiñ an intrudu war ar stern e **K.K. Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù**. Roet ez eus bet lañs gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed d’ur stummadur war an diorren sokial lec’hel etre Here 2006 ha Meurzh 2007. Da heul ar stummadur-se e vo embannet ul levr gant ur CD-ROM (fin 2008) o kinnig un tañva d’ar brezhoneg d’an dud a labour gant ar re gozh. Evit kas ar raktres da benn ez eus bet krouet ur bodad labour e Ti ar Vro Bro-Leon evit diazezañ ur c’heriaoueg a c’hallo bezañ implijet gant an dud a vicher.

Boulc’het e oa bet ur preder e 2005 gant Sked war plas ar brezhoneg en tiez evit an dud en oad. Bodet e oa bet tud a vicher ha tud a-youl vat a labour er gennad-se evit reiñ tu d’ar vrezhonegerien niverus a gaver en tiez-se da glevet ar yezh. Da heul ar bodad-se ez eus bet aozet etre 2003 ha 2007 un abadenn ur wezh ar miz e **ti retredidi Leskao e Lokournan** gant ur strollad o tont eus ar gevredigezh Skolpad Lokournan ha dre ur vuhezourez stummet war ar brezhoneg. Chomet eo a-sav an abadenn-se e 2007 peogwir n’eo ket bet douget a-walc’h an ober-se gant skipailh-pad an ti.

Gwall dreut eo plas ar brezhoneg e metoù ar servijoù d’an dud war an oad memes tra er vro evel er broioù all. Gallout a rafe ar C’huzul-departamant kemer muioc’h e kont ar brezhoneg en e bolitikerezh evit ar re gozh. Ouzhpenn-se ez eus danvez postoù-labour evit ar vrezhonegerien en tiez retredidi pa ouzer e vo 30% eus annezidi Penn-ar-Bed en tu all da 60 vloaz e 2020. Dre ar c’houlzad “Klaskerien ha treizherien soñjoù” e vez aozet abadennoù, emgavioù gant skolidi divyezhek en tiez retredidi c’hoazh.

## Bed ar vugaligoù

An degemer e brezhoneg e frammoù diwallerezh-stroll e bro Vrest – Bloavezh-skol 2007/2008



**E druz :** ar pennoù kanton

*Pemp magouri diwar ar pemp hag hanter-kant a zo er vro a ginnig un degemer e brezhoneg evit ar mare : **93 bugel a c'hall bezañ degemeret e brezhoneg e magourioù bro Vrest evit ar mare, da lavaret eo 6,3% eus ar vugale a c'hall bezañ degemeret e holl vagourioù bro Vrest.***

Lañs he deus bro Vrest war dachenn ar vugaligoù e-keñver ar broioù all. Lañs a oa ganti e 2003-2004 dija o tegemer an div vagouri nemeto e Breizh a ginnig un degemer e brezhoneg d'ar vugaligoù. Aet eo war-raok war an dachenn-se c'hoazh muioc'h evit ar broioù all war ar prantad 2004-2008. Ganet eo bet ar gevredigezh **Divskouarn** er vro e miz Du 2005. Labourat a ra ar gevredigezh-se evit brudañ ha kas an divyezhegezh abred war raok. Klask a ra sevel ha luskañ ur rouedad gant ar gerent ha gant tud a vicher e bed ar vugaligoù. Harpañ a ra raktresoù magourioù divyezhek. Breizh a-bezh eo tachenn labour Divskouarn met peder eus ar c'hwec'h magouri a ginnig un degemer e brezhoneg zo e bro Vrest (pemp diwar c'hwec'h e Penn-ar-Bed : unan e Konk-Kerne hag eben e Bear (22)). Krouet ez eus bet ur post labour e 2007 evit kas an oberoù da benn. Lec'hiet eo ar post-se e ti ar Vro Bro-Leon e Lesneven.

**Karta Divskouarn** zo ur benveg a vez lakaet e pleustr evit brudañ ha kas ar brezhoneg war-raok er magourioù abaoe diskar-amzer 2007. Ul label a roer d'ar magourioù a ra gant ar brezhoneg mod pe vod. Tri live a zo :

➤ **Divskouarn1** evit ar magourioù a ra ur wezh an amzer gant ar brezhoneg dre ginnig prantadoù reoliek er yezh ;

➤ **Divskouarn 2** evit ar magourioù m'eo ar brezhoneg ar yezh bevañ ha ma ra daou c'hoprard gantañ da nebeutañ ;

➤ **Divskouarn 3** evit ar magourioù a ra gant an hentenn dre soubidigezh : ar skipailh a-bezh a oar brezhoneg, ar brezhoneg eo yezh pennañ ar vagouri.

E bro Vrest, ez eus div vagouri gant al live 2 : **Dorn ha Dorn** e Gouenoù ha **Tamm ha Tamm** e Plougerne. Er vagouri Dorn ha Dorn e ra tri goprard gant ar brezhoneg war ar pemdez gant ar vugale. Silet eo bet ar brezhoneg tamm-ha-tamm evel ur yezh da vevañ diwar atiz ar rener. Abaoe 2000 eo bet lakaet ar brezhoneg da varregezh ret evit an implijidi nevez enfredet. D'an distro-skol 2002 ez eus bet kroget d'ober e brezhoneg gant ar vugale war ar pemdez. Kinniget ez eus bet ur stummadur div eurvezh ar sizhun d'ar skipailh etre 2002 ha 2004. Lakaet e vez ar gaoz war ar brezhoneg gant ar gerent da-geñver emweladenn degemer ur bugel nevez er vagouri.

Er vagouri Tamm ha Tamm e Plougerne ez eus bet stummet un implijadez war ar brezhoneg a-benn kinnig prantadoù kizidikaat d'ar brezhoneg d'ar vugale. Divizet eo bet gant skipailh ar vagouri kinnig un degemer e brezhoneg d'ar vugale peogwir e vez skoliataet an darn vrasañ anezho en un hentad divyezhek da-heul ar vagouri. Deuet eo ar prantadoù kizidikaat-se da vezañ un implij pemdeziek ha prantadoù pennañ an ti.

An daou lec'h degemer all e bro Vrest a zo gant al live 1. Un tañva d'ar brezhoneg a ginnig un implijadez e diwallerezh **La Farandolle** e Landerne. Un abadenn sizhuniek e brezhoneg zo e magouri **Les Pitchouns** e Lesneven abaoe 2007. Kinniget e vez gant div skolaerez war o leve. Kinniget e veze abadennoù brezhoneg gant un den a-youl vat e 2005 dija.

Un taol-esa a zo bet graet er vagouri **Ti ar bugelig** e Plouzane diwar atiz kevredigezh kerent ar skol divyezhek publik e Mae 2008. Plijet eo bet tud ar vugaligoù ha skipailh ar vagouri gant an abadennoù kizidikaat kinniget (rimadelloù, lennadennoù levrioù, kanaouennoù). Chañsoù zo e vefe kendalc'het en distro-skol o tont.

En tu-hont d'an degemer er magourioù ez eus ul labour kaset da benn e bed ar magerezed. Intrudu a ziwan e bro Vrest war an dachenn-se ivez. Abaoe miz Here 2007 e vez kinniget un abadenn vrezhonek evit bugale magerezed Lanniliz ha Treglonoù. Lakaet eo bet e darempred kevredigezh magerezed Lanniliz ha Treglonoù, **Ar moutig** hec'h anv, gant un animatourez eus kreizenn buheziñ **An Oaled**.

Bodet e vez ar vugale ur wech ar sizhun e Ti ar Vugaleaj e Lanniliz. Kinnig a ra an animatourez prantadoù buheziñ e brezhoneg. Kinniget e vez an abadenn vrezhonek da 2 strollad evit ar vugale a zo koshoc'h eget 6 miz. 24 bugel a heuilh an abadenn-se bep sizhun.


O klask renabliñ ar magerezed a c'hall degemer bugale e brezhoneg er vro emañ Divskouarn. War ar stern emañ ar renabl-se evit Kumuniezh-Kêr Brest Meurgêr ar Mor evit ar mare. Evit ar mare n'eus magouri ebet e kêr Vrest hag a ginnig degemer ar vugale e brezhoneg. N'eus nemet 5 magouri diwar 55 er vro hag a c'hall degemer bugaligoù e brezhoneg da lavaret eo 9 % eus ar frammoù hag a zegemer bugale. Evit ar mare e c'hall 6,3% eus bugale ar vro degemeret en ur vagouri kaout ul liamm bras pe vrasoc'h gant ar brezhoneg. Damheñvel eo ar feur-se ouzh dregantad ar vugale divyezhek er skol-vamm. Met ne vez degemeret en ur vagouri nemet un darn vihan eus ar vugale n'int ket skoliataet (n'eus nemet 13 % eus bugale dindan 3 bloaz departamant Penn-ar-Bed a vez degemeret en ur vagouri). Neuze n'eo ket ken bras-se dregantad ar rummad-oad a c'hall bezañ degemeret e brezhoneg a-raok ar skol a-benn ar fin.

Ouzhpenn-se eo bresk bezañs ar brezhoneg er magourioù hiziv an deiz. Diwar youl hiniannoù e teu ar brezhoneg e mont en-dro ar magourioù evit ar mare. An dalc'h a zo mirout an obererezhioù e brezhoneg pa vez cheñchamantoù er skipailhoù-pad. Gallout a ra ar strollegezhioù tiriadel (kumunioù ha frammoù etrekumunel) emellout e merañ ar magourioù brezhonek. Brasoc'h eo o galloud evit degemer ar vugaligoù eget merañ ar skolioù.

# Dudi

## Dudi evit ar vugale

*Kinnig dudi evit ar vugale e bro Vrest – Bloavezh-skol 2007/2008*



**Mont a ra an obererezhioù kinniget d'ar vugale war ziorren** ha war en em frammañ e Breizh ha neuze e bro Vrest ma vez stankoc'h an obererezhioù e brezhoneg aozet evit ar vugale eget er broioù all. Aet eo war ziorren ar binvioù evit skignañ ha brudañ an obererezhioù-se. Abaoe miz Meurzh 2005 eo krog **UBAPAR** da sevel ur renabl eus an obererezhioù dudi a vez kinniget e brezhoneg. Reiñ a ra an diaz titouroù kinniget enlinenn da c'houzout peseurt stajoù, devezhioù dizoleiñ, kampoù a vez aozet e brezhoneg dre vro. Ul labour zo bet kaset da benn evit stummañ ar vuhezourien ha renerien ar frammoù gant an UBAPAR ivez. Dalc'het e vez ar stajoù stummañ (DABU<sup>18</sup> ha DARE<sup>19</sup>) en **Oaled e Treglonoù** abaoe 2002.

Skolidi ar c'hlasoù divyezhek eo a vez degemeret gant ar frammoù-se. Diorroet mat eo ar skolioù divyezhek er vro (s.o lodenn ar brezhoneg en deskadurezh). Mankout a ra frammoù gouest da zegemer bugale ha da ginnig obererezhioù brezhonek e bro Vrest peogwir eo kreñv ar goulenn er vro gant rouedad ar skolioù divyezhek.

Chom a ra bro Vrest ar vro a ginnig ar muiañ a obererezhioù d'ar vugale e diavaez ar skol. E bro Vrest emañ ar greizenn a ginnig ar muiañ a gampoù brezhonek : **an Oaled** an hini eo, staliet e Treglonoù. 11 kamp diwar ar 25 kinniget e-pad an hañvezh 2007 a oa aozet gant an

<sup>18</sup> Diplom Aotren war ar Buheziñ (BAFA e galleg).

<sup>19</sup> Diplom Aotren war ar Renerezh (BAFD e galleg).



Oaled. Liesseurt a-walc'h eo o c'hinnig kampoù : stajoù arzel evit ar rakkrennarded hag ar grennarded, kampoù dizoleiñ ar mor, dizoleiñ ar sirk pe an natur, marc'hegezh evit ar vugale.

**Muioc'h-mui a obererezhioù dizoleiñ a vez kinniget d'ar vugale zoken.** Enfredet en deus **Mirdi ar Vezhinaerien** e Plougerne ur buhezour brezhoneger abaoe 2007 evit luskañ devezhioù dizoleiñ ha degemer klasoù divyezhek. Dont a ra an darn vrasañ eus ar skolidi eus bro Vrest met lod a zeu eus broioù all ivez. Un dek klas bennak a oa bet degemeret ar bloavezh kentañ ma oa bet kinniget.

Gallout a ra **Kreizenn Bageal ar Veilh Vor (Moulin-Mer)** staliet e Logonna-Daoulaz degemer klasoù e brezhoneg. Abaoe C'hwevrer 2008 ez eus ur buhezour brezhoneger er skipailh-pad. E distro-skol 2008 e krogo obererezh ar c'hlasoù mor da vat. N'o deus ket bet amzer da vrudañ ar c'hinnig nevez-se c'hoazh. Mont a ra kreizenn bageal Rostivieg lec'hiet e Loperc'hed war an hent-se ivez. Aozet ez eus bet ur staj bageal ur sizhunvezh e Gouere 2008 lusket gant ur vonitourez brezhoneger. Un taol-esa e oa evit ar greizenn-se.

Renablet ez eus **8 framm** a ginnig klasoù dizoleiñ pe kampoù brezhonek er vro. Obererezhioù hengounel a vez kinniget d'ar skolidi evel ar pezh a vez kinniget gant **Mirdi ar micherioù kozh bev** pe **Skolig al Louarn** met ivez obererezhioù a glot muioc'h gant c'hoantoù ar vugale hag ar grennarded dreist-holl evel klasoù dizoleiñ ar bageal, ar sirk pe an arzoù.

Digor eo ar c'hoariva d'ar vugale ivez e bro Vrest : lusket e vez stalioù-labour c'hoariva sizhuniek evit ar vugale gant **Strollad Plougin** (e Brest hag e Plougin), gant **Strollad ar Vro Bagan** (e Plougerne) ha gant Théâtre **Capella** abaoe distro-skol 2006 (e Plougastell-Daoulaz). Kinniget e vez stajoù c'hoariva d'ar vugale e-kerzh ar vakañsoù-skol ivez gant Strollad Plougin ha gant Strollad ar Vro Bagan.

Aet ez eus obererezhioù zo da get war dachenn an dudi kinniget d'ar vugale ivez d'ar memes koulz memes tra. Kinniget he deus ar gevredigezh kerent **Dudi** e Plouzeniel un tañva d'ar brezhoneg ur wech ar sizhun war ar bloavezh 2006/2007 . Degemeret e oa bet 12 bugel etre 3 ha 9 bloaz. Chomet eo a-sav en distro-skol 2007 peogwir n'eus bet kavet buhezour brezhoneger ebet. O klask ur buhezour evit kinnig en-dro an obererezh-se emaint.

Un diouer a obererezhioù zo war danvezioù diouzh c'hoantoù ar grennarded evel ar sonerezh tekno, ar graf hag all. Aozet e oa bet ur staj Hip-Hop gant ar gevredigezh Miks-Divisk e 2004. Met n'eo ket oberiant ken ar gevredigezh-se evit poent.

## ➤ Arvestoù ha Gouelioù

Abaoe 2004 e vez aozet gant **Daoulagad Breizh** troiadoù filmoù bevaat advouezhiet e brezhoneg gant **Dizale** evit ar vugale. Ur c'henlabour a zo etre Daoulagad Breizh ha kevredigezhioù lec'hel evit aozañ an abadennoù : Ti ar Vro Bro-Leon ha Sked a zo ar gevelerien e bro Vrest.

1 400 bugel o deus kemeret perzh en abadennoù e bro Vrest evit troiad 2006-2007 gant 8 abaden aozet, o tont eus 24 skol (6 505 e Breizh a-bezh). Aet eo an niver a berzhidi war greskiñ e-keñver troiad 2005-2006 :+28%.

Kenaozet e vez abaoe 2004 gouel ar brezhoneg er skol, **Peskig Ebrel**, gant Sked, Ti ar Vro Bro-Leon, Diwan, Dihun ha Div Yezh. Reiñ a ra an tu ar gouel-se da lakaat war wel ar brezhoneg er skol en tri hentad divyezhek, ha da ziskouez al labour kaset da benn gant ar vugale.

Daoust d'ar c'hinnig bezañ klokoc'h amañ eget e lec'h all, merzout a reer n'eus stal reoliek ebet evit pleustriñ war an arzoù pe ar sportoù e brezhoneg. Bro Vrest ha kêrioù evel Brest, Landerne, Lesneven pe Lanniliz peurgetket a vefe lec'hioù dereat evit diazezañ seurt traoù moarvat.

## Dudi evit an oadourien

Aozet e vez an obererezhioù e brezhoneg d'an dud deuet gant ar c'hevredigezhioù a ginnig kentelioù brezhoneg. Tizhet e vez an dud a zesk brezhoneg gant an obererezhioù-se neuze.

Oberoù a denn d'ar glad a vez kinniget dreist-holl d'an dud deuet. A drugarez da zaou framm pennañ dreist-holl e vez aozet gweladennoù glad e brezhoneg peurvuiañ : Sked ha Ti ar vro Bro-Leon. Gweladennoù e brezhoneg a vez aozet da vare devezhioù ar Glad e Gwengolo gant Sked : kinniget ez eus bet gweladenniñ chapelioù e Plougastell-Daoulaz evit devezhioù 2007 da skouer, kêr Vrest e 2006. Darvoudoù all a vez ur wezh an amzer gant gweladennoù e brezhoneg evel gouel Berc'hed-gouel ar chandelour pe en aozadurioù zo evel Abati Daoulaz.

Stalioù kan ha c'hoariva a vez kinniget d'an dud deuet gant Strollad ar Vro Bagan.

Brudet eo Bro-Leon evit he beilhadegoù hag a zesach ur bern tud. Aozet e vez an darn vrasañ anezho gant **Dastum Bro-Leon** e meur a gumun eus ar vro. Prezegenoù ha kaozeadennoù a vez aozet ingal e brezhoneg er vro ivez evit komz eus ul levr da skouer. Klasket e oa bet reiñ lañs d'ur c'hafe Filo gant Sked evit komz ha breutaat e brezhoneg war temoù a denn d'ar brederouriezh e 2007. N'eo ket aet en-dro met bodet e vez ur strollad tud bep trede Yaou eus ar miz evit un "**emgav gant**" evit komz eus un abadenn, ul levr, ur skrivagner.

War dachenn implij ar yezh e bed ar sport ez eus un dra nevez o tont gant ur sport nevez e Breizh : ar vell-droad iwerzhonat. E bro Vrest e kaver unan eus skipailhoù Mell-droad Iwerzhon : ar **Gaelic Football Bro Leon**. Sinet o deus an emglev Ya d'ar brezhoneg. E brezhoneg eo youc'hadenn ar skipailh a vez huchet gant an holl e penn kentañ ar c'hrogadoù, "*Bro Leon , Nerzh ha Kalon*". Ger-stur ar strollad eo ivez. 7 ezel eus ar strollad diwar 30 zo brezhonegerien. Troet e vo reolennoù ar sport e brezhoneg war o intrudu. Bihan eo levezon ar sport nevez-se e Breizh evit ar re yaouank c'hoazh memes tra.

Liammet gant an deskiñ e vez kinniget stajoù yezh dre soubidigezh gant Ti ar Vro Bro-Leon abaoe 2004, **stajoù B&B, Bevañ e Brezhoneg**, gant un endro hollvrezhonek : kentelioù a vez diouzh ar mintin ha goude merenn e kinniger obererezhioù e brezhoneg (c'hoariva, baleadennoù, c'hoarioù,...). Bod a ginniger d'ar stajidi gant brezhonegerien ar vro. Skoazellet eo bet **Bro an Aberioù** gant ar programm LEADER+ evit aozañ ar stajoù-se. Kinnig obererezhioù e brezhoneg zo un doare da vuhezkaat ar vro ha da dreuzkas ar yezh. Ouzhpenn-se e krou ul liamm etre an nevezvrezhonegerien hag ar vrezhonegerien a-vihanik.

## Arvestoù

### ➤ C'hoariva

Bev-mat eo hengoun ar c'hoariva kevredigezhel e bro Vrest, ma kaver 6 strollad c'hoariva (diwar 18 a zo renablet e Breizh). Tri anezho a zo bet savet pell zo hag a zo oberiant-kenañ er vro hag e Breizh a-bezh : **Strollad ar Vro Bagan** (Plougerne) krouet e 1973 ; **Teatr Penn ar Bed** krouet e 1973 ha **Strollad Plougin** krouet e 1975. Nevez zo eo bet krouet an tri all : **Strollad Lesneven** krouet e 2003 gant skolidi bet o teskiñ brezhoneg gant "Evit ar Vretoned", **Hemon Prod** strollad c'hoariva Skolajoù Diwan ar Releg ha Gwiseni ha **Bitrak** bet krouet e Genver 2006 gant ar pal sevel pezhioù c'hoari pe abadennoù e brezhoneg hag e galleg evit ar vugale.

An darn vrasañ eus ar pezh a vez c'hoariet zo pezhioù-c'hoari troet hag azasaet d'ar brezhoneg gant ar strolladoù. Dibar eo roll pezhioù-c'hoari strollad ar Vro Bagan er c'heñver-se : an darn vrasañ eus e bezhioù a zo bet skrivet gantañ. Azasaat a ra skridoù skrivagnerien

brezhonegerien evel Per Jakez Helias, Roparz Hemon, Naig Rozmor pe Jakez Riou. Skrivañ ha leurenañ a ra pezhioù-c'hoari evit ar vugale ivez hag abadennoù bras Tan ha Kurun.

Digor mat a-walc'h eo kreizennoù sevenadurel ar vro d'ar pezhioù c'hoari brezhonek. C'hoariet e vez ar pezhioù-c'hoari e salioù-abadennoù ar vro meret gant an tiez-kêr peurvuiañ. Div greizenn sevenadurel-kêr a embann ur youl da virout ur plas d'an arvestoù breizhat ha brezhonek da skouer en o frogrammadur : kreizenn sevenadurel "Astrolabe" er Releg-Kerhuon (divyezhek eo anv o maread sevenadurel : "Escales/Ehanoù") hag "Avel-Vor" e Plougastell-Daoulaz.

## ➤ Filmoù

Dister eo c'hoazh plas ar brezhoneg er sinema. Teulfilmoù eo an darn vrasañ eus ar filmoù a vez produet e brezhoneg. Skignet e vez ar pezh a vez produet e brezhoneg er chadennoù skinwel. A-drugarez d'ar c'henlabour etre Daoulagad Breizh ha Dizale e krog ar produerezh klewelet brezhonek da vezañ skignet er salioù sinema.

Krog eo Daoulagad Breizh (staliet e Douarnenez) da aozañ abadennoù skignañ evit an dud deuet abaoe 2007 : aozet ez eus bet un abadenn e Brest o skignañ "**Enez Black Mòr**" un dresadenn vev hir. N'eus ket bet desachet kalz a dud : 10 den o deus kemeret perzh en abadenn. Teulfilmoù a zo bet skignet e 2008 e Brest.

## ➤ Festivalioù

Roet ez eus bet lañs d'ur festival gant **Sked** e 2007 : **Nevez Amzer** gouel sevenadur Breizh e bro Vrest. Abadennoù sonerezh, dañs, kan, pourmenadennoù, pezhioù-c'hoari, tresadennoù bev brezhonek zo bet kinniget d'an arvesterien e-pad an darvoud-se.

Reiñ a ra **Kann al Loar**, festival Landerne a vez aozet e deroù miz Gouere, ur plas bras d'an abadennoù brezhonek : stalioù labour hag abadennoù evit ar vugale, pezhioù-c'hoari e brezhoneg, stajoù yezh.

**Gouel Yezhoù ar Bed**, aozet gant ar strollad **Langues du Tonnerre** e Brest a zo un darvoud evit brudañ al liesyezhegezh hag ar brezhoneg.

Abaoe 2003 e vez aozet ur gouel gouestlet d'ar c'hoariva, d'ar filmoù ha d'ar beilhadegoù brezhonek, **Festival war al leurenn**, gant Strollad Plougin e bro Vrest : e 2008 ez eus bet kinniget abadennoù c'hoariva e Plourin, e Lesneven hag e Plougin, ur staj c'hoariva evit ar vugale e Brest hag ur veilhadeg e Brelez. C'hoant o deus bet an aozerien reiñ tro d'ar re a sav pezhioù pe abadennoù e brezhoneg da gaout an tu da ziskouez o labour e korn bro Vrest. Kinniget eo an abadennoù evit ar vrezhonegerien a-vihanik, evit ar re a zesk hag evit bugale ar skolioù divyezhek. Fellout a ra d'an aozerien ledanaat tachenn ar gouel en ur ginnig abadennoù e kumunioù all eus bro Vrest.

Muioc'h a vrezhoneg a oa bet gant **Brest 2008** eget an dalc'hoù tremenet. Sinet o deus an emglev *Ya d'ar brezhoneg* e miz Ebrel 2007. Pajennoù e brezhoneg a gaver war skorouñ kehentiñ evel al lec'hienn Genrouedad (met e galleg hepken emañ ar follennoù-nij).

## Klozadur ar pennad war an dudi

Aozet e vez an obererezhioù brezhonek kinniget d'ar vugale **gant ar bed kevredigezhel** c'hoazh. Meret e vez ar c'hreizennoù dudi gant ar gennad prevez : kevredigezhioù peurvuiañ, evel an Oaled, ar strolladoù c'hoariva pe c'hoazh ar greizenn vageal da skouer.

**Ezvezant eo ar brezhoneg eus ar gweledva yezhel hag eus an obererezhioù pe darvoudoù kinniget en aveadurioù sevenadurel ha sport foran c'hoazh.** Ne ginnig ket Océanopolis gweladenniñ al lec'h e brezhoneg d'ar c'hlasoù divyezhek da skouer, evel ma vez graet er Maezioù Frank e Roazhon evit Mirdi Breizh. Un aveadur foran dindan Kumuniezh-kêr Brest Meurgêr ar Mor eo koulskoude. Meret eo gant ar Sopab<sup>20</sup>, ur c'hevredad armerzh kemmesk dre gevrannoù<sup>21</sup> hag a ra war-dro aveadurioù foran all evel Penfell pe ar C'houarz, lec'hioù pennañ ar vuhez sevenadurel e bro Vrest. Sinet eo bet *Ya d'ar brezhoneg* gant Brest Meurgêr ar Mor e 2006, koulskoude. N'eus plas ebet evit ar brezhoneg en Abati Daoulaz kennebeut, ul lec'h a-bouez e buhez sevenadurel ar vro, hag a zo da Guzul-departamant Penn-ar-Bed, meret abaoe miz Genver 2006 gant un DFKS<sup>22</sup> « Chemins du patrimoine en Finistère ».

**Tachennoù a zo da c'hounit gant ar strollegezhioù foran e bed an dudi e brezhoneg evit ar vugale : diorren an degemer e brezhoneg er frammoù ha divyezhekaat ar gweledva yezhel a vez meret ganto evit respont da c'houlenn ar rouedad skolioù divyezhek da skouer.**

N'eo ket emdroet kalz an obererezhioù brezhonek kinniget d'an dud deuet abaoe 2004. Padal ez eus muioc'h a abadennoù pe a obererezhioù brezhonek kinniget d'ar vugale e 2008 eget e 2004. Aet eo war greskiñ an niver a gampoù vakañsoù e brezhonek da skouer.

**Ouzh glad Breizh** (glad sevenadurel ha glad naturel) **e chom stag an obererezhioù brezhonek kinniget e bro Vrest**, n'eus kazi netra war dachennoù nevez evel ar Slam da skouer pe dudioù boutin evel ar vell-droad, ar rugbi pe ar sonerezh Rock. Aozet e vez an darvoudoù brezhonek gant an Emsav. Diskouez a ra eo bev ar yezh er gevredigezh. Klask a ra an Emsav respont d'ur goulenn sokial na vez ket respontet dezhañ gant ar strollegezhioù foran.

**Brest 2008** eo an darvoud ofisiel nemetañ en deus graet un tamm gant ar brezhoneg. Ne zalc'h ket kont an darvoudoù aozet gant ar strollegezhioù lec'hel (evel « les jeudis du port » aozet gant ti-kêr Brest) eus ur politikerezh yezh youlek. N'eo ket implij ar brezhoneg un dezverk eus karta c'hrafek aveadurioù foran bro Vrest evel m'eo e Porzh Mirdi Douarnenez.

<sup>20</sup> An div drederenn eus e gevala a zo gant Kêr Vrest ha Brest Meurgêr ar Mor hag an drederenn all gant oberourien eus ar gennad prevez (Crédit Mutuel de Bretagne, Crédit Agricole, ...).

<sup>21</sup> Société anonyme d'économie mixte.

<sup>22</sup> Diazevadur Foran a Genlabour Sevenadurel (Etablissement Public de Coopération Culturelle e galleg).

# Buhez speredel

**Ar gatoligiezh** eo a zo trec'h war ar relijionoù hag ar c'hredennoù all e buhez speredel Breizh (hag e Bro-Leon peurgetket). Ganti e vez implijet ar brezhoneg a-wechoù, dre levezon an hengoun alies. Bro-Leon (ha neuze bro Vrest) zo unan eus ar c'hornioù-bro ma c'haller bevañ e feiz e brezhoneg e lec'hioù zo.

## Savboent an eskopti hag ober ar bed kevredigezhel

**Bodad “Yezh ha sevenadur Breizh” eskopti Kemper ha Leon** (bet krouet e 2001) zo e gefridi kas an ober gant ar brezhoneg war-raok e buhez Iliz an eskopti « là où c'est possible et souhaitable », el liderezh hag er c'hatekiz da skouer. Gant ar bodad-se e oa bet embannet un notenn ditlet “La place de la culture et de la langue bretonnes dans nos rassemblements de prières” e 2004, ma oa kinniget pazennoù disheñvel da gemer ar brezhoneg e kont el lidoù. Dre ma ne oa ket deuet kalz a draoù da-heul an destenn-se ez eus bet lakaet e plas, abaoe deroù 2007, dileuridi lec'hel zo o c'hefridi kas ar brezhoneg war-raok er parrezioù.

Gwall vihan e chom plas ar yezh war lec'hienn an eskopti atav (ne gaver ket enni renabl an oferennoù brezhonek ken). Nec'hus eo ouzhpenn-se merzout n'eus stummadur ebet war ar brezhoneg e kloerdi an eskopti Kemper ha Leon (heñveldra eo e kloerdioù all Breizh e gwirionez). Un tañva d'ar brezhoneg da nebeutañ ne vefe ket diaes kinnig koulskoude, gant sikour ar c'hevredigezhioù kelenn d'an oadourien da skouer. Met n'eo ket harpet ar mennozh-se daoust d'ar youl embannet a sav a-du gant ar brezhoneg. **Hiziv an deiz, n'eus nemet pevar beleg dindan 50 vloaz e Breizh a-bezh a oar brezhoneg.** Gant sifroù evel-se eo splann emañ teñval amzer-da-zont al liderezh brezhonek ma ne vez ket divizet stummañ ar gloer war ar brezhoneg.

Gant strivoù kevredigezhioù pe kumuniezhioù damheñvel ha hiniennoù e vez kaset ar brezhoneg war-raok e metoù ar relijion ivez. Ha kevredigezhioù a bouez bras war an dachenn-se a gaver e bro Vrest e gwirionez.

**Minihi Levenez**, da gentañ penn, zo ur greizenn speredel e brezhoneg a glask kas war-raok an abostolerezh e brezhoneg. Un ti-embann eo (“An Testamant Nevez”, levrioù evit ar c'hatekiz, pladennoù arc'hant gant kantikoù, h.a.) koulz hag ur gumuniezh prederiañ ha pediñ e brezhoneg (abadennoù skingomz, aozañ pirc'hirindedoù, h.a.).

Ar gevredigezh **Emglev an Tiegezhioù** a glask krouiñ liammoù etre ar familhoù. Ar gelaouenn “Imbourc'h” a bled gant prederouriezh, doueoniezh, h.a. a vez embannet ganti ivez. Mammenn daou gelc'hlizher kaset dre bostel eo : "brezhonegeniliz" a denn d'ar pezh a vez graet e brezhoneg war-dro ar relijion gatolik (skignet e vez abaoe 2000 met n'eus bet kemennadenn ebet abaoe an diskar-amzer 2007) hag “Etre ar Faou ha Landerne” a gelaou ingal war ar c'hoarvoudennoù brezhonek e gevred bro Vrest (an oferennoù en o zouez).

E-touez abadennoù brezhonek skingomz rouedad RCF staliet e bro Vrest (RCF Rivages), un abadenn sizhuniek un eurvezh gouestlet d'ar feiz ha d'ar c'hantikoù a vez lusket e brezhoneg gant Job an Irien. Padal n'eo ket an abadennoù brezhonek all, da lavaret eo an darn vrasañ eus programmoù brezhonek ar skingomz, gouestlet d'ar vuhez speredel kement-se met kentoc'h d'ar vuhez sevenadurel lec'hel pe breizhat.

A-hend-all, kantikoù hengounel a vez pleustret gant **lazoù-kanañ** niverus e bro Vrest, en o zouez bodadoù brudet ha troet-tre gant ar brezhoneg evel Allah's kanañ pe Ensemble Choral du Bout du Monde (staliet er Folgoad). Da-geñver Kann al Loar e Landerne e vez dalc'het Koñkour Lazioù-kanañ Breizh (aozet gant ar gengevredigezh Kanomp Breizh , siner *Ya d'ar brezhoneg*) abaoe 2005.

## An oferennoù

Unan eus al lec'hioù diwezhañ e Breizh ma c'heller kavout oferennoù sizhuniek e brezhoneg penn-da-benn eo **Minihi Levenez** e Trelevenez. Un abadenn relijiel sizhuniek (aviel, sarmon, pedennoù ha kantikoù) a vez skignet gant **Arvorig FM** ivez. E **Landerne**, a-hend-all, e vez un oferenñ vrezhonek bep eil miz. Met peurliesañ e vez dalc'het an oferennoù brezhonek (pe breizhek) da-geñver pardonioù pe gouelioù bloaziek (evel ar "Pemp Sul" e penniliz ar Folgoad, Pardon Itron Varia Rumengol, gouel Kann al loar).

Implijet e vez stankik ar brezhoneg en ilizoù bro Vrest dre ar c'hantikoù hengounel memes tra. E-touez erbedadennoù bodad "Yezh ha sevenadur Breizh" eskopti Kemper ha Leon emañ an ober gant ar c'hantikoù-se.

A-hend-all, gwech an amzer e vez aozet e bro Vrest abadennoù kristen evel ar veilhadeg "Kan ar Vuhez" ma vez kinniget arvestoù ha kantikoù brezhonek gant bugale ha tud yaouank war tem Gouel Fask. Un abadenn divyezhek war Gwerz Nedeleg en doa kinniget Strollad ar Vro Bagan en iliz Plougerne e 2007.

## Ar c'hatekiz

Ur ral eo kaout tro da gaout kelennadurezh war ar relijion gristen e brezhoneg hiziv an deiz ; katekiz e brezhoneg a vez kinniget e Landerne div wech ar miz memes tra. E lec'hiadoù zo en hentad divyezhek katolik hag en hentad dre soubidigezh (er skolajoù peurgetket) e vez kinniget katekiz pe aluzenerezh e brezhoneg ivez. Gant **Emglev an Tiegezhioù** e vez aozet kampoù katekiz a-hend-all.

## An embann

War dachenn an embann e brezhoneg eo dreist pouez bro Vrest ivez : sez 16 framm bet embannet d'an nebeutañ ul levr pe kelaouennoù brezhonek ganto etre 2000 ha 2006 a gaver enni, da lavaret eo tost un drederenn eus an hollad bet kontet e Breizh evit ar prantad-se. War zigreskiñ eo aet pouez bro Vrest en embann er bloavezhioù diwezhañ-mañ avat pa seller ouzh an niver a ditloù embannet bep bloaz.

Un taol fall evit an embann e brezhoneg eo bet freuz-stal **An Here**<sup>23</sup> e 2004, an ti-embann brezhonek brasañ e Breizh d'ar mare-se hag a implije 9 den. Levrioù evit ar vugale a veze embannet gantañ dreist-holl, koulz ha bannoù-treset, met ivez romantoù pe c'hoazh ar geriadur unyezhek brezhonek kentañ. An degouezh-se en deus gwashaet c'hoazh tuadur, kroget e 2002, an niver a levrioù embannet e bro Vrest da vont war zigreskiñ : tremenet eur eus un 40 levr bennak embannet e deroù ar bloavezhioù 2000 d'un 20 bennak e 2005 tra ma chom hollad Breizh war-dro 80 levr bep bloaz, well-wazh.

**Emgleo Breiz** (hag ar c'hevredigezhioù bodet ennañ : Ar Skol Vrezoneg, Brud Nevez, Skolig al Louarn) eo embanner pouezusañ bro Vrest. Oberennoù lennegel eo a vez produet gantañ evit ar pep brasañ (romantù, danevelloù, pezhioù-c'hoari, h.a.) met ivez studiadennoù ha levrioù yezhoniel, pe c'hoazh un nebeud levrioù evit ar vugale.

---

<sup>23</sup> Diazezet e Plougastell-Daoulaz.

N'eo ket ken oberiant an ti-embann **Mouladurioù Hor Yezh** abaoe 2004. Met bras e chom katalog embannadurioù an ti-se (100 titl), ezel eus Kuzul ar Brezhoneg. Gant **Delioù** e vez embannet levrioù lennegel hag un darn vat eus e broduerezh zo graet evit ar vugale.

Embannerien all zo arbennikaet war an embann studiadennoù kentoc'h. **KEBK** (Kreizenn an Enklaskoù Breizhek ha Keltiek<sup>24</sup>), da gentañ-penn, a embann disoc'h enklaskoù war dachenn ar sokioyezhonezh hag al lennegezh vrezhonek. Embannadurioù relijiel ha doueoniezh eo tachenn pennañ an tiez-embann **Imbourc'h** ha **Minihi Levenez**.

Tri zi-embann nevez eus bro Vrest o deus kroget da embann levrioù e brezhoneg abaoe 2004 : **Aber**, **Embann Kêredol** hag **Editions Label LN**. Levrioù brezhonek a c'hell bezañ kinniget gwech an amzer gant embannerien all evel **Armeline** pe **Armorica** ha pa ne vefe ket an embann brezhonek o obererezh pennañ.

E bro Vrest e vez embannet kelaouennoù e brezhoneg ivez. Kazetennoù lennegel int kentoc'h : **Brud Nevez** hag **Aber** (pennadoù e brezhoneg a gaver ingal e **Hopala!** ivez). E Gouenoù emañ lec'hiet skridaozañ **Pobl Vreizh**, anezhi ur gelaouenn geleier politikel a embann pennadoù e brezhoneg war pep niverenn. Ur bajennad e brezhoneg zo er sizhuniegou **Le Courrier du Léon** ha **Le Progrès du Finistère** ivez.

**Bara Gwin**, ur barodienn eus ar c'helaouennoù "people", a oa bet krouet e Brest e 2002 gant ur stil fent nevez e bed ar c'hazetennoù brezhonek. Ne zeu ket mui er-maez abaoe miz Eost 2003.

Ur stal levrioù arbennikaet war danvez Breizh a gaver e Brest, **Ar Bed Keltiek**. Aes eo kavout embannadurioù brezhonek eno met levrioù brezhoneg a gaver ivez diouzh an droe stalioù levrioù all.

## Ar mediaoù

### Er skinwel

#### ➤ France 3 Ouest ha France 3 Iroise

Degemer a ra bro Vrest holl abadennoù brezhonek France 3 Ouest. **Digemm eo chomet an amzer gouestlet d'ar brezhoneg e programmoù ar chadenn-se abaoe 2003** : 94 munut bep sizhun e kael 2007/2008. Cheñchet eo bet un tammig an abadennoù kinniget ha mare ar skignadennoù.

Programmoù evit ar re yaouank a zo. "**Mouchig-Dall**" (19 munut) eo an abadenn nemeti e Frañs graet evit ar vugale en ur yezh all estreget ar galleg ; krouet e oa bet e 2003 ha skignet e vez d'ar Merc'her vintin. "**Te ha Me**" (8 munut) a ginnig ur pennad-kaoz etre ur brezhoneger yaouank hag al luskerez ; krouet e oa bet e 2004 ha skignet e vez d'ar Sadorn vintin (lidet e oa bet he 100<sup>vet</sup> abadenn e miz Du 2007).

Lodennet eo bet an abadenn "**Red an Amzer**" e 2005 hag e 2006 : liesseurtoc'h eo ar programmoù bremañ ha strewet en amzer int. Roet ez eus bet lañs d'un abadenn war ar c'hrouiñ sevenadurel (levrioù, pladennoù, c'hoariva,...) e 2006, "**Digor din**" (18 munut skignet d'ar Sadorn vintin). Digresket eo bet pad ar magazin "Red an Amzer" da 26 munut pa oa 52 munut e 2003 (bodañ a rae an holl brogrammoù e brezhoneg d'ar c'houlz-se : ar programmoù evit ar re yaouank, ar programmoù sevenadurel ha re ar vuhez kevredigezhel).

---

<sup>24</sup> CRBC e galleg.

Ouzhpenn an abadennoù skignet e Breizh velestradurel e resever e bro Vrest keleier “**An Taol Lagad**” (4’30) skignet da 12e15 eus al Lun d’ar Sadorn. E bro Vrest emañ staliet skourr lec’hel France 3 Iroise.

Gallout a reer sellet ouzh holl abadennoù brezhoneg France 3 enlinenn war o lec’hienn Genrouedad ivez. Abaoe miz Mae 2008 ez eus ul lec’hienn gouestlet penn-da-benn da v”**Mouchig-Dall**”. Un nevezenti zo bet war France 3 e miz Ebrel 2007 : ar redadeg war varc’h-houarn Tro Bro Leon a oa bet displeget e brezhoneg ha skignet enlinenn war-eeun : 1 200 gwiader o doa heuliet an abadennoù-se.

### ➤ TV Breizh

**TV Breizh** a c’hall bezañ degemeret e bro Vrest evel e Frañs a-bezh dre ar fun hag al loarell. Cheñchet he deus ar chadenn he linenn-stur penn-da-benn en distro-skol 2003 da-heul nac’hadennoù ar CSA evit reiñ an aotre dezhi da vezañ skignet war ar rouedad hertzian pe dre an SND (TNT e galleg). Heuliadennoù ha filmoù skinwel o deus kemeret plas an darn vrasañ eus ar programmoù breizhek. Paouezet eo bet gant an abadennoù evit ar vugale ha neuze gant an advouezhiañ seurt programmoù. Divizet ez eus bet advouezhiañ abadennoù evit an holl kentoc’h. Adalek 2004 ez eus bet skignet **filmoù advouezhiet e brezhoneg** (*Marion ar Faoued* e 2004 hag *An Afer Sezneg* e 2005) heuliadennoù da eil (*Perry Mason* adalek fin 2004 ha *Columbo* abaoe miz Gwengolo 2006). Skignet ez eus bet evit ar wech kentañ e 2006 ur film sinema advouezhiet e brezhoneg *Lañselod*, heuliet diwezhatoc’h gant *Ne vimp ket prenet*, *Shakespeare in love*, *Beethoven*, *Apollo 13*, h.a.

**War zigreskiñ eo aet an amzer gouestlet d’ar brezhoneg e programmoù TV Breizh abaoe 2004 dre-vas.** E kael programmoù 2007/2008, ouzhpenn skignadennoù pe adskignadennoù an abadennoù advouezhiet, e chome ar magazin sizhuniek “**Mil Dremm**” (9 munut) an abadenn vrezhonek nemeti. Titloù divyezhek a zo e “**TV Breizh info**”, ar c’heleier pemdeziek (7 munut). Ne chom abadenn brezhonek ebet e kael programmoù 2008/2009.

### ➤ Chadennoù lec’hel

Skinwelioù lec’hel zo o tiwanañ muioc’h-mui dre an SND<sup>25</sup>, ar fun, ar Genrouedad pe ar gwagennoù hertzian zoken. Diwar skouer TV Rennes ha TéléNantes e vefe brav da chadenn skinwel lec’hel ar vro skignañ abadennoù brezhonek. Homañ n’eo ket diazezet da vat c’hoazh ; e dibenn 2007 hepken en doa graet ar CSA ur galv d’an emstriverien evit tolead Brest.

## Er skingomz

War ziorren eo aet an holl abadennoù brezhonek kinniget war gwagennoù ar skingomzoù e bro Vrest pa vezont bodet : **tro-dro da 140 eurvezh** a vez skignet bep sizhun er gael programmoù 2007/2008 pa veze kinniget 120 eurvezh a brogrammoù brezhonek e 2003/2004. En tu all da beder fempvedenn eus ar programmoù-se a vez kinniget gant ar skingomzoù kevredigezhel c’hoazh. Dont a ra ar c’hresk-se eus an eskemmoù abadennoù a ya war greskiñ etre an div skingomz hollvrezhonek da skouer.

Goloet eo bro Vrest a-bezh gant abadennoù France Bleu Breizh Izel. Stabil e oa chomet ar c’hemmentad abadennoù brezhonek skignet war France Bleu Breizh Izel betek 2006. Stadet e oa bet un adkreizennañ e 2006 : tennet e oa bet ur prantad a bouez digant ar programmoù lec’hel evit mad un abadenn produet e Pariz. Un digresk a oa bet evit an abadennoù e brezhoneg gant kael an distro-skol 2006 : tennet e oa bet un eurvezh digant abadenn bemdeziek an noz. Adkinniget e vez un abadenn produet gant France Bleu Breizh Izel da greisteiz gant un abadenn bemdeziek divyezhek (Culture Breizh, 90 munut) da lavaret eo e vez

<sup>25</sup> Skinwel Niverel Douarel (TNT e galleg).



kinniget kronikennoù e brezhoneg war troioù-lavar hag e vez aterset un den pedet hag a c'hall bezañ ur brezhoneger.

Skignet e vez bommoù keleier pemdeziek e brezhoneg, “Keleier Breizh” (7 munut), peder gwezh an deiz. Skignet e vez un abadenn bemdeziek e fin an endervezh (“An abadenn” 90 munut). Div abadenn a vez skignet e-pad an dibenn-sizhun : “Hentoù treuz” (3 eurvezh troc’het gant bommoù keleier e galleg) ar Sadorn ha “Boued spered” (div eurvezh troc’het gant bommoù keleier e galleg) skignet d’ar Sul.


Kinniget e vez war-dro **15 eurvezh a programmoù brezhonek rik** bep sizhun e kael programmoù 2007-2008 (20 eurvezh o kemer e kont ar programmoù divyezhek). Deuet eo a-benn France Bleu Breizh Izel da virout hec’h eurvezhoù programmoù brezhonek abaoe 2004 daoust d’an adkreizennañ bet e 2006.

### War-du ur rouedad skingomz kevredigezhel e brezhoneg

Evit ledanaat ar c’hinnig abadennoù brezhonek e kenlabour ar skingomzoù kevredigezhel a ginnig abadennoù brezhonek : krouet o deus ur rouedad eskemm abadennoù. Aet eo an div skingomz hollvrezhonek, Arvorig FM ha Radio Kerne, pell en aozadur ar rouedad-se : ouzhpenn eskemmanñ programmoù e lakont o barregezhioù e boutin ha kenbrodouiñ a reont programmoù. Gant ar gevredigezh **Brudañ ha skignañ** ez a en-dro ar c’henlabour-se. Bodet eo ar pevar radio kevredigezhel lec’hel a eskemm o abadennoù kenetrezo er framm-se bremañ. War ar stern ez eus ur raktres keleier evit Breizh a-bezh gant ur c’henlabour etre ar pevar radio ezel eus ar Rouedad. Pevar c’hazetenner a labour war ar raktres-se harpet gant Kuzul-rannvro Breizh.

Skignañ a ra Arvorig FM war-dro 52 eurvezh abadennoù brezhonek bep sizhun (hep kemer e kont ar programmoù sonerezh).

*Dasparzh ar programmoù skignet gant Arvorig FM diouzh o doare hag o orin – Kael programmoù 2007/2008*



An hanter eus ar programmoù a glever war Arvorig FM a zo skignadurioù kentañ.

E Landerne emañ staliet **Arvorig FM** (ar skingomz kevredigezhel lec’hel eus Bro-Leon krouet e 1998 hag a skign e brezhoneg hepken) abaoe 2005. Klask a ra ar skingomz lec’hel-se skignañ e bro Vrest a-bezh. Met nac’het e oa bet gant ar CSA reiñ ur frekañs nevez e Brest e

2007. Roet ez eus bet un eil frekañs dezhi e Landerne e 2008 evit gwellaat he skignañ memes tra goude bezañ kaset ul labour stourm da benn. Daoust d'ar frekañs nevez-se eo diaes d'an abadennoù kinniget gant Arvorig FM bezañ resevet e bro Vrest a-bezh. Graet eo bet ar goulenn en-dro digant ar CSA evit kaout ur frekañs e Brest. Stanket e seblant bezañ ar goulennou frekañsoù nevez er CSA abalamour d'ar cheñchamant teknik evit tremen d'an niverel evit ar skignañ er bloavezhioù da zont.

Lusket e vez ar skingomz gant ur skipailh-pad tri den ha gant un den enfredet gant ar rouedad Brudañ ha Skignañ evit lakaat war sav keleier war Breizh a-bezh. Lusket eo abadennoù zo gant tud a-youl vat ivez. Produiñ a ra seizh abadenn er gael-programmoù 2007/2008 : “Trouz er gêr”, un abadenn bemdeziek a-hed ar sizhun (90 munut), ur gronikenn lec'hel pemdeziek “un allig c'hoazh” (30 munut), un abadenn sizhuniek war ar sonerezh Rock “Waraock” (30 munut), “keleier ar sizhunvezh” (30 munut d'ar Sadorn ha 60 munut d'ar Sul), un abadenn relijiel sizhuniek (60 munut), un abadenn sonerezh sizhuniek “Jazz e Menez Arre” (60 munut), hag un abadenn nevez krouet e 2007 “Kanomp laouen !” (30 munut). Kenbroduiñ a ra gant Radio Kerne un abadenn bemdeziek skignet war ar sizhun : “an div skouarn o nijal” (45 munut). Skignañ a ra teir abadenn produet gant Radio Kerne : un abadenn bemdeziek “Tal ar c'hafe” (120 munut), ar bommoù keleier (5 munut) hag un abadenn sizhuniek evit ar vugale “Deomp dezhi !” (30 munut).

A-drugarez d'ur frekañs nevez roet da **Radio Kerne** e Douarnenez e vez klevet e abadennoù e su bro Vrest : gallout a reer resev e brogrammoù war gourenez Kraozon, tro-dro da Blougastell-Daoulaz ha Brest. **60 eurvezh** a abadennoù a vez skignet bep sizhun gantañ. Produiñ a ra pemp abadenn, div anezho a zo pemdeziek (“Tal ar c'hafe” ha “Ne vimp ket gwerzhet ») ha teir a zo sizhuniek (« Deomp dezhi ! », « Trouz an tredan » ha « War hentoù Kerne ». Kenbroduiñ a ra gant Arvorig FM un abadenn bemdeziek, (« An Div skouarn o nijal »). Skignet e vez bommoù keleier produet gant Radio Kerne teir gwezh an deiz.

Skignet e vez 5 abadenn produet gant ar skingomzoù ezel eus ar rouedad Brudañ ha Skignañ : « Tud eus ar Vro » (Radio Kreiz Breizh), « Pop skeud » (Radio Bro Gwened), un abadenn relijiel, « Keleier ar sizhunvezh » ha « Jazz e menez Arre » produet gant Arvorig FM.

War ziorren eo aet ar c'hinnig programmoù brezhonek war **RCF Rivages** a zo staliet e Brest hag a c'holo bro Vrest gant he skignadennoù. Kinnig a ra **4 abadenn sizhuniek** e brezhoneg ha div abadenn bemdeziek a ya d'ober 7 eur 48 a abadennoù bep sizhun (9<sup>h</sup>48 pa vez kemeret e kont an adskignadennoù). Enfredet ez eus bet ul lusker brezhoneger hanteramzer gant ar skingomz evit luskañ teir abadenn. Skignet e vez div abadenn sevenadurel 30 munut bep hini d'ar Sadorn : “Buhez” ha “Petra nevez”. Skignet e vez un abadenn war al lenn hag al levrioù, “Lenn ha c'hoari” (30 munut), d'ar Meurzh da 8 eur noz. Skignet e vez un abadenn sizhuniek un eurvezh war ar c'hantikoù, “Musikoù santel or bro” d'ar Sadorn. Skignet e vez div abadenn war ar sonerezh hag ar sevenadur keltiek “Liv keltiek” (57 m) ha “Plijadur”(15 munut) a Lun da Wener.

## An teknologiezhioù nevez o harpañ ar skingomz e brezhoneg

Stankoc'h eo deuet ar c'hinnig programmoù brezhonek da vezañ a-drugarez d'ar Genrouedad. Gallout a reer selaou holl brogrammoù an div skingomz kevredigezhel hollvrezhonek, Radio Kerne hag Arvorig FM war-eeun enlinenn (dre al lec'hienn Stalig abaoe miz Gwengolo 2004 ha dre an Tour Tan abaoe deroù 2005). Gallout a reer podskignañ div abadenn produet gant France Bleu Breizh Izel (an div abadenn nemeto eus France Bleu Breizh Izel a c'haller podskignañ) : “Hentoù Treuz” ha “Boued spered”. Gallout a reer selaou Keleier Breizh enlinenn ivez war lec'hienn ar skingomz.

# Marc'had al labour e brezhoneg

E-kerzh an nevezamzer 2006 en doa graet servij Arsella Ofis ar Brezhoneg un enklask war *Ar postoù-labour hag ar brezhoneg*. Savet e oa bet ur c'houlennaoueg gant tri c'hraf pennañ :


- stad an traoù d'ar 1<sup>añ</sup> a viz Genver 2006 (an niver a bostoù-labour a oa warno brezhonegerien evit implijoù hag a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg),
- ar pezh a c'hellfe bezañ (an niver a bostoù a vefe mat e vefe brezhonegerien warno met zo tud divrezhonek warno),
- ar pezh a c'hellfe bezañ a-benn 2010.

Bewech ez eo an niver a bostoù-labour kevatal da implijoù leunamzer (KILA) a zo bet goulennet ; kement-se a dalvez eo c'hoazh brasoc'h an niver a dud implijet, dre ma labour lod anezho darnamzer.

Gant **tost da 240 post-labour KILA brezhonek** renablet e 2006 ez eo bro Vrest **ar vro ma kaver ar muiañ a dud a labour e brezhoneg**. Tremenn ur c'hard eus an 900 post bennak bet renablet e Breizh d'ar mare-se a gaver aze. Estreget ar fed eo Brest trede kêr pobletañ Breizh, stad diorren ar c'helenn divyezhek war an dachenn-mañ a c'hoari kalz war an disoc'h-se evel-just (war-dro 22% eus skolidi divyezhek Breizh zo skoliataet e bro Vrest, well-wazh).

**Digempouez zo dre ar vro koulskoude**. En div gumuniezh kumunioù m'eo diorroet mat ar c'helenn divyezhek (Brest Meurgêr ar Mor ha K.K. Plabenneg hag an Aberioù) eo emañ lec'hiet an darn vrasañ eus ar postoù-labour brezhonek. Koulskoude, kumunioù Lesneven ha Landerne a ya d'ober daou bol ouzhpenn. A bouez bras eo homañ diwezhañ pa gaver enni tost ur c'hard eus postoù brezhonek bro Vrest, hag int liesseurtoc'h eget boaz : nebeutoc'h eget un hanter eus postoù Landerne a dalvez evit postoù kelennerien tra ma sav ar feur-se da 73% e Breizh. Politikerezh youlek an ti-kêr kozh da zesachañ ur vuhez vrezhonek e kêr Landerne a zeu war wel amañ.

*Dasparzh ar postoù-labour diouzh ar rumm micher e bro Vrest d'ar 1<sup>añ</sup> a viz Genver 2006*



*War postoù-labour a denn d'ar c'helenn emañ an darn vuiañ eus gopriddi bro Vrest a ra gant ar brezhoneg en o darempredoù micher.*

Damheñvel eo dasparzh ar postoù-labour dre rumm micher e bro Vrest ouzh ar pezh a gaver e peurrest Breizh, nemet war div dachenn a vefe diorroetoc'h emañ eget e lec'h all : **ar melestradur foran** ha **bed ar yec'hed hag ar servijoù d'an dud**. Dre-vras, n'eus ket bet tu da zastum roadennoù peurglok gant ar meteier-se ; ar fed e vefe klokoc'h an titouroù er vro-mañ zo arouezius eus an doare ma krog ar brezhoneg da vezañ anavezet e bed al labour eno.

En hevelep doare, heverk eo e vefe lec'hiet e bro Vrest an hanter eus ar postoù-labour ouzhpenn renablet e Breizh a oa tud divrezhonek warno daoust ma vefe talvoudus gouzout brezhoneg evito. Tost da 20 post gant ur stummadur gwirion pe rakwelet ha tremen 30 post hep stummadur ebet a oa bet kontet e 2006 ; gant se en dije tostaet hollad ar postoù brezhonek da 300.

Hervez ar respontoù hon eus bet hag ar brasjedadennoù hon eus gellet ober e c'hortozer da nebeutañ **80 post-labour brezhonek ouzhpenn e bro Vrest a-benn 2010**. War-dro 320 post KILA (pe muioc'h) a vefe brezhonegerien warno oc'h ober un implij micherel eus o yezh er bastell-vro d'ar mare-se.

Ul lusk mont war-raok zo gant bed al labour e brezhoneg e gwirionez. E diagnostik 2004 e oa bet brasjedet e oa war-dro 200 post brezhonek e bro Vrest, da 240 eo bet resisaet ar sifr en enklask 2006. Sur eo ez eus bet krouet postoù kelenner gant diorren ar skolioù divyezhek : tremenet eur eus 120 post kelenner e 2003/2004 da 160 e 2007/2008, da lavaret eo ur c'hresk eus un drederenn.

## Poan en deus an AVAL<sup>26</sup> oc'h anavezout ar brezhoneg

Nac'het e oa bet kemennoù divyezhek brezhoneg-galleg gant AVAL Brest e dibenn 2005. War al lezenn Toubon e oa bet diazezet an nac'hadenn-se daoust ma vez degemeret gant an AVAL kemennoù unyezhek saoznek a-wechoù ha daoust ma ne vir ket al lezenn-se a ober gant ur yezh all ouzhpenn ar galleg. Un diouer a anaoudegezh eus marc'had al labour e brezhoneg zo bet diskouezet splann aze.


Sturiadoù hag a sav a-du gant ar brezhoneg zo bet roet da-heul gant prefederezh Breizh evit kadarnaat ez eus tu da embann kemennoù divyezhek. Un den karget eus ar yezh zo bet anvet gant an AVAL evit Breizh abaoe.

## An armerzh

E 2001 e oa bet roet lañs d'ar c'houlzad *Ya d'ar brezhoneg*. E miz C'hwevrer 2008 e oa bodet 622 a oberourien gevredigezhel hag armerzhel gant an Ofis en-dro d'un dra eeun : ober gant ar brezhoneg er mont en-dro pemdeziek. Ur skoazell deknikel a vez roet abaoe ar penn kentañ d'ar sinerien evit harpañ anezho en o c'hoant diorren plas ar brezhoneg. Kinnig a ra an Ofis d'ar sinerien kas oberoù resis da benn hag evel-se e c'hellont mont war-du ul label. **Ouestélio**, un embregerezh moullañ hag eiladuriñ niverel eus Brest, hag **Intermarc'had Plougerne** eo an daou embregerezh kentañ tapet ganto al label-se.


<sup>26</sup> ANPE e galleg.

Dasparzh sinerien Ya d'ar brezhoneg dre gumun e bro Vrest – Miz C'hwevrer 2008



**86 siner** a oa e bro Vrest e miz C'hwevrer 2008, da lavaret eo 13,8% eus an hollad. Kresket eo pouez bro Vrest er c'houlzad e-keñver ar pezh a oa e-kreiz 2004 (22 siner ouzhpenn zo enni bremañ). Merzout a reer n'eus c'hoazh siner ebet e div gumun vras eus ar vro, Plabenneg ha Kraozon, nag e trederenn su an dachenn (dilañs an div gumuniezh kumunioù-se war dachenn ar yezh a zeu war wel en-dro amañ).

Dasparzh sinerien Ya d'ar brezhoneg dre rummad evit bro Vrest – Miz C'hwevrer 2008



*Tennañ a ra kalz an dasparzh-mañ da hini Breizh. Daoust m'eo bras plas ar bed sevenadurel (tremen ur bempvedenn eus ar sinerien) ez eo e bed an armerzh emañ ar brasañ niver eus sinerien Ya d'ar brezhoneg e bro Vrest (39 siner, da lavaret eo tost an hanter eus an hollad).*

Ar bed kevredigezhel ha sevenadurel eo en deus douget an oberoù pleustrekañ evit lakaat ar brezhoneg war wel (yezh labour ha yezh kehentiñ), a-drugarez da frammoù emouestlet abaoe pell alies. En o zouez e konter emglevioù bro (Sked, Ti ar vro Bro-Leon), frammoù kelenn (An Oaled, Diwan Breizh, Stumdi, Skolaj-Lise Sant Frañsez-Itron Varia Lesneven), mediaoù (Dizale, Kalanna Production, Arvorig FM), tiez-embann (Al Liamm, Skrid, Moulladurioù Hor Yezh), arzourien (Strollad ar Vro Bagan). Er-maez eus ar metoù-se e vez implijet ar brezhoneg er c'hehentiñ en un doare arouezel (dre ul logo divyezhek peurgetket) met frammoù zo a ya kalz pelloc'h memes tra evel war dachenn an touristerezh (Gouel Kann al Loar e Landerne, Ti an Douristed e Gwitalmeze, Brest 2008), er stalioù bras (Intermarc'had Plougerne, Super U Keredern e Brest), pe c'hoazh en embregerezhioù liesseurt (Ouestélio e Brest, Bro Leon Elagage e Gwipavaz).

### **Dileuriañ ar servij foran**

Alies e vez fiziet en embregerezhioù prevez ober war-dro servijoù publik gant ar strollegezhioù foran (dasparzhañ dour, treuzdougen-kêr, h.a.). E-barzh he folitikerezh yezh e c'hell ur strollegezh ober e doare ma vefe dalc'het kont eus ar brezhoneg er c'hendivizad dileuriañ ar servij publik. Eus o zu e c'hell an embregerezhioù, diwar o lusk o-unan, kinnig servijoù divyezhek. Evel-se he deus divizet ajañs Brest Compagnie des Eaux (Kompagnunezh an Dour) divyezhekaat an dielloù a vez kaset ganti d'an tiez-kêr. Dre-vras e vefe mat e teufe da vezañ boas lakaat ar gaoz war ar brezhoneg pa vez marc'hataet un dileuriañ bennak.

## Klozadur ar pennad war an ober gant ar brezhoneg er gevredigezh keodedel

Gant ur bed kevredigezhel frammet ha micherelaet e vez diorroet plas ar brezhoneg er vuhez keodedel e bro Vrest dreist-holl. Koulskoude, ar birvilh-se - hag ar goulenn sokial a zeu war wel drezañ - a vag ul lusk a-du gant ar yezh kreñv a-walc'h en tolead-mañ evit ma kemerfe ar bed armerzhel perzh ennañ tamm-ha-tamm.

Er penn a-raok evit dizoleiñ tachennoù nevez da gas ar brezhoneg war-raok emañ bro Vrest abaoe pell. Kalzik a draoù a vez graet evit an dudi koulz evit ar vugale hag an oadourien, kreizenn An Oaled zo anezhi abaoe ar bloavezhioù 80, da skouer. Er vro-mañ emañ diazezet Divskouarn, ar gevredigezh da ziorren ar brezhoneg a-raok ar skoliata, er vro ma oa deuet ar magourioù divyezhek kentañ. Pouezus eo bro Vrest e marc'had al labour e brezhoneg ivez hag un nebeud embregerezhioù a ro ur plas brazik d'ar brezhoneg ha pa ne sellfe ket o obererezh ouzh an dachenn "vreizhek".

Kement-se a vag un endro brezhonek hag a levezon sell ar boblañs war he yezh. Harpañ a ra ar yezherien en o buhez pemdez ivez.

**Daoust da se n'eus ket tu da lavaret eo bet treuzfurmet tres ar vro e-keñver ar pezh e oa e 2004 c'hoazh.** An nevezentioù deuet eno nevez zo n'o deus graet nemet kadarnaat ar stad a-raok. Danvez zo gant bro Vrest da vont pelloc'h c'hoazh neuze ha da ziazezañ traoù a gaver e lec'h all dija pe da grouiñ skouerioù lañsus nevez evit suraat an dazont ha kenderc'hel da vezañ ur skouer evit ar broioù all.

War tachennoù zo a denn d'ar vuhez pemdeziek e c'hell ar **strollegezhioù foran lec'hel** kaout ur gwir emell evit kas ar brezhoneg war-raok dre ar perzh bras o deus da c'hoari e merañ aveadurioù zo. Skouerioù a c'heller reiñ war dachenn ar servijoù d'an dud (obererezhioù e brezhoneg en tiez retredidi, degemer divyezhek er magourioù, kelaouiñ ar gerent nevez eus talvoudegezh an divyezhegezh abred), an dudi (endro divyezhek en aveadurioù foran evit ar sport hag ar sevenadur, heñveldra er gouelioù, obererezhioù e brezhoneg er c'hreizennoù dudi hep herberc'h hag er c'hreizennoù vakañsoù), ar mediaoù (abadennoù brezhonek pa vez savet ur skinwel lec'hel), ha kement zo.

# Klozadur

Lañs he deus bro Vrest e-keñver toleadoù all Breizh evit ar pezh a sell ouzh stad ar brezhoneg war pep tachenn. Tennañ gounid eus an dra-se zo d'ober evit diazezañ amañ araokadennoù nevez ar brezhoneg.

## Dibarderioù bro Vrest evit ar brezhoneg

An holl zoareoù da zeskiñ brezhoneg a gaver e bro Vrest. Diorroet mat a-walc'h eo o rouedadoù war an dachenn e-keñver broioù all. K.K. Plabenneg hag an Aberioù zo e-penn araok ar vro a-fet kinnig hag a-fet sifroù (evit ar c'helenn divyezhek hag an tañva dreist-holl). Levezon ur vro gêrel a ro pouez da Vrest Meurgêr ar Mor er sifroù met merzout a reer mat emañ kêr Vrest hec'h-unan er penn a-dreñv : re dreut eo ar c'hinnig hag ar feurioù tizhet er boblañs zo gwall izel. Merket eo K.K. Bro Landerne-Daoulaz gant levezon yael politikerezh yezh kêr Landerne. Stad an deskiñ brezhoneg e K.K. Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù zo diouzh he c'humun greiz ivez, met al lusk diorren n'eo ket kenkoulz eno. Er c'hontrol, ha pa vefe c'hoazh gant sifroù izel, K.K. Bro an Hirwazh he deus bevet emdroadurioù lañsus er bloavezhioù diwezhañ tout. Kalz a zale o devez frammoù etrekumunel su ar vro alies : K.K. Gourenez Kraozon ha K.K. Arvor ar Stêr Aon.

Evit ar pezh a denn da rouedad ar skolioù divyezhek hepken e c'heller notenniñ mankoù splann : e Brest Meurgêr ar Mor emañ an darn vrasañ eus kumunioù bras ar vro met hini ebet anezho ne ginnig an tri hentad kelenn divyezhek war un dro (ar pezh a zo e Karaez avat, anezhi ur gumun nebeutoc'h eget 10 000 annezad enni). Mankoù bras a stader c'hoazh : e-touez ar c'humunioù pobletañ enno tremen 500 skoliad er c'hentañ derez, n'eo ket reizh ne vefe kinnig divyezhek ebet er Releg-Kerhuon (1117 skoliad) hag e Lokmaria-Plouzane (640 skoliad).

Amañ evel e Breizh dre-vras e kendalc'h ar c'helenn divyezhek da vont war-raok atav met an doareoù all da gelenn er skol a hañval bezañ laosket a-gostez gant an ensavadurioù e karg. Ar Rektoriezh ne gas ket war-raok ar c'helenn brezhoneg en eil derez, n'eo ket harpet an tañva er c'hentañ derez gant ar Stad ha diaes eo lakaat an holl gumunioù da gemer perzh er stignad. Eus o zu, an oadourien n'int ket ken niverus o teskiñ brezhoneg er c'hentelioù noz hag er bloavezhioù a-raok, dre-vras. Aliesoc'h ez eont betek penn o stummadur avat. Stummadur hir Stumdi hag ar stummerezh dibaouez dre-vras a gendalc'h d'ober berzh.

En holl n'eus ket e bro Vrest trawalc'h a yezherien nevez-stummet evit kempouezañ ar yezherien gozh a varv tamm-ha-tamm (ur miliad a dud bep bloaz). Ar pal kentañ da dizhout evit ma c'hellfe ar yezh sevel he c'hein eo.

Kement ha mont war an tu-se, atiz ar bed politikel zo hollbouezus, en tu-hont da hini ar bed kevredigezhel. Er penn araok war an dachenn-se e oa Penn-ar-Bed abaoe pell. Heuliet eo bet gant Rannvro Breizh hag he folitikerezh yezh e 2004. Ar c'humunioù eo a framm o folitikerezh yezh diouzh o atebegzhioù bremañ. Evit en ober e vezont harpet gant ar garta *Ya d'ar brezhoneg* kinniget gant an Ofis. Gant kumunioù pouezus zo eus an tolead eo bet sinet abaoe he c'hrouidigezh e 2004. Ur blegenn bolitikel lañsus zo e gwirionez.

Met ne vez ket kavet an atiz politikel-se kement-ha-kement er vro. Estreget e Brest Meurgêr ar Mor hag un nebeud kumunioù (Landerne, Lesneven, Plougerne, Milizag, h.a.), ez eus dale gant kalz kumunioù eus Bro Leon evit lakaat ar brezhoneg war wel. Splann eo ne glot



ket tachenn gweledva yezhel bro Vrest gant hini ar c'helenn divyezhek da skouer. E kumuniezhoù kumunioù Gourenez Kraozon, Arvor ar Stêr Aon ha Bro Landerne-Daoulaz (nemet ar gêr greiz evel-just) e vefe tu da vont pelloc'h, da skouer.

Estreget panelloù divyezhek a ya d'ober ur gweledva yezhel ouzhpenn. Met e bro Vrest e chom gwall vihan plas ar yezh en aveadurioù sport foran koulz hag er frammoù sevenadurel publik. N'eus ket kalz a gumunioù o deus reizhet skritur o anvioù-lec'h, a-hend-all, ha n'eus nemet Landerne a ra gant teulioù melestradurel divyezhek evit ar poent. War an tu mat ec'h emdro oberoù Tolpad-kêrioù Brest Meurgêr ar Mor, deuet da vezañ siner *Ya d'ar brezhoneg*, un emdroadur da gadarnaat eo hag a zo ur skouer evit ar frammoù etrekumunel all.

Klokaet e vez an endro yezhel gant oberoù ar metoù kevredigezhel hag armerzhel zoken. Ouzhpenn magañ buhez vrezhonek ar yezherien e silont brezhoneg e gweledva yezhel an holl, tamm-ha-tamm. Gant seurt traoù ec'h emdro sell an dud war o yezh ; seul vui e vo gwelet seul aesoc'h e vo dezho dibab adperc'hennañ o yezh. Kerse eo memes tra e chomfe danvez an dudi e brezhoneg stag betek re ouzh glad ar vro.

Ret eo ijinañ doareoù da vont pelloc'h war pep tachenn ha lakaat anezho da dalvezout buan evit lakaat un harz d'ar c'holl yezherien da gentañ ha gwelet an niver anezho o kreskiñ en-dro da eil. Unan eus al lec'hioù gwellañ evit lakaat genel oberoù nevez da ziorren ar brezhoneg eo bro Vrest, dres.

# Derc'hel soñj...

## Sifroù pennañ ar brezhoneg e bro Vrest

- War-dro 11,5% eus poblañs bro Vrest a ouije brezhoneg e 2008 (**etre 40 000 ha 45 000 yezher**).
- Tremen 10 000 yezher a vije aet d'an anaon e bro Vrest etre 1999 ha 2008.
- Tremen **8 000 skoliad** eus ar vro a heuilh kentelioù brezhoneg pe e brezhoneg eus ar skol-vamm d'al lise.
- Ur **skol divyezhek** a gaver e tremen **ur c'hard eus kumunioù** ar vro dezho ur skol bennak.
- En **11<sup>vet</sup> renk** kumunioù Breizh diouzh an niver a skolidi divyezhek enno emañ Brest (goude kumunioù kalz bihanoc'h evel Lanniliz, Lesneven, Plougastell-Daoulaz pe Landerne).
- **Un hanter nebeutoc'h** a skolidi divyezhek zo e Brest eget e Gwened.
- 22,6% eus skolidi divyezhek Breizh zo enskrivet e bro Vrest.
- Da 5,13% e sav ar feur skoliata en hentad divyezhek evit ar c'hentañ derez.
- Etre 8,1 ha 9,2% eus poblañs ar skolioù kentañ derez o deus un **tañva** d'ar brezhoneg.
- 2,6% eus holl skolidi eil derez ar vro a heuilh **kentelioù brezhoneg**.
- Tremen **1 000 den deuet** a zesk brezhoneg en un doare bennak.
- 169 studier o deus bet **kentelioù brezhoneg** en deskadurezh uhel er vro.
- 625 oadour o deus heuliet **kentelioù noz** e 2007/2008.
- E **trede renk** kumunioù Breizh diouzh an niver a dud deuet enskrivet er c'hentelioù noz emañ Brest goude Roazhon ha Naoned.
- 161 den o deus heuliet **stajoù berr** ha 70 den o deus graet ur **stummadur hir** war ar brezhoneg e 2006/2007.
- E 2006/2007 n'eus bet aozet **staj dibenn-sizhun ebet** er vro.
- Tremen 95% eus kumunioù bro Vrest a oa pourvezet gant **panelloù mont e-barzh ha mont e-maez** divyezhek e 2004.
- E miz Meurzh 2008 e konted 12 kumun o doa votet a-du gant karta **Ya d'ar brezhoneg**.
- 56,9% eus annezidi ar vro zo o chom er c'humunioù-se.
- **Pemp magouri** eus ar vro a ginnig un degemer e brezhoneg.
- Renablet ez eus 8 framm a ginnig **klasoù dizoleiñ pe kampoù brezhonek** er vro.
- E bro Vrest e kaver tost un drederenn eus hollad ar frammoù bet embannet d'an nebeutañ ur gelaouenn pe ul **levr brezhonek** ganto etre 2000 ha 2006 (16 framm).
- 94 munut brezhonek er sizhun a resever er vro gant **France 3 Ouest**.
- Tro-dro da 140 eurvezh brezhoneg a vez skignet er vro gant an holl **skingomzoù**.
- Tost da 240 **post-labour KILA brezhonek** a oa bet renablet e bro Vrest e 2006.
- 86 oberour kevredigezhel hag armerzhel eus ar vro o deus sinet **Ya d'ar brezhoneg**.

## Ar brezhoneg en deskadurezh

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ <b>An holl zoareoù da gelenn</b> a gaver war an dachenn</li> <li>▪ Stank e vez <b>ar c'hinnig</b> alies</li> <li>▪ <b>Muioc'h a glasoù divyezhek</b> zo bet digoret en tolead er bloavezhioù tremenet eget e lec'h all, diouzh ar c'henfeurioù</li> <li>▪ Stabil eo <b>feur kreskiñ</b> ar c'helenn divyezhek</li> <li>▪ Diorroet mat a-walc'h eo ar c'hinnig <b>kelenn d'an oadourien</b></li> <li>▪ <b>Skol-veur Brest</b> a ginnig ur c'hursus brezhoneg</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ An holl zoareoù kelenn ne stummont ket trawalc'h a yezherien evit <b>kempouezañ ar c'holl</b> zo eus tu ar re gozh</li> <li>▪ <b>Mankoù</b> zo c'hoazh er c'hinnig kelenn divyezhek. Re zister eo e kêr Vrest da skouer (ur skol divyezhek publik hepken evit tost da 150 000 annezad)</li> <li>▪ <b>En arvar emañ an tañva</b> er c'hentañ derez publik</li> <li>▪ <b>Paouezet</b> eo an hentad katolik gant an tañva er c'hentañ derez</li> <li>▪ Nebeutoc'h-nebeutañ a <b>skolidi eil derez</b> o deus kentelioù brezhoneg</li> <li>▪ War zigreskiñ eo aet <b>an niver a oadourien</b> a zesk brezhoneg</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ An tañva (er skol hag er skolaj) n'eo ket a-walc'h e-unan <b>evit stummañ yezherien</b></li> <li>▪ Diaesterioù zo atav evit <b>digeriñ skolioù divyezhek</b> nevez er sistem a vremañ</li> <li>▪ Techet eo ar Rektoriezh da <b>serriñ ar c'hentelioù</b> en eil derez</li> <li>▪ Re nebeut a studierien zo war ar renk evit <b>mont da gelenner</b></li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ <b>Astenn an tañva</b> d'ar brezhoneg en holl skolioù</li> <li>▪ <b>Digeriñ skolioù divyezhek</b> er c'humunioù ma n'eus ket c'hoazh (da skouer er c'hentañ derez er Releg-Kerhuon e Lokmaria-Plouzane)</li> <li>▪ <b>Astenn ar c'hinnig</b> e skolioù all er c'humunioù ma'z eus ur skol divyezhek c'hoazh (e Brest da gentañ-penn)</li> <li>▪ Ober e-doare ma c'hello kement skoliad divyezhek <b>kenderc'hel gant e hentad</b> betek ar vachelouriezh</li> <li>▪ Diorren, brudañ hag aesaat <b>ar c'hentelioù brezhoneg</b> en eil derez</li> <li>▪ Brudañ ar stummadurioù war ar brezhoneg evit an dud deuet hag ar <b>fred</b> zo stag outo</li> <li>▪ Diorren ar <b>stummerezh dibaouez</b> war ar brezhoneg, er frammoù publik da gentañ-penn (tiez-kêr, kumuniezhoù kumunioù, frammoù sevenadurel publik ha ledpublik)</li> <li>▪ Kavout <b>kelennerien divyezhek ouzhpenn</b> (stummañ kelennerien titlet c'hoazh, ijinañ stummadurioù azasaet er skol-veur)</li> </ul>

## Ar brezhoneg er vuhez foran

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Bezant mat eo ar brezhoneg <b>war bord an hentoù-departamant</b></li> <li>▪ Liesseurtoc'h ha kreñvoc'h eo <b>politikerezh yezh Penn-ar-Bed</b> eget hini an departamantoù all</li> <li>▪ <b>Kumunioù zo</b> er vro zo ganto ur <b>gwir preder war ar brezhoneg</b> hag un darn anezho o deus frammet o folitikerezh yezh dre sinañ ar garta <b>Ya d'ar brezhoneg</b></li> <li>▪ <b>Brest Meurgêr ar Mor</b> he deus sinet ar garta <i>Ya d'ar brezhoneg</i></li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ N'eus ket anv eus ar brezhoneg e <b>Kevrat bro Vrest</b></li> <li>▪ <b>Estreget war ar panneloù</b>, ne vez ket gwelet kalz brezhoneg (er c'hehentiñ, en degouezhioù ofisiel, en teulioù melestradurel, en degemer,...)</li> <li>▪ Kalz labour a vank c'hoazh a-raok ne vefe <b>divyezhek da vat ar panellerezh</b> e bourc'hioù ar vro (dreist-holl er-maez eus Brest Meurgêr ar Mor, Landerne, Lesneven, Milizag, Plougastell-Daoulaz ha Plougerne)</li> <li>▪ Re alies e weler <b>vioù koukoug</b> war ar panneloù brezhonek zo staliet</li> <li>▪ War bord an hentoù eo e vez staliet panneloù divyezhek dreist-holl, n'eus ket kalz <b>er savadurioù foran</b> da skouer</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Daoust ma ne vir ket a ober gant ur yezh all ouzhpenn ar galleg, mellad <b>2 ar Vonreizh</b> a laka un harz da ziorren ar brezhoneg alies en abeg d'ar raksoñjoù a zo liammet outañ</li> <li>▪ N'eus ket brezhoneg war an <b>hentoù Stad</b></li> <li>▪ <b>Ur sell “glad”</b> zo gant darn eus ar pennadurezhioù lec'hel war ar brezhoneg re alies c'hoazh</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Mat e vefe d'ar vro ha d'ar frammoù etrekumunel all <b>kemer muioc'h ar brezhoneg e kont</b></li> <li>▪ <b>Reizhañ skritur</b> an anvioù-lec'h</li> <li>▪ Kenderc'hel da <b>glokaat ar gweledva yezhel foran</b> (panellerezh-heñchañ, plakennoù-straed, panellerezh er savadurioù hag aveadurioù foran, h.a.)</li> <li>▪ Teurel evezh da ginnig atav heñvel an div yezh war ar panneloù</li> <li>▪ Ur politikerezh yezh efedus a rank mont <b>war pep tachenn</b> o lakaat palioù resis : kelenn, kehentiñ diabarzh ha diavaez, degemer ar velestridi, dielloù ofisiel, h.a.</li> </ul>

## Ar brezhoneg er vuhez keodedel

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Kentoc'h diorroet, frammet ha micherelaet eo <b>bed kevredigezhel</b> bro Vrest</li> <li>▪ Lañs zo gant bro Vrest war dachenn ar brezhoneg <b>a-raok ar skoliata</b></li> <li>▪ Ur <b>greizenn vakañsiñ</b> zo er vro ha <b>muioc'h a ziduamantoù</b> evit ar vugale a gaver amañ eget e lec'h all</li> <li>▪ Un toullad <b>embannerien vrezhonek</b> a gaver er vro</li> <li>▪ Holl <b>abadennoù brezhonek France 3</b> a resever e bro Vrest</li> <li>▪ Unan eus tachennoù Breizh ma c'heller klevet ar muiañ a abadennoù brezhonek <b>er skingomz</b> eo bro Vrest</li> <li>▪ Bras eo lec'h ar vro e <b>marc'had al labour</b> e brezhoneg ha muioc'h a bostoù a vo er bloavezhioù da zont c'hoazh</li> <li>▪ Brasoc'h eget e lec'h all eo chomet plas ar brezhoneg <b>en oferennoù</b></li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Nebeut a <b>frammoù sevenadurel publik</b> a ra gant ar brezhoneg</li> <li>▪ Ne gaver ket <b>abadennoù dudi reoliek</b> a bledfe e brezhoneg gant ur sport pe gant un arz bennak (nag evit ar vugale, nag evit an dud deuet)</li> <li>▪ E metoù ar c'helenn <b>ec'h enfreder ar vrezhonegerien</b> dreist-holl c'hoazh</li> <li>▪ Mankout a ra atav <b>ur skinwel pe ur skingomz brezhonek</b> a vefe degemeret e Breizh a-bezh</li> <li>▪ Bed an <b>touristerezh</b> ne verz ket c'hoazh ar splot en deus da dennañ eus ar brezhoneg</li> <li>▪ Talvoudekaet muioc'h e c'hellfe bezañ ar brezhoneg e metoù <b>an dud war an oad</b></li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Er <b>gouelioù “breizhek”</b> hepken eo e vez roet ur plas bennak d'ar brezhoneg</li> <li>▪ Bihan eo deuet da vezañ plas an abadennoù brezhonek war <b>TV Breizh</b> ha ne c'hell ket bezañ degemeret gant an holl atav</li> <li>▪ <b>Chadenn lec'hel</b> tolead Brest n'eo ket diazezet da vat c'hoazh</li> <li>▪ Dinerzh un tamm eo an <b>eskopti</b> evit ober gant ar yezh</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Brudañ an divyezhegezh abred er <b>gwilioutioù</b></li> <li>▪ Cheñch skeudenn ar yezh e penn ar re yaouank en ur ginnig dezho <b>abadennoù modern pe darvoudoù a glot gant o freder</b> pe diouzh ar c'hiz</li> <li>▪ Stummañ hag enfredañ <b>animatourien dudi</b> (war an arzoù ha war ar sportoù) a yafe e brezhoneg gant ar re yaouank</li> <li>▪ Skignañ gwelloc'h <b>al levrioù hag ar c'hazetennoù brezhonek</b></li> <li>▪ Ezhomm zo e vefe lakaet ar brezhoneg war wel muioc'h-mui gant <b>embregerezhioù ha frammoù n'int ket anavezet evel “breizhek”</b></li> <li>▪ Broudañ an implijerien da <b>enfredañ brezhonegerien</b> (Kambr Kenwerzh ha Greanterezh Brest ha Ti al labour hag ar stummañ micherel a c'hellfe sikour war an tu-se)</li> <li>▪ Kinnig ur stummadur war ar brezhoneg <b>er c'hloerdi</b></li> </ul>

# Stagadennoù

*Sifroù ar c'heleñn divyezhek dre gumun ha dre live e bro Vrest – Distro-skol 2007*

	Skol-vamm	Skol-gentañ	Skolaj	Lise	Hollad
Brest	122	140	9	7	<b>278</b>
Daoulaz	23	0	0	0	<b>23</b>
Faou (ar)	12	18	0	0	<b>30</b>
Gouenoù	33	11	0	0	<b>44</b>
Gwiler-Leon	28	31	0	0	<b>59</b>
Gwipavaz	31	39	0	0	<b>70</b>
Gwiseni	17	20	93	0	<b>130</b>
Gwitalmeze	44	54	0	0	<b>98</b>
Kraozon	13	22	0	0	<b>35</b>
Landerne	127	121	27	9	<b>284</b>
Lanniliz	142	134	60	0	<b>336</b>
Lesneven	97	145	39	19	<b>300</b>
Loperc'hed	28	17	0	0	<b>45</b>
Milizag	24	7	0	0	<b>31</b>
Plabenneg	68	74	45	0	<b>187</b>
Plouarzhel	29	5	0	0	<b>34</b>
Plougastell-Daoulaz	133	132	24	0	<b>289</b>
Plougerne	43	41	0	0	<b>84</b>
Plougonvelen	26	0	0	0	<b>26</b>
Plouvien	14	30	0	0	<b>44</b>
Plouzane	23	24	0	0	<b>47</b>
Releg-Kerhuon (ar)	0	0	178	0	<b>178</b>
<b>Bro Vrest</b>	<b>1077</b>	<b>1065</b>	<b>475</b>	<b>35</b>	<b>2652</b>

*Sifroù ar c'heleñn divyezhek dre gumun ha dre hentad e bro Vrest – Distro-skol 2007*

	Diwan	Hentad publik	Hentad prevez	Hollad
Brest	214	64	0	<b>278</b>
Daoulaz	0	23	0	<b>23</b>
Faou (ar)	30	0	0	<b>30</b>
Gouenoù	0	44	0	<b>44</b>
Gwiler-Leon	0	0	59	<b>59</b>
Gwipavaz	0	70	0	<b>70</b>
Gwiseni	93	0	37	<b>130</b>
Gwitalmeze	44	0	54	<b>98</b>
Kraozon	35	0	0	<b>35</b>
Landerne	55	189	40	<b>284</b>
Lanniliz	0	212	124	<b>336</b>
Lesneven	133	0	167	<b>300</b>
Loperc'hed	0	45	0	<b>45</b>
Milizag	0	31	0	<b>31</b>
Plabenneg	26	0	161	<b>187</b>
Plouarzhel	0	0	34	<b>34</b>
Plougastell-Daoulaz	0	129	160	<b>289</b>
Plougerne	0	84	0	<b>84</b>
Plougonvelen	0	26	0	<b>26</b>
Plouvien	0	0	44	<b>44</b>
Plouzane	0	47	0	<b>47</b>
Releg-Kerhuon (ar)	178	0	0	<b>178</b>
<b>Bro Vrest</b>	<b>808</b>	<b>964</b>	<b>880</b>	<b>2652</b>

Feurioù ar c'heledd divyezhek dre gumun ha dre live e bro Vrest – Bloavezh-skol 2007/2008

	Skol- vamm	Skol- gentañ	<i>Ishollad kentañ derezh</i>	Skolaj	Lise	Hollad
Brest	2,3%	1,9%	<b>2,1%</b>	0,1%	0,1%	<b>0,8%</b>
Daoulaz	17,7%	0,0%	<b>8,1%</b>	0,0%	0,0%	<b>2,7%</b>
Faou (ar)	12,5%	12,3%	<b>12,4%</b>	0,0%	0,0%	<b>12,4%</b>
Gouenoù	10,5%	2,6%	<b>5,9%</b>	0,0%	0,0%	<b>5,9%</b>
Gwiler-Leon	8,4%	5,4%	<b>6,5%</b>	0,0%	0,0%	<b>4,3%</b>
Gwipavaz	4,9%	4,1%	<b>4,5%</b>	0,0%	0,0%	<b>2,9%</b>
Gwiseni	22,7%	21,5%	<b>22,0%</b>	100,0%	0,0%	<b>49,8%</b>
Gwitalmeze	10,7%	9,6%	<b>10,1%</b>	0,0%	0,0%	<b>5,9%</b>
Kraozon	3,8%	4,2%	<b>4,1%</b>	0,0%	0,0%	<b>2,4%</b>
Landerne	14,7%	9,9%	<b>11,9%</b>	1,7%	0,4%	<b>4,8%</b>
Lanniliz	42,8%	28,2%	<b>34,2%</b>	7,5%	0,0%	<b>20,8%</b>
Lesneven	21,8%	19,6%	<b>20,4%</b>	2,6%	3,5%	<b>9,2%</b>
Loperc'hed	17,8%	7,6%	<b>11,8%</b>	0,0%	0,0%	<b>11,8%</b>
Milizag	12,2%	2,4%	<b>6,4%</b>	0,0%	0,0%	<b>6,4%</b>
Plabenneg	16,3%	12,3%	<b>13,9%</b>	6,3%	0,0%	<b>10,7%</b>
Plouarzhel	17,2%	2,0%	<b>8,0%</b>	0,0%	0,0%	<b>8,0%</b>
Plougastell-Daoulaz	21,8%	14,3%	<b>17,3%</b>	3,8%	0,0%	<b>13,4%</b>
Plougerne	13,7%	10,4%	<b>11,8%</b>	0,0%	0,0%	<b>11,8%</b>
Plougovenen	14,3%	0,0%	<b>5,8%</b>	0,0%	0,0%	<b>5,8%</b>
Plouvien	6,5%	10,9%	<b>8,9%</b>	0,0%	0,0%	<b>8,9%</b>
Plouzane	4,4%	2,9%	<b>3,5%</b>	0,0%	0,0%	<b>1,9%</b>
Releg-Kerhuon (Ar)	0,0%	0,0%	<b>0,0%</b>	26,1%	0,0%	<b>9,8%</b>
<b>Bro Vrest</b>	<b>6,22%</b>	<b>4,35%</b>	<b>5,13%</b>	<b>2,64%</b>	<b>0,21%</b>	<b>3,45%</b>



*Feur ar c'helenn divyezhek dre gumun ha dre vloavezh er c'hentañ derez e bro Vrest eus 1999/2000 da 2007/2008*

	1999	2000	2001	2002	2003	2004	2005	2006	2007
Brest	1,3%	1,3%	1,4%	1,5%	1,6%	1,7%	1,9%	1,9%	2,1%
Daoulaz	-	-	-	-	-	-	-	6,4%	8,1%
Faou (ar)	11,1%	11,2%	12,6%	10,9%	11,0%	10,9%	10,4%	12,7%	12,4%
Gouenoù	-	-	-	-	-	3,3%	3,8%	4,6%	5,9%
Gwiler-Leon	-	-	-	2,4%	3,5%	4,0%	6,7%	6,6%	6,5%
Gwipavaz	3,6%	4,2%	4,3%	4,1%	4,1%	4,0%	4,0%	4,4%	4,5%
Gwiseni	28,7%	25,7%	28,2%	28,2%	20,2%	21,8%	23,6%	18,9%	22,0%
Gwitalmeze	13,7%	15,0%	15,2%	16,5%	14,9%	13,4%	11,6%	11,1%	10,1%
Kraozon	3,7%	3,9%	3,7%	3,8%	4,3%	4,4%	5,4%	5,1%	4,1%
Landerne	6,1%	6,3%	6,8%	7,4%	7,5%	8,0%	9,5%	10,9%	11,9%
Lanniliz	18,0%	22,2%	24,3%	24,9%	25,9%	27,7%	33,1%	32,5%	34,2%
Lesneven	16,8%	16,7%	17,1%	18,3%	18,5%	18,9%	19,3%	19,5%	20,4%
Loperc'hed	-	-	-	-	-	5,0%	6,8%	8,4%	11,8%
Milizag	-	-	-	-	-	-	-	3,3%	6,4%
Plabenneg	9,2%	9,3%	11,3%	12,7%	12,5%	14,3%	13,6%	13,4%	13,9%
Plouarzhel	-	-	-	-	-	-	-	6,5%	8,0%
Plougastell-Daoulaz	10,3%	10,7%	11,6%	12,8%	14,0%	14,7%	15,7%	17,0%	17,3%
Plougerne	9,2%	11,4%	13,3%	12,9%	12,7%	12,7%	11,9%	12,3%	11,8%
Plouvien	12,9%	15,6%	15,5%	15,2%	15,0%	14,8%	14,5%	12,3%	8,9%
Plouzane	-	-	-	-	1,4%	1,6%	2,7%	2,9%	3,5%
<b>Bro Vrest</b>	<b>3,0%</b>	<b>3,2%</b>	<b>3,5%</b>	<b>3,7%</b>	<b>3,9%</b>	<b>4,1%</b>	<b>4,5%</b>	<b>4,8%</b>	<b>5,1%</b>

Sifroù ar c'hentelioù noz dre gumun ha dre live e bro Vrest – Bloavezh-skol 2007/2008

	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5	Hollad
Brest	50	15	20	19	18	<b>122</b>
Gouenoù	5		5	9		<b>19</b>
Gwiler-Leon	19		15			<b>34</b>
Gwipavaz	4	12				<b>16</b>
Kraozon	13	5	8	6		<b>32</b>
Landerne					25	<b>25</b>
Lesneven	11	5	4			<b>20</b>
Lokmaria-Plouzane					8	<b>8</b>
Lokournan	6	10	4	7		<b>27</b>
Loperc'hed	5	3				<b>8</b>
Ospital (An)	7	8	6	5		<b>26</b>
Plouarzhel	7	8	3	6	8	<b>32</b>
Plougastell-Daoulaz	16	11	16			<b>43</b>
Plougerne	10	8	8	12		<b>38</b>
Plougonvelen	18	11	10			<b>39</b>
Plourin-Gwitalmeze		8	11			<b>19</b>
Plouvien	6	10	9			<b>25</b>
Plouzane	12		8		9	<b>29</b>
Plouzeniel					8	<b>8</b>
Releg-Kerhuon (Ar)		3				<b>3</b>
Sant-Pabu	6	6				<b>12</b>
Treglonoù	6	8	8			<b>22</b>
Trelevenez		8			10	<b>18</b>
<b>Bro Vrest</b>	<b>201</b>	<b>139</b>	<b>135</b>	<b>64</b>	<b>86</b>	<b>625</b>

# Levrlennadur

- BAUDEQUIN I., Genver 2008. L'évolution de la population des 21 pays bretons de 1999 à 2005. Octant, Roazhon, 111, 17-21.
- EBSSA (emb.), Gwengolo 2003. L'espace breton. Les dossiers d'Octant, Roazhon, 45, 152 p.
- GREF Breizh (emb.), Mezheven 2007. Tableau de bord emploi-formation par pays - Pays de Brest. Roazhon, 44 p.
- Ministrerezh an Deskadurezh Stad (emb.), Ebrel 2008. Projet de programmes de l'école primaire. Pariz, 55 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2007. Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour – Eil danevell hollek war stad ar brezhoneg. Roazhon, 135 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2004. Diagnostik war stad ar brezhoneg e bro Vrest. Roazhon, 29 p.
- Strollegezh Tiriadel Korsika (emb.), 2006. PRDF « Lingua è cultura corsa » - Plan de développement de l'enseignement de la langue et de la culture corses et de son apprentissage tout au long de la vie. Aiacciu, 35 p.
- UBAPAR, Ebrel 2008. Klasoù hag obererezhioù dizoleñ / Classes et activités de découverte en breton pour les scolaires. Roazhon, 12 p.
- UBAPAR, 2007. Kreizennoù vakañsoù - Hañv 2007 / Séjours enfants et ados en breton - Été 2007. Roazhon, 26 p.

# Mammennoù

- An Oaled
- Arvorig FM
- CFP Brest
- Daoulagad Breizh
- DDEC Penn-ar-Bed
- Departamant Penn-ar-Bed
- Deskadurezh Stad
- Dihun
- Divskouarn
- Div Yezh
- Diwan
- Ensellerezh akademiezh Penn-ar-Bed
- France 3 Ouest
- France Bleu Breizh Izel
- Gwarez ar Mammoù hag ar Vugale<sup>27</sup> (Kuzul-departamant Penn-ar-Bed)
- Radio Kerne
- Rannvro Breizh
- Rektoriezh Roazhon
- Sked
- Skol-veur Breizh-Izel
- Ti ar Vro Bro-Leon
- TV Breizh
- Yezh ha Sevenadur

<sup>27</sup> Protection Maternelle et Infantile e galleg (PMI).